

38330



BUHEZ

MIKAEL AN NOBLETZ

(1577-1652)

MISIONER BREIZ

gand an Aotrou **UGUEN**

Chalon a enor

Persoun Plougastel-Daoulas

fb
922
LEN



BREST

Moulerez ru ar C'hastell, 4

1929



NIHIL OBSTAT :

L. BARS, *canonicus Ecclesiæ cathedralis necnon
et officialis.*

Corisopiti, 1 jan. 1928.

IMPRIMATUR :

P. MESSENGER, *vicarius generalis.*

Corisopiti, 1 jan. 1928.

*Evit senti ouz al lezenn douget gand ar Pab
Urban VIII divarbenn ar burzudou (miraklou), e tis-
kleriomp amañ he deus an Iliz, hag hi hepken, gwir
da ziskleria peur ez eus c'hoarvezet burzudou. Komz
a reomp eus burzudou el levr-man, met d'an Iliz eo
da lavaret ez int gwir vurzudou, ha gant doujans e
tigemerimp barnedigez an Iliz.*

J. UGUEN.



I

Petra oa Breiz e fin ar
c'houezekvet hag e penn
kenta ar zeitekvet kant-
ved ?

Hor bro Vreiz a voe unanet gand ar Frans dre zimezi an dukez Anna gant roue Frans Charles VIII ha gant Louiz XII, goude maro Charlez VIII. Hag eur pennad goude ma varvas Anna, dre eun emgleo sinet e Gwened gant pennoù bras ar vro, er bloaz 1532, Breiz a voe staget ouz ar Frans. Met Fransez kenta, roue Frans, a zisklerie ne vije graet netra nevez nemet gand aotre kannaded Breiz.

Breiz, d'ar mare-ze, a oa pinvidik. Ar peoc'h hag an urz vat a rene er vro.

Met, edoug ar c'houezekvet kantved, e tirollas war ar Frans gwall-euriou spontus, a lakeas reustl ha keflusk e pep lec'h. Neuze eo e tiwanas gouenn fall ar brotestanted, heretiked a nac'he gwirioneziou ar relijion gatolik, a en em gemere ouz an Iliz, hag ar gatoiked a rankas en em zifenn outo, hag e voe epad meur a vloaz brezelioù kriz dre ar vro a-bez.

E Breiz, goulskoude, e voe nebeutoc'h a freuz eget e meur a lec'h all, met hor bro ne voe ket espernet ken nebeut.

Pa varvas roue Frans Herry trede, ar gurunenn a dlíe dont d'an hini a oa tosta d'ezan, rak ne leze ket a vugale. Hag an tosta kar oa roue ar Bearn, Herry a Navar, eur protestant. Ar gatoliked ne felle ket ganto lezel eur protestant da bignat war dron Frans, hag a zavas an Unaniez katolik evit miret na vefe gwelet eur protestant o ren ar Frans.


Neuze, dreist-holl, eo e voe freuz e Breiz. Gouarner Breiz, an duk Merkeur, a oa, sklér eo, eus tu ar gatoliked, enep roue ar Bearn. Ar brotestanted o doa goulennet sikour ar Zaozoun, ar gatoliked sikour ar Spagnoled.

Roue ar Bearn, o welet oa troet ar Frans gand ar relijion gatolik, en em c'hreas katolik, hag e voe neuze anavezet evit roue, hag e kemeras an hano a Herri IV. An duk Merkeur, gouarner Breiz, ne felias ket gantan anaout Herri IV, hag e teuas eun arme eus Frans e Breiz, da gemeret keriou Montroulez ha Kemper, da gas kuit ar Spagnoled eus Kraon (1594).

Epad an nao pe zek vloaz ma padas ar brezel, stad hor bro a voe truezas ha reuzeudik evel ma n'eo ket bet morse, zoken epad an Dispac'h bras. Neuze eo e reas Fontanella e daoliou fall hag e lakeas ar spont e pep lec'h, dreist-holl e bro Gerne. Laeronsi, lazerez, tan-gwall, pep seurd torfejou mezus, setu petra dre-mene bemdez. « Ar re a zeuy war hol lerc'h, eme eur skrivagner eus an amzer-ze, ne gredint ket ac'hanomp hag a lavaro n'eo nemet mojennou, sorc'hennou, ar pez a skrivomp. »

Ar vro a voe rivinet, dismantret. Da heul an naonegez e teuas klenvejou spegus evel ar vosenn; hag e

varvas eun niver bras a dud. Kavet e veze korfou maro war an hentchou, er parkeier, er c'hoajou. Amzer vrac evid ar bleizi, stank c'hoaz neuze e Breiz. Ar re-man en em lakeas da zebri an dud, hag a zeuas da veza ken hardiz, ma tostaent beteg an tiez ha zoken beteg ar c'heriou, da glask tud da lonka.



CHAPEL SANT GLAODA e Kerodern skeudennet gant Y. Floc'h.
Ar groaz a zo en he c'hichen a zo bet savet er bloaz 1572
gant tad Mikael an Nobletz.

E 1598 e voe fin d'ar brezel. An duk Merkeur a blegas da roue Frans Herri IV. Heman a reas eun dro-vale e Breiz, hag e voe laketaz urz adarre en traou. Fontanella, paket, a voe koundaonet d'eur maro kriz e Paris, e 1602.

Goude an dismantr, oa labour d'ober evid adsevel ar vro. An urz vat hag ar peoc'h diouallet gant roue Frans a vefe talvoudus evit-se, met n'oa ket a-walc'h

goulskoude. Rak stad an eneoù a oa truezus ive. An dud bet oc'h en em ganna, an dudjentil distro d'o manerioù goude meur a vloaz brezel, a jome c'hoaz kriz ha divergant. Al labourerien douar a oa dizesk war ar relijion, rak epad ar freuz oant bet alies dilezet, ha tud lezet hep katekiz, hep kelennadurez kristen, a zeu buan da ankounac'haat o deverioù e kenver Doue hag an nesa.

Ezomm a oa eta eus beleien santel evit lakaat ar vuhez kristen da vleunia a-nevez e Breiz.

Hogen ar veleien, e meur a lec'h, n'oant ket eus ar re wella. Meur a hini, re droet gant madou pe blijadurezioù ar bed, a oa lezirek da labourat evit gloar Doue ha silvidigez an eneoù. D'ar veleien eo bet lavaret en Aviel: « C'houi eo holenn an douar. Ma 'z eo fall an holenn, gant petra e vo gallet salla? »

Daou rumm beleien a oa d'ar mare-ze e Breiz. Bez ez oa doktored, bet war ar studi e skolioù bras, e Paris, er Sorbon, desket war ar skianchou sakr, war ar galleg, war al latin, met ne anavezent ket ar brezoneg, ha ne dalvezent netra er parrezioù war ar maez. Beleien all, savet e Breiz, a veze desket buan d'ezo ar pezh a rankent da anaout, er presbitalioù gant beleien all, rak n'oa ket stank d'ar mare-ze ar skoia-chou, ha tiez evid ar gloareged n'oa ket anezo c'hoaz.

Breman ez eus skolachou stank, ez eus e peb eskopti eur c'hloerdi bikan, eur c'hloerdi bras, hag enno ar vugale, an dud yaouank a vez desket d'ezo, ouspenn skianchou ar bed, en em zizober eus o flegoù fall. Pell e pad ar studi, met ret eo evit prepari beleien desket ha santel, hag ar Pabed ne ehanont da c'houlenn digand an eskibien poania da gaout beleien eus an dibab.

Konsil santel Trent a roas urz da zevel eur c'hloerdi e peb eskopti, ha pa voe sentet ouz an urz-ze, e teuas buan gwellaenn en traou.

Betek neuze e voe re alies beleien n'oant ket gouest d'ober labour mat er garg fiziet enno.

En amzer ma teuas er bed Mikael an Nobletz, ez oa beleien gouiziek ha santel, met, evel ma welimp, ez oa ive hiniennou lezirek, ne zeskent ket o c'hredennoù d'ar vugale na d'an dud vras, hag e meura barrez an dud a oa kristenien laosk, a zente ouz o youloù fall. An Tad Maner, deuet warlerc'h Mikael an Nobletz, a lavar e kavas tud war ar maez hag a veve evel chatal.

Doue a zellaz gant truez ouz hor bro hag a zigasas d'ezhi eur beleg santel, eur misioner kalonek da rei da glevet e pep lec'h kelennadurez an Aviel ha da lakat adarre ar gizioù kristen da c'harizienna e Breiz. Ar beleg-ze eo Mikael an Nobletz.


II

Mikael an Nobletz

Dont a reas er bed d'an 29 a viz gwengolo 1577, deiz gouel sant Mikael Arc'hael, e bro Leon, e parrez Plougerne. E dad, Herve, a oa eun denjentil, o chom e maner Kerodern; e vamm oa Franseza a Lesguern, eus Sant Fregant. An aotrou Herve an Nobletz, a oa noter, unan eus pevar noter ar roue e Leon. Beva a rae, heb ober trouz na dispignou fall, o sevel, gwella ma c'helle, e vugale, a voe niverus: pemp paotr ha c'houec'h merc'h. Mikael oa ar pevare eus ar familh. Fiziet e voe eur pennad en eur vagerez, eur vaouez santel, a boanias, evel e vamm, da lakat karantez Doue da ziwana abred en e galon.

E kichen maner Kerodern ez oa eur chapel savet en enor da zant Glaoda, met eul lenn a oa etre ar chapel hag an ti, hag e veze ranket bale dre eur chao-ser. Mikael a gare mont da bedi d'ar chapel. N'oa c'hoaz nemet pevar bloaz, hag e tiskoueze kaout plijadur vras o pedi Doue. « Me zo bet e ti Doue », emezan, pa veze distro eus ar chapel. E vamm he doa aon na gouesfe el lenn hag a zifenne outan mont d'ar chapel. Mikael, daoust da ze, a gendalc'he da vont, hag eur wech, goude beza bet gourdrouzet, e lavaras oa bet eun itroun gaer krog en e zourn o kas anezan d'ar chapel hag o teski d'ezan pedi Doue. Eun deiz

zoken, goude beza bet klozet en eur gambr, alc'houezet an nor warnan, e voe kavet er chapel, daoulinet dirag an aoter, henvel ouz eun eal eus ar baradoz. E vamm, souezet, a c'houlenmas digantan penos en doa gellet digeri dor ar gambr. « An itroun gaer, emezan, a zo deuet d'am c'herc'hat. » — Piou eo an itroun-ze? » — « Ne ouzoun ket, met kaer meurbet eo. »




CHAPEL AR C'HROUANEG (1) e Plougerne,
skeudennet gant Yv. Floc'h.

Kredi a c'heller eo ar Werc'hez Vari he-unan en em ziskouezas evelse d'an hini a voe difennet ganti epad e vuhez penn da benn.

(1) Ar chapel treuz a weler aman he frenecher en tu kleiz d'an daolenn oa chapel Aotrone Kerodern; war ar gwer a liou e kaved c'hoaz, breman tri bloaz, skeudenn tad koz ha mamm goz Mikael an Nobletz gand o skouejou, graet tost da hevar c'hant vloaz a oa; gweraerien berwelet o zorras siouaz! Gellet da zont anezo a zo kaset d'an A. Waquet a dle o renka e mirdi Kemper.

D'an oad a zeiz vloaz, Mikael a voe kaset da Lesvern, e Sant-Fregant, da di e dad koz. Eno ez oa eur beleg, an aotrou Cozic, oc'h ober skol da vugale ar maner. Mikael a zeskas lenn ha skriva e Lesvern.

Goude eur bloaz pe zaou, e fistroas da Blougerne, hag e dad a fizias anezan e beleien desket ha santel, an daou vreur Gourvennec, a rae skol e chapel sant



MANER LEZWERN, e Sant Fregan,
gand Yv. Floc'h.

Anton, war ribl an Aber-Wrac'h. Deski mat a rae, hag abenn eun nebeut amzer, d'an oad a drizek vloaz, e voe kavet gouest da vont da eur skol uheloc'h, e Plouzeniel, a oa ive en he fenn eur beleg, an aotrou Guen. Evit doare, tud Plouzeniel n'oant ket d'ar mare-ze kristenien vat evel hirio. Mikael a gare mont da hedi e keriadenn Kerventa, e kichen eur feunteun, en eur foenneg. Eun deiz m'edo eno stouet o pedi, e teuas merc'hed da voac'hil dilhad er poull-kanna, tost

d'ar feunteun. Goulenn a rajont digantan petra rae eno, hag evel ne responte ket, e kasjont anezan kuit a doliou golvêz.

Ar wazed ive a reas goap outan meur a wech, pa glaske ober d'ezo katekiz er vered goude an oferenn-bred. C'hoarzin a raent d'ezan ha skei warnan a-wechou.

E Plouzeniel eo e roas Mikael an Nebletz e galon da Zoue evit mat. N'oa c'hoaz nemet pevarzek vloaz, hag e oa entanet gand ar garantez evit Jesus, e Zalver. Lakat a reas en e benn bale war roudou e Vestr, labourat, gouzanv, beza paour evel dan, ober fae war ar bed evel dan. Mat da hedi, d'ober pinijenn, e veve unanet gand e Zoue, en em zioualle diouz ar pec'hed, ha ma teue e youlou fall da c'houeza en e galon, ec'h en em dole etouez an drez hag ar spern, hag eur wech e c'hourvezas epad teir eur etouez an erc'h.

Evelse e lakeas e gorf da blega d'ar spered hag e talc'has e galon glan ha kaer. Ar bedenn hag ar binijenn eo hent ar zantelez. Mikael, d'ezan da veza c'hoaz yaouank, a gerze a gammejou bras dre hent ar zantelez.

III

Er skol e Bourdel, Ajen

Skoliou a-walc'h a oa e Breiz; kalz beleien, er par reziou, a roe kelennadurez d'ar vugale, d'ar re a c'hoantae mont da veleien, ha da re all ive. Met skoliou bihan n'oant ken. Evit kaout deskadurez vras hag uhel, e veze ranket mont pell, da Baris pe d'ar c'heriou a oa enno Skoliou-Meur.

Mikael, wardro an oad a 18 vloaz, a voe kaset gant e vreudeur da Vourdel. Dre vor n'oa ket dies mont eus Breiz betek eno.

Neuze, evel hirio, oa risklus buhez ar c'heriou evid an dud yaouank. Skolaerien Breiz, evel re ar broiou all, a veve a-unan, a rae evel eun arme, hag o doa eur Rener en o fenn. Ar Rener-ze, n'e ket labour na tregas a vanke d'ezan. Bez en doa da voda e genvroiz, d'o hentcha, d'o difenn alies, rak c'hoari fall a zave alies etre ar vandennou skolaerien. Breur hena Mikael, Glaoda, a voe eur pennad Rener ar Vretoned, ha Mikael a rankas deski c'hoari gand ar c'hleze, evit sikour e vreur pa vije ezomm. Buan, evit doare, e teuas da veza ampart. Edo war an hent d'en em goll, ma ne vije ket bet sikouret gand e Vamm eus an Nenv. Eun deiz m'edo bandennou skolaerien oc'h en em ganna, e klevas mouez e vreur Glaoda o c'houlenn sikour. Mikael a dennas e gleze hag edo o vont da skei, pa zeuas eun Itroun gaer da gregi en e

zourn ha da zistrei an taol. Anaout a reas an itroun e gasas gwechall da japel Kerodern, hag, hep taol kleze ebet, e kavas an tu da lakat ar peoc'h etouez ar skolaerien.

Nebent amzer goude, e voe hanvet Rener ar Vretoned, e lec'h e vreur, hag e ranke darempredi ar pennou fall, an trabaserien, o difenn zoken p'o deze graet gaou ouz unan bennak. Eun deiz m'edo o vont d'eur vodadeg Vretoned, e klevas eur vouez o lavaret d'ezan: « Chom a zav! » Tenna a reas e gleze evid en em zifenn, met, e lec'h eun enebour, an Itroun eo en em ziskouezas d'ezan, skedus meurbet: « Sent, emezi, ouz Doue, kerz warlerc'h va Mab, bez ato izel a galon, eün, paour, gra fae war ar bed. » En droman Mikael a voe trec'het evit mat. Stoui a reas dirag ar Werc'hez, kinnig a reas d'ezi e gleze, hag e touas beza d'ezi hiviziken ha stourm hepken dindan baniel he Mab.

Met penos derc'hel d'e c'her o chom e Bourdel? Klevet a reas o doa ar Jesuisted, eun Urz nevez a relijiuzed, eur skol vras e kear Ajen, hag ez eas da Ajen. Pevar bloaz e chomas eno (1597-1602, hag an amzer-ze a voe, emezan, an amzer gaera eus e vuhez.

Labourat a reas da binvidikaat e spered hag e teuas da veza desket bras war al latin, ar gregaj hag an holl skianchou.

Pedi mat a rae ive. Goulenn a reas beza digemeret e Breuriez ar Werc'hez savet e skol ar Jesuisted. Ne zaremprede ket an dud yaouank eus e oad, na zoken e vreudeur deuet ive d'ar skol da Ajen. En em ziskouez a rae laouen, mat e kenver an holl, met mall en deze da vont d'e gambr, eur gambr feurmet d'ezan gand eur c'hristen hag eur gristenez vat. Er gambr-ze e laboure hag e pede hag e rae pinijenn.

Ne guitae e gambr nemed evit mont d'ar skol pe evid ober vad d'ar re all. Karantezus oa evid e nesa, hag o'veva e-unan gant nebeut a dra, o lezel a gostez ar gwin hag ar c'hig, o yun bemdez kouls lavaret, e c'helle espern eur gwenneg bennak hag ober aluzenn. Da zul ha d'ar goueliou e pede da leina skolaerien ezommek, hag e kave tro evelse da rei d'ezo kenteliou mat. Meur a hini a c'hounezas da Zoue.

Ober a reas anaoudegez e Ajen gand eur c'hen-vroad eus Plouyann, Per Kintin. Heman, goude beza bet soudard en e yaouankiz, en doa troet kein d'ar bed hag en em roet da Zoue. Dont a reas da veza divezatoc'h leañ eus Urz sant Dominik. Troet oa ouz Doue araok ma tigouezas gant Mikael, met kenteliou heman hag e skoueriou a reas kalz vad d'ezan.

Divezatoc'h ec'h en em gavo war hent Mikael, hag e labourint o daou a-unan eur pennad da brezeg an Aviel, evel m'o doa pedet a-unan e Ajen, ha graet katekiz d'an dud dizesk ha d'ar re a oa bet gounezet gand ar brotestanted, stank endro da Ajen.

Daoust ma veve eur vuhez santel meurbet, Mikael ne voe ket espernet gand an teodou fall. O veza ma rae dishenvel diouz ar skolaerien all, e veze lavaret pep seurd geier diwar e benn. Gouzanv a reas gant nerz-kalon ar poaniou-ze; evelato e kave kalet beza tamallet e gaou. Eun deiz m'edo daoulinet en e gambr, o ouela hag o pedi, ar Werc'hez en em ziskouezas d'ezan. « Michelig, Michelig, emezi, na ouelit ket, va Mab ho tiwallo, ha me ho sikouro. » (1) Hag e kin-nigas d'ezan teir gurunenn skedus: kurunenn ar werc'hded, kurunenn an Doktored ha kurunenn ar re a ra fae war ar bed.

(1) E brezoneg eo e komze atao ar Werc'hez ouz Mikael an Nobletz.

Mikael a voe frealzet ha kennerzet.

Kement-mañ a dremenas er penn kenta eus ar bloaz 1600. Neuze eo e tisklerias trei kein d'ar bed, hag en e baperiou eo bet kavet ar pezh a skrivas eneb ar bed hag e ardou. Ne lakeomp nemed eun diverra eus e skrid: « Kenavo, bed; me a ray brezel d'it heb ehan, p'e gwir ec'h eus graet brezel d'am Doue hag ez out mestr enebourien Doue. Me dro kein d'it, mil-liget ma z'out. Diskleria ran, dirak Jezuz Krist, va Zalver, a zo bet trec'h d'it, dirag e Vamm, ar Werc'hez Vari, dirag an Elez hag an holl Zent eus ar Baradoz, e fell d'in hiviziken, hed va buhez, terri da liammou, beva dishenvel diouz da lavariou. O va Zalver, Doue en em c'hraet den, me a vo paour evel-doc'h; evel-doc'h, me a garo ar groaz, an dismegans. Roit d'in ar c'hras da zerc'hel d'am menoziou beteg ar maro. »

Evel sant Fransez a Asiz gwechall, Mikael a gemere evid e lod ar baourentez hag ar groaz.

Edo gand e 23 vloaz. Ne ouie ket c'hoaz peséurd stad a vuhez a gemerfe, met dizale e welas ervat e tlie beza beleg. Sonjal a reas mont e Urz ar Jesuisted, e vistri-skol, hag ive e Urz sant Fransez.

Da c'hedal rei e c'her diveza, ec'h en em lakeas a zevri da zeski an theoloji, ar skianchou sakr e Bourdel adarre. Eno e klevas kelennadurez Tadou Jesuisted desket bras, hag e teuas, epad ar pevar bloaz ma chomas ganto (1602-1606), da veza e-unan desket meurbet. Evit doare, ec'h anaveze ar Skritur Sakr dindan envor, hag e gregaj zoken.

Met ouspenn deski, e kendalc'he da bedi ha d'ober pinijenn, rak, evel ma lavare, an deskadurez heb ar furnez ne dalv netra. En em skourjeza a rae bemdez, ne zebre nemed ar pezh a oa ret evit chom beo, kous-

ket a rae war ar c'halet. Mont a rae d'an hospitaliou, d'ar prizoniou, ha gant e vignon Per Kintin, deuet ive da Vourdel, ez ae d'ober katekiz d'an dud war ar maez, evel m'o doa graet e Ajen.

Goude ar pevar bloaz tremenet e Bourdel o studia ar skianchou hag ar Skritur Sakr, Mikael en dije gellet ober evel ma rae re all, goulenn digand eun eskob benmak rei d'ezan an urzjou santel. An eskob en dije graet enklask war e vuhez, e zeskadurez, ha m'en dije e gavet preparet mat, en defe roet d'ezan sakramant an Urz hag eur garg en e eskopti, eur garg stag outi eun tamm leve, peadra da veva.

Evelse e veze graet en amzer-ze. N'oa ket a gloerdi. An dud yaouank a c'hoantae beza beleien a veze kennet pe gant beleien all, er parrezioù, pe e skolioù bras Paris, Bourdel, pe re all.

Ar c'hiz-ze n'oa ket eus ar re wella, Mikael an Nobletz a vevas evel eur zant e Bourdel hag e Ajen. Met an holl ne raent ket evel dan. Hag eun tamm mat eo gwelloc'h ar c'hiz hirio da zevel beleien, oc'h ober d'ezo tremen dre ar c'hloerdi bihan hag ar c'hloerdi bras. Evelse e vezont anavezet mat, hag ouspenn-ze, o veva pell diouz trouz ar bed, eo aesoc'h d'ezo beza santel, tec'het diouz pep droug.

IV

Mikael an Nobletz beleget

Peure'hraet gantan e studi, desket bras war an theoloji, Mikael an Nobletz, a-raok distrei da Vreiz, a reas eur pelerinaj d'eur chapel d'ar Werc'hez e bro Bourdel. Da c'houde, e kreskas c'hoaz e binijennou. Epad c'houec'h miz e yunas, e chomas hep dougenn eur c'hrez, hag e tremenas e zervezioù o pedi hag o pleustri war ar velegiaj.

E dud, laouen o welet anezan ken desket, e alie da c'houlenn buan beza beleget, rak sonjal a raent e rafé enor d'ezo, e vije kinniget d'ezan ar garg dleet d'e zeskadurez.

Met hen a responte d'e gerent: « Karg ar veleien a zo uhelloc'h eget hini eur roue pe eun impalaer. N'eo ket a-walc'h kaout an oad dereat, ma n'er ket santel a-walc'h. Risklus eo mont er garg-ze hep beza bet preparet mat. Ar zent a grene o reseo an Urzjou sakr. »

Hag e c'houlenne digand e dad eur pennadig amzer c'hoaz.

Er c'houls-ze, an aotrou Neuville, eskob Leon, a c'halvas da Gastell tud da zisput war ar skianchou sakr, hag a c'hoanteas gwelet ive Mikael o tont, rak

klevet en doa hano eus e zeskadurez vras. Plijadur en devoe oc'h e welet hag oc'h e glevet, ha muioc'h c'hoaz eget e zeskadurez e prizas e izelded a galon, e zantelez. Diskleria a reas dirag an holl e rofe d'ezan eur garg uhel en e eskopti, kerkent ha ma vefe tro.

Mikael ne voe ket touellet, hag a ziredas buan d'ar gear da veva eur vuhez kuzet. Met e dad, laouen holl, a reas d'ezan eur zoudanenn gaer meurbet, henvel ouz an hini a zouge an dud a Iliz a renk uhel. Mikael a gavas an tu d'en em zizober buan eus ar zoudanenn-ze, re vrao evitan, ha d'he rei d'eur beleg paour eus ar vro. — An tad, pa glevas, a yeas e kounnar, a dennas ar zoudanenn digand ar beleg paour: « N'e ket d'eoc'h, met d'am mab, eo em eus graet ar zoudanenn-ze. He c'hasit d'ezan. »

Mikael ne fellas ket gantan he c'hemeret, hag a reas rebechou d'e dad, gant doujans, o veza m'en doa gwall-gaset eur beleg hag en em lakaet war var da veza eskummuget.

An tad a zavas keuz gantan hag a gasas ar zoudanenn d'ar beleg paour.

Evelato e tislaje d'ezan doare beva e vab. Pedi a reas anezan da c'houlenn eur garg uhel en eskopti, eur garg a oa vak... Ret eo d'it, emezan, kaout eur garg bennak evit beva, rak diganen-me n'e pezo ket kalz a beadra. N'out ket ar c'hosa, breudeur ha c'hoarezed e peus da ranna ganez; da lod ne vezo ket pounner. P'e gwir out deuet mat gand an aotrou 'n eskob, e pezo da c'houlenn. »

Met ar mab a respountas en doa aon o samma e ziouskoaz gand eur garg re uhel. « Penaos, eme an tad, goude ar pezh am eus graet evidout, goude beza dispignet ouspenn daou vil skoed evit da skolia,

evelse eo oun paet ganez? Ne fell ket d'it kemeret eur garg a rofe d'it peadra da veva hag a dolfe enor var da dud? »



Mikael a respountas e vije gwelloc'h gantan diwall al loened eget beza e penn eur manati pe eur barrez. « Mat, eme an tad, diwall a ri al loened evel ma

c'houlennez. » Hag epad eur pennad Mikael a voe karget da ziwall ar chatal. Erfin e dad e lakeas er meaz eus e di.

Mikael en em dennas e ti e vagerez. Houman a rannas gantan an tamm bara he doa, ha Mikael, an doktor, a vevas eno evel an distera eus an dud. Tremmen a rae e amzer o lenn ar Skritur Sakr, oc'h ober katekiz d'ar vugale, o c'houlenn aluzenn evit peorien ar barrez. Da zul e veze gwelet etouez an dud dister e iliz Plougerne. E dud o doa mez gantan. Ar re all o doa truez outan, ha meur a hini a lavare oa bet direizet e benn gand ar studi, en doa labourer re ha kollet evelse e skiant vat.

Goude beza tremenet evelse eur c'houec'h miz ben-nak, e c'hoanteas mont da Bariz, da welet doktored skol vrudet ar Sorbon, gand ar fizians da gaout war e hent eun den fur ha santel gouest d'e alia ha da ziskouez d'ezan an hent a dlle kemeret.

E dad a roas d'ezan peadra da vont da Bariz, gand ar fizians e c'houlenne beza beleget e Paris hag en defe, da c'houde, eur garg e eskopti Leon.

Mikael a yeas da glevet doktored ar Sorbon, met desket en doa e Bourdel hag e Ajen kement a veze displeget er Sorbon, ha ne reas nemet en em lakat da studia yez an Hebreed (ar Juzevien), evit gellout lenn ar Skritur Sakr er yez-ze.

Ar pezh a gavas a wella e Paris a voe eur sturier, an Tad Kotton, jesuist, kovesour ar roue, brudet dre e brezegennou hag e zantelezh. Mikael a zigoras d'ezan e ene, a lavaras petra c'hoantae: labourat evit gloar Doue ha silvidigez an eneou o prezeg e Breiz, hep klask na karg uhel nag enoriou.

An Tad Kotton e alias da zerc'hel mat d'ar c'hoant santel-ze ha da c'houlenn an urziou sakr hep dale pelloc'h.

Mikael a zentas, en em roas d'ar bedenn, hag e voe beleget e Paris, d'an oad a dregont vloaz.

Dont a reas da Blougerne da lavaret e oferenn genta. Evit doare, edo ar c'hiz, en amzer-ze, d'ober leinou bras, pa veze eun oferenn nevez. Pedet e veze ar gerent, ar vignoned, an amezeien, tri c'hant, pevar c'hant den a-wechou, hag e veze pep seurt c'hoariou goude lein.

Mikael, evit enebi ouz ar c'hiz fall-ze, a lavaras e oferenn dirag e gerent hepken, ha ne voe, da c'houde, na lein vras na c'hoariou.

V

Mikael oc'h ober pinijenn e Tremenac'h




CHAPEL SANT MIKAEL e Plouguerne, (1)
gant Yv. Floc'h.

Eur wech beleget, penos e tremeno e vuhez? N'e ket kargou uhel eo a glasko. Pell zo en deus lakeet en e benn poania gand e genvroiz da zeski d'ezo o c'hatekiz, d'o farea eus ar gizioù fall a zo skignet en o zouez, d'o zrei ouz Doue, evit ma kaso Breiz eleiz a eneoù d'ar Baradoz. Met evit gouñit an eneoù, eo ret beza santel meurbet. Hor Zalver, a-raok en em lakat da brezeg an Aviel, a dremenas 40 dervez er

(1) Ar chapel-man a zo savet eun tregont metr bennak diouz an ti e chomas Mikel an Nobletz ennan endra m'edo oc'h ober taolennou ar Mision.

gouelec'h, o yun, o pedi, oc'h ober pinijenn. Mikael a c'hoantae ive prepari e ene, hag ec'h en em dennas en eul lec'h gouez, e kichen ar mor bras, e Tremenac'h. Lakat a reas sevel eun tammig ti goloet gant plouz, hag eno e tremenas tost da eur bloaz, o pedi hag oc'h ober pinijenn. Kousket a rae war an douar noaz, eur maen dindan e benn, dougenn a rae eur gouriz reun ha tamm lienaj ebet. En em skourjeza



TY MIKAEL AN NOBLETZ, (1) skeudennet
gant Yv. Floc'h.

a rae betek lakat ar gwad da redet. Ne zebre nemet eur wech bemdez, hag eun tamm yod heiz hep laez nag amann nag holenn. Ar yod-ze a veze digaset d'ezan en eur skudell gand eur vaouez eus a gichen, ha servichet dre eun toull prenestr a oa war e lochenn. Ne

(1) Ti savet war lec'h ha stumm an ti bihan ma tremenas Mikel an Nobletz eur bloaz ennan e Tremenac'h.

eve nemet dour, ha c'hoaz eun nebeudig hepken. Ober a reas droug d'e stomog, ha betek fin e vuhez en devoe da c'houde droug stomog. « Met, emezan, m'am eus graet droug d'am stomog, d'am ene am eus graet vad. »

Ne gwitae e lochenn nemet evit mont da lavaret an oferenn dek munut vale ac'hano, da iliz Tremennac'h, iliz hag a zo bet goloet gand an trez, er bloaz 1720; ne gomze gant den, nemet pa z'ae da govez. Pedi, prederia war gwirioneziou ar relijion, studia ar skiantchou sakr, setu petra rae e doug an deiz. Neuze ive eo e sonjas en doare d'en em gerneret evit kelenn ar bobl, dre skeudennou, taolennou, parabolennoù.

Eur pennadig a-raok m'oa fin d'e vloaz, e kwiteas Tremennac'h, rak eur vaouez teodet fall en em lakeas da lavaret pep seurt traou diwar e benn ha da zevel an dud enep d'ezan.

Diwezatac'h e tiredo kalz pelerined da Dremennac'h, d'al lec'h m'oa bet ennan Mikael oc'h ober pinijenn, ha kalz grasou a vo roet eno d'ezo.

VI

Mikael en em laka da brezeg e Plougerne

Goude beza graet kement a binijenn, pedet kement an Aotrou Doue, Mikael, entanet e spered hag e galon, en em lakeas da brezeg an Aviel e pep lec'h, en iliz, war an hentchou. Mont a rae dre barrez Plougerne da glask an dud en tiez, er parkeier; pa veze foar, marc'had, ec'h en em lakae war an hentchou a dremene dreizo an dud, hag e komze d'ezo eus Doue, ar relijion, silvidigez an ene. Da zul e veze gwelet a-wechou er parrezioù tro war dro da Blougerne, o prezeg, oc'h ober katekiz d'ar re vras ha d'ar re vilan, o kovez an dud. Gourdrourz a rae kalet an dizursioù hag ar pec'hejou m'en em roe an dud d'ezo, hag e tiskoueze d'an holl hent ar Baradoz.

Met, evel m'eo bet lavaret, den ebet ne c'hell beza profed en e vro. Mikael a voe kemeret gand eur c'halz eus e genvroiz evid eun diskiant, eur beleg foll. Evelato ar beorien hag ar re glanv sikouret ha frealzet gantan e gleve gant plijadur hag a zente ouz e gomzou.

E gerent o doa ato poan ha mez o welet penaos e veve o mab. Tud a renk uhel evel ma z'oant, gwelet o mab o tiskenn ken izel-ze! Pebez rann-galon evito! Eur mab ken desket, en dije graet d'ezo, ma karfe, kement a enor, setu ma ra fae war madou hag enorioù ar bed!

Pa veze e Kerodern, goude beza lavaret e oferenn e chapel, sant Glaoda, Mikael, distro d'e di, a gemere eun tamm bara du, e zrailhe en eur skudell, hag a dole warnan eur banne zoubenn, soubenn mevelien an ti, ha setu peseurt prejou dister eo a rae.

E dad, dallet gant ar gounnar, a voe meur a wech warnez skei warnan. Ar vamm a glaske difenn he mab; evelato n'oa ket evit kaout mat ar vuhez a rene. E vreudeur hag e c'hoarezed, pa gemere Mikael e zac'h evit mont d'ar parrezioù tosta, a lenve hag a lavare: « Siouaz! Ar barr en deus kemeret adarre hor breur. » Eur barrad klenved, eur barrad follentez, setu petra groge en o breur, war a gredent.

Abenn ar fin an tad ne c'hellas mui derc'hel war e gounnar, rak ne gleve bemdez nemet pep seurt traou diwarbenn Mikael, hag e lakeas anezan er meaz eus e di, en eur lavaret: « Re bell zo e c'houzanvan ac'hanoù. Mervel a ran gand ar vez. Kuita va zi, ha kerz d'al lec'h ma kari. »

VII

Mikael an Nobletz a gendalc'h da labourat e Plougerne

Kaset kuit eus ar gêr gand e dad, Mikael en em lakeas etre daouarn Doue, evel ma reas gwechall sant Fransez a Asiz, a c'hoarvezas gantan ive hevelep tra. « O va Doue, a lavaras Mikael, da belec'h ez in breman nemet davedoc'h? C'houi eo Tad ar beorien hag an emzivad. Va c'hemerit, va Doue, evit ho pugel. Roit d'in ar c'hras da veza ivez ho pugel. Roit d'in ar c'hras da veza eur bugel sentus ha leun a fizians ennoc'h. Va hentchit: me a raio ar pezh a c'houlennot diganen. Ho pezet truez ouz va zad ha va mamm, ha n'o c'hastizit ket evid ar pezh o deus graet enep d'in. »

E lec'h mont pell eus Plougerne, Mikael a jom en e barrez, en deus c'hoant da c'houñt holl da Zoue. E ti e vagerez vat e kavo adarre dor-zigor. Ac'hano ez aio dre ar barrez d'ober katekiz ha da brezeg.

Eun dudi oa e welet etouez ar vugale, o kelenn anezo, o teski d'ezo o fedennou, ar *Bater, Ave, Credo, Confiteor*, gourc'hemennou Doue hag an Iliz. Habask, madelezes, e c'houneze buan ar vugale, hag ar re-man a rae ar pezh a veze goulennet diganto.

Met, ma 'z oa habask gand ar vugale, pa veze o prezeg d'ar re vras e komze gant nerz ha dispons eneb ar pec'hejou, ar gizioù fall. Gand ar vugale oa evel eun oan, a skriv an Tad Maner, met yudal a rae evel eul leon war bec'hejou ha siou fall ar re vras, al laeronsi, ar vesventi, an hudurnez, ar festou, dansou, c'hoariou noz. Eur c'hiz fall a oa war ar meaz en e amzer: ar c'hiz da vont da veilha, epad ar goanv, gwech en eun ti, gwech en eun ti all. Var zigarez neza, ober stamm, ar merc'hed en em vode evelse, en eun hevelep lec'h. Met an dud yaouank, potred, plac'hed, a gave tro evelse da vont da c'haloupat noz, hag e veze dizursiou. Mikael a skoas kalet war ar gizioù fall-ze, ha mat a reas, rak gant hevelep gizioù ne vez ket pell eur barrez evit beza kollet.

Skler eo, e brezegennou ne blijent ket d'an oll. Ar wirionez a zo kasaüs. An dud fall eus ar barrez a glaskas meur a wech en em gaout gantan war an hentchou ma tremene dreizo, evit skei gantan. Eun dijentil eus e gerent a c'hoanteas, betek teir gwech, e laza gand e gleze, met ne c'hellas ket e baka. Eun deiz, en iliz, edo o vont da denna varnan eun taol pistolenn. Mikael, e lec'h tec'het, en em lakeas war e zaoulin, a zispakas e vruched. Dirag eun hevelep nerz-kalon, an dijentil a jomas souezet ha ne dennas ket.

Meur a hini eus beleien ar barrez en em zavas ive en e eneb hag e damallas dirak vikel vras Kastell, an aotrou Gat. Mikael n'en doa gwenneg ebet evit mont betek Kastell, hag a rankas goulenn digant fabrik ar barrez presta d'ezan eiz real.

Ar vikel vras a welas buan oa bet tamallet Mikael dre warizi, hag e lec'h e goundaoni, e bedas da veilha var doare beva e damallerien. Mikael a reas evel m'oa

goulennet digantan, nann dre gasoni, met evit mad an eneoù hag enor an Iliz.

Met ar re a voe diskleriet gantan en em unanas etrezo hag en em glemmas en dro-man ouz an aotrou 'n eskob e-unan. An trec'h o defe bet, ma ne vije ket bet difennet Mikael gand an aotrou Louet, vikel vras, en doa anavezet p'edo var ar studi.

VIII

**Mikael an Nobletz a lak e dad, e vamm,
hag e c'hoarezed da gerzout dre hent ar zantelez**

E dad a jome ato kounnaret outan. Poan a rae d'ezan e welet o ren eur vuhez paour ha dister, gwis-ket fall, bevet fall, hep karg ebet, goude beza bet keit amzer er skol. Eun deiz zoken, dallet gand ar gounnar, ez eas war e lerc'h gand eur vaz, da glask lopa warnan. Met Mikael a c'hellas tec'het kuit en eur redet, hag a viras evelse ouz e dad d'ober an taol fall a oa en e benn.

Antronoz, eun deiz sul, Mikael a bignas er gador, hag a reas eur brezegenn gaer war deveriou an tadou hag ar mammou ha deveriou ar vugale. E dad, an aotrou a Gerodern, a oa en iliz, hag o tont d'ar gêr, e lavaras d'e wreg: « Mat! Eur prezeger dispar eo hor mab evelato. E zoare beva a zisplij d'in, met er gador e lavar traou kaer. Hent an Nenv a ziskouez. »

Ar prezeger en doa gwelet e tiskenne e gomzou e kalon e dad. Bemdez e pede evitan, ha leun a fizians e Doue, ez eas d'e gaout da Gerodern. Digemeret mat e voe. An tad n'oa mui kounnaret, komz a reas brao ouz e vab. Heman neuze a gemer an hardisegez da rei eur gentel d'e dad, evid e c'hounit da Zoue. Eun dournadig pri a lak en eur skudell ha dour da c'houde. « Meskit an dour hag ar pri », emezan d'e dad. P'en devoe mesket, e lavaras d'ezan: « Ha gwe-

let a rit ho skeudenn en dour-ze? » — « Ne c'hellan ket gwelet, rak re denval eo. » — « Mat, eme Vikael, hoc'h ene a zo evelse ive. Ne c'hellit ket en em anaout ennan, o veza m'eo reustlet ha tenvalaet gand ar garantez direiz evit madou an douar-man. »

Gras Doue a ziskennas e kalon an tad, a lavaras kerkent: « Petra am eus d'ober? Lavarit d'in. » Mikael a roas d'ezan eur reolenn a vuhez. An tad a zentas ouz aliou fur e vab. A-nebeudou e tistagas e galon diouz traou ar bed-man, hag ec'h en em droas a-zevri ouz Doue. Ober a reas aluzennou kaer, mat e voe da bedi, lavaret a rae bemdez ofiz ar Werc'hez, pleustri a rae war gwirioneziou ar relijion, hag epad ar pemp bloaz ma chomas c'hoaz war an douar, e voe eur c'hristen eus ar re wella.

Ar vamm a voe ive gounezet. Ato oa bet eur gristenez vat, met ne gomprenne ket a-walc'h petra eo talvoudegez an eneou, ne gomprenne ket mat en dije he mab troet kein da vadou hag enoriou ar bed evit gounit eneou da Zoue. Mikael a reas d'ezi prezegen-nou e chapel Kerodern, hag ar vamm a zavas buan beteg an uhela santelez. Beva a reas er bed evel al leanezed en o leandi. Tri bloaz goude he fried e voe skoet gand ar maro, hag he devoe ar joa da welet he mab en he c'hichen evid he frepari da vont dirak Doue.

Ouspenn e dad hag e vamm, e c'hounezas ive e c'hoar Mac'harit. Houman, he deus sikouret kement he breur en e visionou, a oa, ez yaouank, eur plac'h vat, karantezus, met eun tammig re droet ouz ar bed hag e blijadureziou. Mikael a-nebeudou he distroas diouz follenteziou ar bed hag a reas d'ezi dilezel an dilhad kaer, ar perlez, an dantelez hag ar seizennou.

Eur c'hoar all, Anna, yaouankoc'h eget Mac'harit,

a c'hounezas ive. O diou e voent lakeet gantan en eun ti eus ar vourc'h. Eno ez aent bemdez d'an ofe-renn hag e teskent gand o breur gwirioneziou ar relijion. O c'has a rae da welet ar re glanv, ar re baour, hag e tisplege d'ezo an doare d'ober katekiz, da frealzi an dud poaniet.

Setu eun diverra eus labour Mikael an Nobletz e Plougerne. Hada a reas greun an Aviel er barrez-ze. Ar greun a zavo, ha re all a eosto. Abaoe tri c'hant vloaz Plougerne a zo bet ato eur barrez vat, he deus roet eleiz a veleien, a leanezed d'an Iliz ha maget kristenien eus an dibab.

IX


Mikael an Nobletz e Montroulez e leandi sant Dominik

E Montroulez ez oa eul leandi eus a urz sant Dominik, hag ennan an Tad Kintin, mignon bras Mikael, abaoe ma oant bet war ar studi e Ajen hag e Bourdel. An Tad Kintin a oa eul lean santel, met al leaned all, e genvreudeur, n'oant ket d'ar mare-ze direbech a-walc'h. E lec'h karet ar bedenn hag ar binijenn, e klaskent kentoc'h beva en o aes, dibreder ha lezirek. An Tad Kintin a glaske o digas adarre war an tu mat, sentus ouz reolenn sant Dominik, hag a roe d'ezo kenteliou ha skoueriou santel, met ne veze ket selaouet.

Mikael an Nobletz, aet da Vontroulez, a voe aliet gand e vignon da c'houlenn ive beza digemeret el leandi : « Ma vijemp hon daou aman, e c'hellfemp dont a-benn da lakat urz vat en ti, ha kement-se a vefe talvoudus bras evid ar vro-man. » Mikael a zent-
tas ouz e vignon, Laket en deus en e spered beza misioner e Breiz, met leaned sant Dominik a zo dreist pep tra prezegerien, hag e c'hello prezeg d'e genvroiz kement ha ma karo.

Digemeret e voe el leandi, hag ec'h en em roas d'ar bedenn, d'ar binijenn muioc'h eget biskoaz. Met ne blijas tamm ebet d'e genvreudeur. Doare en doa da glask ober skol d'ezo.

Eur wech, dreist-holl, e roas d'ezo eur gentel galet. Eur plac'h yaouank eus a Montroulez o veza deuet da vervel, he mamm a c'houlennas digant Tad Rener an Dominikaned ma vefe beziet he merc'h e chapel al leandi. Er mare-ze e veze beziet kalz tud en ilizou. An Tad Rener a oa bet gwechall mestr-skol bugale an



Manati Sant Dominik e Montroulez

itron-ze, hag a roas e aotre. Ouspenn-ze, e kichen ar bez, ar vamm a lakeas skeudenn he merc'h livet kaer. Ar skeudenn n'oa ket gwall zereat, ar vruched a oa hanter-zispak, ha n'e ket en eur chapel oa lakat he-velep skeudennou. An dud diwar ar maez, pa zeuent d'ar chapel, a bede dirag ar skeudenn, o kredi oa skeudenn ar Werc'hez, ar pezh a rae da dud Montroulez c'hoarzin goap : « Eur vez eo », a lavare Mikael alies. Met kaer en doa en em glemm, ar skeudenn a jome ato er chapel.

Eun deiz ne c'hellas mui en em zerc'hel; hag e kempennas ar skeudenn, evit na rafe mui droug. Ar vamm, pa welas, en em glemmas ouz an Tad Rener, o lavaret ne rofe mui netra d'al leandi, ma ne vefe ket kastizet an hini en doa graet an taol fall-ze.

Evit ne vefe tamallet hini all ebet, Mikael en em ziskuilhas heb aon. Laket e voe e pinijenn, skourjezet, kastizet en eun doare kriz, ha tolet er maez eus al leandi, rak n'oa ket c'hoaz stag ouz an Urz, n'en doa ket c'hoaz en em vouestlet.

An Tad Kintin a oa lean hag a jomas en ti. Poania a reas gant nerz-kalon da wellaat an traou, hag ugent vloaz goude, reolenn sant Dominik a oa adarre heuliet mat e leandi Montroulez hag en tiez all eus a Vreiz.

X

**Mikael an Nobletz o prezeg e Montroulez
hag e eskopti Treger**

Ar pezh a c'hoarvezas gant Mikael a reas kalz trouz e Montroulez. An darn vrasa eus an dud a c'hoarze goap d'ezan. Ar re o doa eun tamm truez outan a lavare en doa kollet e benn oc'h en em skuiza re gand ar studi hag e binijennou re vras.

Hen a c'houzanve pep tra heb en em glemm. Didamall a rae zoken an Dominikaned, en eur lavaret oa aet e-unan marteze dreist ar muzul.

Hag, e lec'h fall-galoni, ec'h en em laka da labourat. Goude eun nebeut amzer tremenet e ti e dad, e teu a-nevez da Vontroulez. Kaout a ra lojeiz e kichen leandi an Dominikaned; o gwelet a ra alies o tremen, hag gant doujans e salud anezo.

Doue a gar an dud izel a galon hag a ro d'ezo e c'hrasou. Mikael, gand aotre an aotrou 'n eskob, a ra katekiz en eur chapel eus a ger hag en e di, hag eleiz a dud a zired d'e zelaou hag a zent ouz e gentelion.

Gounit a reas da Zoue eun dimezell a renk uhel, Franseza a Gizidik. Eun deiz, goude eur brezegenn, Mikael a c'houlennas diganti ha laouen e vefe o servicha Doue evit mat. An dimezell a lavaras ya. Mikael neuze a ziskouezas d'ezi oa ret dilezel a-grenn ar bed hag e follenteziou, ha kemeret kroaz Jesus Krist e

trede Urz Sant Fransez. An dimezell a asantas adarre, met o tiskleria e ranke da genta goulenn aotre he mamm : « Ma kirit, eme Vikael, me a c'houlennno an aotre-ze evidoc'h. »

Hag ez eas da gaout ar vamm : « Dont a ran, emezan, da ginnig d'eoc'h ar gwella mab-kaer a c'heilfe beza kavet. Morse ne zello ouzoc'h a-dreuz, ne lavaro netra d'ober poan d'eoc'h, n'ho kaso ket er maez eus ho ti, evel ma ra kalz re all. » Ar vamm a oa souezet, rak n'he doa klevet hano ebet c'hoaz eus eur mab-kaer evid he merc'h. « Ar pried-ze, eme ar beleg, eo Hor Zalver Jesus Krist, hag ho merc'h a fell d'ezi en em rei d'ezan, en eur ober fae war ar bed. Ho merc'h ne vo ket kollet evidoc'h. Chom a raio en ho ti, d'ho sikour ha d'ho frealzi en ho kozni. »

Ar vamm a roas laouen he aotre, hag an dimezell n'he devoe ken d'ober nemet senti ouz kenteliou Mikael. Heman, evit he lakat da zével uhel uhel er zantelezh, a c'houlennas diganti traou dies, kalët meurbet : dilezel he dilhad kaer, gwiska eur zae hag eur vantell graet gant danvez dister, liou louet d'ezo, eur gouriz kanab, eur c'houef rouz, ha mont evelse dre ger Montroulez heb aon. An dud a jome mantret da zellet outi, a c'hoarze, a rae goap. An dimezell a gontas ar boan he doa bet, met Mikael, didruez, a c'houlennas muioc'h c'hoaz diganti, he c'hasas da welet he c'herent war ar maez, a oa holl tudjentil, o chom er manerioù tro war dro. Da c'houde e roas d'ezi tri zra : eur gouriz reun; eur skourjez hag eur penn-marô.

An dimezell, o senti, a voe trec'h d'ar bed, a reas fae war e follenteziou. Adalek neuze e vebas eur vuhez a binijenn, eur vuhez santel beteg he marô a c'hoarvezas d'an oad a 82 vloaz. Bemdez e kleve an oferenn hag e rae pedennou hir ha birvidik; yun a

rae, ouspenn ar c'horaiz, bep gwener hag epad an Asvent. Ne ehane tamm da labourat.

Franseza a Gizidik a reas eur vad souezus e Montroulez, ha dreist-holl en he farrez Sant-Martin. Gand he danvez e sikoure an dud ezommek; digemeret a rae en he zi ar re baour, ar re glanv, hag e roe d'ezo kement o deze ezomm.

Eun deiz e voe gwelet o tont da Vontroblez eur plac'h yaouank gwisket evel an dud diwar ar maez, met stummet mat ha doare d'ezi da veza eun dijentilez bennak. Hounnez oa Mac'harit an Nobletz, galvet gant he breur da labourat e Montroulez. Graet he doa hent gand eur baourez koz ha chenchet dilhad ganti, hag e touge, en eur zont e Montroulez, eul lostenn lien rouz hag eur boutou-koad. He breur en devoe poan oc'h he anaout, met laouen e voe o welet edo e c'hoar war hent ar zantelez, hag e rae fae war ar bed. He c'has a reas da gaout Franseza a Gizidik. Hou-man he gwis-kas paouroc'h c'hoaz, a roas d'ezi eul lostenn liou louet, n'oa henvel nemet ouz eur zac'h; hag eur bi-sac'h ouz he c'hein, eur skudell brenn en he dourn, Mac'harit an Nobletz en em lakeas e kichen doriou an ilizou, eun deiz gouel bras, da c'houlenn an aluzenn, evel pa vije bet eur vaouez kez n'oa ket gouest da c'hounit he boued. Kalz arc'hant a zastumas, hag he devoe peadra da zikour ar beorien. Met, daoust d'ezi da veza gwisket fall, e voe anavezet gant meur a hini. Hep mez ebet e c'houzanvas ar goaperez, hag adalek neuze e voe trec'h mat d'ar bed, ne voe mui touellet gand e blijadureziou, e follenteziou.

Pa voe evelse temzet he c'halon, he breur he lakeas e ti eun intañvez santel da zeski ar vicher a gemenerez, hag a roas d'ezi eur reolenn a vuhez ker striz hag hini eul leanez. He gourdrourz a rae alies evit rei tro

dezi da c'hounit ato eun dra bennak, da gaeraat he ene, hag e savas uhel meurbet e skeul ar zantelez. Muioc'h ez eas war araok e bloaz eget re all e 60 vloaz, a lavare he breur.

Lakat a reas anezi ive d'ober kateliz d'ar merc'hed ha d'ar plac'hed yaouank. He madelez, he habasked a c'hounenze an holl.

Setu petra reas Mac'harit an Nobletz : sikour he breur, evel ar merc'hed santel a welomp, e penn kenta an iliz, o sikour an ebetel.

Mikael a skignas e Montroulez keleunnadurez an Aviel, hag a zeskas da galz a dud an doare da garet ha da zervicha Doue. Evelato an holl n'edont ket a-du gantan. Kalz beleien a gave abeg ennan, rak ne rae netra evel ar re all. « Nann, e gwirionez, a skriv an Tad Maner, nann, n'oa ket henvel ouz ar re all. Ne veze gwelet morse en tavarniou, ne zaremprede ket an dud vras ha pinvidik, ne eve ket a win, n'en doa ket a aon o skei var gizioù fall ha lavariou diskiant ar bed. » Geriou flemmus a skrive an Tad Maner!

Goulennet e voe digand eskob Treger difenn outan pignat er gador brezeg. Met an aotrou 'n eskob, e lec'h kredi dioc'htu ar pezh a lavare an damallerien, a reas enklask, ha goude beza anavezet peger santel ha pegen desket oa Mikael an Nobletz, e pedas anezan d'ober misionou e pep korn eus e eskopti.

Mikael a zentas, laouen holl, hag evel n'oa ket gouest e-unan d'ober eun hevelep labour, e c'houlennas digand an Tad Kintin dont d'e zikour. Al labour a voe rannet etrezo. An Tad Kintin a brezege, ha Mikael a rae katekiz. Mikael a fellas d'ezan beza evel servicher an Tad Kintin ha senti outan gand ar vrasa doujans.

N'e ket hepken en ilizou e labourent, met ive er maez, war an hentchou. Boda a raent an dud e kichen eur groaz bennak, hag eno e roent d'ezo da glevet gwirioneziou ar relijion. Evit ma tougfe frouez o frezegennou, e pedent kalonek hag e raent pinijen-nou bras. Eun tamm bara zegal a veze a-walc'h d'ezo evit tremen o dervez.

Epad tri bloaz (1609-1611) e labourjont e eskopti Treger, ha kalz vad a voe gret epad an tri bloaz-ze.

XI

Mikael an Nobletz e enezennou Eusa, Molenez, Baz

Goude beza prezeget e eskopti Treger, Mikael an Nobletz a zistroas da eskopti Leon, a gare meurbet, rak ennan oa ganet. « Karet a rae an eskopti-ze, a skriv an Tad Maner, evel perlezenn eskoptiou Breiz ha Frans. N'eo ket ganet c'hoaz an hini en dije gwelet protestanted, heretiked, ginidik eus bro Leon. »

Met, ma z'oa bet diwallet mat an eskopti diouz an heretiked, evelato an dud n'oant ket desket a-walc'h war o c'hredennou, ha meur a c'hiz fall a oa da zis-c'hwrizienna.

Mikael a yeas da genta da enezenn Eusa a oa enni neuze wardro pevar mil den, muioc'h eget hirio. Gwall vor a zo etre an douar bras hag an enezenn, ha, p'en em gaver, eo dies pignat en enezenn, ken uhel ha ken sounn eo an aotchou. Abalamour da-ze n'oa ket kalz a zarempred etre Eusa hag an douar, hag eskibien Kastell n'ez aent ket d'an enezenn.

N'oa nemed eur beleg e Eusa evit kement all a dud, hag evelato oa chomet eur barrez kristen. An dud a oa madelezus, santel; ar pec'hed hudur n'oa ket ana-vezet en o zouez, en em glevet a raent, hag ar peoc'h a rene en enezenn. Ne vanke d'ezo nemet beza desket muioc'h war ar relijion, ha tostaat aliesoc'h ouz ar zakramanchou.

Mikael a voe digemeret mat e Eusa. Unan eus an dud pinvidika e bedas da zont da jom d'e di hag a breparas d'ezan eur gambr dereat. Met n'ez eas ket da gousket er gambr-ze. War ar c'halet eo e kouske, gand eur maen dindan e benn.

An eneziz, souezet o welet peger santel oa, a zirede da glevet e brezegennou hag e gatekiz, ha goude beza bet kenteliet a-walc'h, e c'houlennent holl kovez ha kommunia.

Mikael a zeskas da bersoun Eusa e zoare da zisplega ar relijion d'an dud, hag evelse ar vad en doa graet e-unan a voe kendalchet war e lerc'h.

Eus Eusa ez eas da Volenez. Digemeret mat e voe ive ha selaouet gant doujans. Met eur c'halz eus ar wazed a oa o pesketa ha ne c'hellent ket klevet e brezegennou. Petra ra ar misioner? Pignat en eur vag ha mont da glask ar besketaerien. Pa veze digouezet el lec'h ma vezent, e lavare d'ezo tostaat outan; neuze e save war ar vag uhela hag ac'hano e kelenne ar besketaerien bodet endro d'ezan. Eun deiz e komzas gant kement a nerz eus an ifern ha poaniou Hor Zalver, ma voe gwelet an dud-ze o lenva hag o kemeret kerdin o bagou evid en em skourjeza e pinijenn d'o fec'hejou.

Araok distrei d'an douar bras, Mikael a c'hoanteas mont da Enez Vaz, ugent leo diouz Eusa. Epad ar veach e sonje e Sant Pol a Leon en doa prezeget gwechall goz e Eusa hag e Baz.

Ar feiz a oa ato beo e Enez Vaz, met an dud n'oant ket desket war ar relijion, ha kalz gizioù fall a oa en o zouez. Ar beleg kalonek en em lakeas da labourat kerkent ha ma tigouezas. Diou wech bemdez e prezege hag e rae katekiz. Eur paotrig en doa digaset gantan evit diskouez d'an eneziz penos e vez gret katekiz. Ar paotr-ze a oa boazet da respont ouz ar goulennoù,

ha p'en deveze respontet, Mikael a lavare d'ar re vihan ha d'ar re vras: « Lavarit breman d'ho tro evel ar paotr-ze. » Evelse e voazas anezo da zeski ar c'hattekiz. Kovez a raent ive o fec'hejou, ha Mikael dre e vadelez, e zouder, a roe fizians d'ezo, hag e tizoloent o holl fec'hejou. « Arabat klask kuzat netra ouzin, emezan, rak me a anavez kement hoc'h eus graet. » Eur c'hovesour oa eus ar re wella.

An holl a voe gounezet gantan, ha p'o c'huiteas, e voe skuilhet daelou puilh e Enez Vaz. Boda a reas an dud eur wech c'hoaz. « Kenavo, va bugale ger, emezan. Doue am galv da vont d'eul lec'h all. Deuet oun en ho touez da ziskouez deoc'h hent ar Baradoz. M'am befe gellet, gant gras Doue, savetei eun ene hepken, nag e vijen eurus! » Ehana a rankas, rak an holl a lenve hag a zifronke. Abenn eun tachad e kendalc'has: « Setu aman eun dervez, emezan. Na lenvit ket, va bugale, met dalc'hit sonj eus ar pezh am eus desket deoc'h. Karit ha servichit Doue a greiz kalon. Dre ar bini-jenn gwellañ ho puhez. Kentoc'h mervel eget ober poan da Zoue dre ar pec'hed! » Gand eur vouez krenv e lavaras ar c'homzou-ze, hag e tiskouezas da c'houde eur groaz ruz warni eur penn maro. « Hag unan bennak a zo aman ha ne gredfe ket e vo eun deiz e benn henvel ouz ar penn maro-man? Mat! E lezel a ran ganeoc'h evit ma prezego d'eoc'h em lec'h. En han' Doue, pleustrit war ar maro. Pa vezot oc'h ehana, pa vezot o tebri, pa vezot o labourat, sonjit e rankot mervel. Grit fae war ar bed, rak mervel a rankot.

Enebit ouz ar c'hoantegeziou fall ha direiz, rak mervel a rankot. Na stagit ket ho kalon ouz madou ha plijadureziou an douar-man, rak mervel a rankot. » — Komz a reas d'ezo ive eus an tri banniel: ar banniel ruz, ar banniel gwenn, ar banniel du.



« Ar banniel ruz, emezan, a zigas sonj d'eoc'h eus Pasion Hor Zalver. Pleustrit warni epad ho puhez penn da benn. Stourmit dindan ar banniel-ze, hag e vezot trec'h d'hoc'h enebourien, youlou ha siou fall. Hag en ho kalon e vo karantez Doue gand an holl vertuziou. Ar banniel gwenn a zo eur skeudenn eus ar zakramanchou a laka kaer an ene. Deuit alies da govez ha da gommunia, ha gand an daou zakramant-ze e chomo glan hoc'h eneou. Ar banniel du a zo skeudenn an daonasion, ha ma ne fell ket d'eoc'h dilezel ho puhez fall ha poania, e vezot daonet ha daonet evid ato. »

Mikael a lavaras neuze da dud Enez Vaz kemeret ive o banniel, en em rei da Jesus Krist en deus gouzanvet, a zo maro evito, beza aketus da zakramanti, evid en em ziwall evelse diouz an ifern ha gounit ar Baradoz.

Pa ziskennas eus ar gador, an holl e heulias betek ar vag a dlie e gas d'an douar bras. Ne vije ket bet grêt muioc'h a enor da eur roue. Daelou a zivere eus an daoulagad, an holl a drugarekae ar misioner, a lavare kenavo d'ezan, hag e chomjont pell er porz da zellet ouz ar vag a gase Mikael d'an douar bras.

Tud Enez Vaz a zalc'has mat d'ar c'henteliou roet d'ezo. Hanter kant vloaz goude, an Tad Maner, deuet da brezeg da Enez Vaz, a welas oa sonj mat c'hoaz eus Mikael an Nobletz hag oa chomet an dud sentus ouz e aliou. Eun douar santel, emezan, oa Enez Vaz. Prezegennou Mikael o doa douget frouez mat.

XII

Mikael e Konnk-Leon hag e Lok-Maze

Eus Enez Vaz e teuas da Lok-Maze-Penn-ar-bed. Eno ez oa, endro d'ar manati, eur geriadenn vras awalc'h, hag eul leo eus tu an hanter-noz, Konk-Leon, a oa d'ar mare-ze eur porz mor pinvidik meurbet. Bagou bras a gemmwerz a veze gwelet ennan, betek kant awechou. Ar bagou-ze a rae kemm-werz gant porziou Frans hag ar broiou all evel Bro-Zaoz hag ar Spagn. Etre Lok-Maze ha Konk edo bourc'h Lokrist, hag eno edo an iliz hag ar vered. Ar vered a zo hirio ato e Lokrist.

Eus Konk betek Lok-Maze ez oa tiez e pep lec'h, hag hervez an Tad Maner, war ar c'horn-douar-ze ez oa, e amzer Mikael an Nobletz, eun ugent mil den bennek, eun tamm mat muioc'h eget hirio.

Ar brezeliou gand ar Zaozoun a rivinas Lok-Maze ha Konk, hag hirio n'int netra e kichen ar pezh m'oant gwechall.

Mikael an Nobletz a glaskas da genta anaout ar vro, anaout an dud, o doare beva, o gizioù fall pe vat. Ne voe ket pell evit gwelet oant dishenvel bras diouz tud an enezennou, Eusa, Molenez ha Baz. Ar binvidigez peurliesas a zo noazus d'ar zantelezh. Tud Konk a c'houlas kalz arc'hant dre ar c'hemm-werz hag o c'halon a oa stag ouz madou ha plijadureziou an douar.

Ar misioner, heb aon ebet, en em lakeas da brezeg d'ezo an Aviel ha da rebech d'ezo o giziou fall. Komz a reas eneb an avaristed, ar garantez direiz evid an arc'hant, hag e tizoloe an troiou kamm, an displealded, ha ive krisder ar re a brëste arc'hant d'o breudeur war gampi o c'houlenn kalz re a interest, a zigoll. Rebech a rae d'an dud a lezenn o ijin diaoulek da lakat ar prosezou da badout, evit tenna muioc'h a arc'hant digand an dud. « Henvel oc'h, a lavare d'ar re-ze, ouz medesined a lakfe eur gouli, eur c'hlenved da badout evit kaout brasoc'h pae. » Gourdrourz a rae an dervezerien a golle o amzer pe ne labourent ket mat. Hag an dudjentil, an dud pinvidik a gleve ive o gwirioneziou p'en em ziskouezent didruez e kenver ar re a veve dindanno. « Ma kendalc'hit da wallgas ho tud evel ma rit, ez eoc'h d'an ifern: eur c'hanval a dremenfe buanoc'h dre doull eun nadoz eget n'ez eot dre zor ar baradoz. »

Ne esperne ket zoken an dud a zaremprede an iliz, met n'oant nemet hanter-gristenien, a veze gwelet o vont a bell da bardona, betek Rom ha sant Jakez a Gompostell (er Spagn), met a oa lezirek da zeski o relijion, dizentus ouz gourc'hemennou Doue hag an Iliz, henvel ouz ar Farizianed gwechall, a dole evez ouz an traou bihan, an neuziou, an orbidou, hag a bec'he en o c'halon. Re all a lakee kalz oferennou ha servichou evid eneou ar Purkator, met evito o-unan ne zonjent ket en em ziwall diouz ar pec'hed a vir ouzomp da vont d'ar baradoz. Re all c'hoaz a veze gwelet o rei aluzennou d'an iliz, o sevel chapelioù nevez, met ne baent ket o dle, ne roent ket o c'houmanant d'o zervicherien. Lod a yune da zadorn hag a jome hep debri kig da verc'her, met a zispenne o nesa ha zoken an dud vouestlet da Zoue. Ar misioner a lavare d'ezo oa gwelloc'h

yun a galon eget a gorf, gwelloc'h dilezel ar pec'hed eget eun tamm boued.

Alia a rae ive ar veleien da labourat muioc'h evid an eneou, da implija mat o amzer, da zistaga o c'halon diouz madou hag enorioù ar bed-man, da gelenn mat o farresioniz, da studia ar skianchou sakr.

An holl, evel a weler, a gleve ar wirionez. N'eo ket souezus en dije Mikael dispiljet da dud Konk. Ar re man a c'hoantae klevet komzou troet brao, nann gwirioneziou kalet. Pa bigne er gador, e veze gwelet kalz eus an dud o vont er maez gant trouz: « Setu adarre ar beleg foll, emezo. Da betra eo deuet aman? Ne oar ket petra eo kemm-werz, ne gompren seurt en traou-ze. Daoust hag hor beleien n'int ket ker mat hag hen? Ha goulskoude ne reont morse d'eomp rebechou evel ma ra heman. Ret e vije difenn outan da brezeg. »

Evelse e veze lavaret.

Er penn kenta Mikael an Nobletz a voe digemeret e ti eun intañvez santel, Franseza Troadek, o chom e Lokrist. Houman a anaveze mat peger zantel oa ar misioner, pegen desket, pegen troet d'ober pinijen. Pa gleve an dud o lavaret n'oa nemet eur randoner, eun hunvreer, eur penn fall, e lenve gand ar boan he deze. « Eun den, emezi, ne ra nemet vad d'an holl! ne c'houlenn ket eur werennad zour evid e bae, a ya da wlelet ar re glañv d'o ziez, a ro gwenneien d'ar vugale a zeski mat o c'hatekiz! Penos e c'heller lavaret hevelep traou diwar e benn? »

Eun deiz an intañvez, poaniet muioc'h eget biskoaz, a lavaras da Vikael e kolle e boan hag e amzer etouez tud ker fall, ken dianaoudek. « Ret eo kaout habaskded, emezan. Doue a c'hoanta e ve great evelse d'in. »

Tud Konk a gendalc'he eta d'ober kemm-werz, da garga ha da ziskarga bagou, da c'hounit arc'hant. Da

zul ha da c'houel, goude beza klevet eun oferenn, hag ar verra, ez aent da bourmen, da c'hoari. Debri a raent prejou mat hag e lezent Mikael an Nobletz da brezeg dirag an hini a vije sot awalc'h da vont d'e zelaou.

Mikael n'oa ket eun den da goll fizians ha da fall-galoni evit gwelet enebiez endro d'ezan. Konkiz ne fell ket d'ezo e glevet: hen a yelo d'o c'hask d'o ziez. Evel m'oa gouiziek war an holl skianchou, e komze d'ezo diwarbenn o micher, ar broiou a rae kemm-werz ganto, an doare d'en em hentcha war vor en noz dioc'h ar stered. Hag a greiz holl e kave tro da lavaret eur ger bennak diwarbenn karet ha servicha Doue.

A nebeudou unan bennak a gredas mont da di Vikael, da c'houlenñ kuzul digantan. An hini a veze bet eur wech a zistroe hag a alie e vignoned da vont ive. Holl e vezent gounezet gant gouziegez ha dreist-holl gant madelez ha santelez Mikael.

Gwellaat a reas an traou, ha pa welas edo an dud o trei ouz Doue, ar misioner a skrivas d'e c'hoar Mac'harit dont da Gonk d'e zikour d'ober katekiz. Senti a reas kerkent. Edo o font eus koll he zad, hag e c'hellas lavaret d'he breur pebez maro santel en doa bet.

Marc'harit an Nobletz a gavas eun tiig soul etre Konk ha Lok-Maze, evit ma vije gallet aesoc'h digas d'ezi ar merc'hed bihan da zeski katekiz. Plijout a reas buan d'an dud, a jome souezet o wetet eur vaouez eus he renk o tilezel pep tra evid ober katekiz da vugale vihan. Gouzout a rae an doare da zisplega skler gwirioneziou ar relijion, d'o deski d'ar re vras kerkouls ha d'ar re vihan.

Franseza Troadek, an intañvez a roe digemer da Vikael, a zikouras Mac'harit. Eur vaouez desket bras oa; evel kalz tud eus Konk, ec'h anaveze, ouspenn ar brezoneg hag ar galleg, ar saozneg hag ar spagnoleg.

Mikael an Nobletz a zeskas d'ezi eun dra kalz talvoudoc'h: an doare da hentcha an eneoù war hent ar zilveridigez. Franseza Troadek a voe e Konk, evel Franseza a Gizidik e Montroulez, mamm ar re baour. Gwellet a rae an dud klanv ha beilha gand ar re a veze war o zremenvan; goude o maro, e sebelie anezo. Anan gant Mac'harit an Nobletz e rae katekiz d'ar merc'hed bihan, ha den ne c'helle lavaret pegement a vad a reas an diou vaouez-ze.

N'e ket hepken e Konk e laboure Mikael an Nobletz, met ive er parrezioù tro war dro. A-wechou e pigne en eur vag hag ez ae betek gwelet eun tour bennak, hag e touare. Mont a rae eus eur vourgadenn d'eun all, gwech digemeret mat, gwech digemeret fall. Ar beresoned aketus gant mad an eneoù fiziet enno, eme an Tad Maner, a roe d'ezan pep frankiz da labourat en o farrez. Met re all a zarre an nor outan, a roe urz d'ezan da ziskenn eus ar gador. Pa ne c'helle ket prezeg en iliz, e vode an dud er maez, e kichen eur groaz bennak, hag eno e rae katekiz.

Distro da Gonk, ec'h en em roe d'ar bedenn evit kaout eun nerz nevez. Tremen a eure eur bloaz en enllec'h distro, e kichen Lokrist, hag e vevas eno evel m'en doa graet gwechall e Tremenac'h; ne gwire nemet evit lavaret e oferenn, kovez ha prezeg. Eur potr bihan a zigaze d'ezan bemdez e voued, pourchaset gant e vignon, Guilhou Breneol.

Divezatoc'h e teuas ive alies, goude e visionou, da Lok-Maze, tost d'ar mor bras, e kichen ar manati, hag ec'h en em denne en eur c'heo tro ouz ar mor hag e chome daou ugent dervez da bedi ha d'ober pinijenn. Goudeze e veze krenvoc'h da staga adarre d'al labour ha da c'houzanv ar poaniou a bep seurt a goueze warnan.

Gwelet hon eus leziregez tud Konk. Gwelet hon eus ar veleien e meur a lec'h oc'h enebi outan. Arabat kredi e vije, abalamour da-ze, ar veleien-ze beleien fall. Mikael an Nobletz n'oa ket c'hoaz anavezet mat. Ne rae netra evel ar re all, hag ar bersoned a c'helle lavaret n'o doa ket ezomm anezan. Meur a hini a grede ar pezh a veze lavaret gand an teodou fall, oa eur beleg foll, diboeil, gouest da zireiza spered ha penn an dud.

Unan bennak a yeas pelloc'h hag a gasas da Gastel klemmou en e eneb, o lavaret oa poent difenn outan prezeg. Eus an eskopti e voe graet d'ezan rebechou.

Mikael ne glaskas ket en em zidamall. Hor Zalver, emezan, n'en deus ket bet ezomm da veza difennet. »


Ma z'oa tud enep d'ezan, ez oa re all troet gantan, hag eul lizer a zigouezas e Kastel da zisplega ar wirionez ha da ziskouez n'oa nemet meuleudi da rei d'ezan, oa eur beleg desket bras, santel, entanet e galon gant karantez Doue hag ar c'hoant d'ober vad d'an enebou.

Vikel vras Kastel ne dennas ket digant Mikael an aotre en doa bet da brezeg ha da govez e eskopti Leon, met lavaret a reas n'en dije mui aotre nemet evit eur barrez hepken, hag e rankfe goulenn eun aotre nevez pa z'afe d'eur barrez all.

Ar vikel vras, war a gonter, ne zalc'he ket koun eus ar pezh en dezo graet, ha Mikael, o c'houzout an dra-ze, a c'houlenne aotre evid eur barrez; eur pennad goude, evid eur barrez all, hag eun all, hag e c'hellas evelse kenderc'hel d'ober katekiz.

Epad tri bloaz (1611-1613) e labouras e bre Konk. Da c'houzanv en devoe, met an trec'h a jomas gan-

tan. Araok ma teuas da Konk, edo ar c'hiz da gommunia eur wech ar bloaz. Mikael a zeskas da dud Konk kommunia alies, mont d'an oferenn war ar zizun, ober enklask er goustians, lavaret ar pedennou en tiez, lenn, goude koan, eul levr santel bennak. O farea a reas ive eus ar c'hiz fall o doa da doui. Pa gleve eur bugel bennak o toui, e roe urz d'e gastiza gand eur vialenn; ar bugel, goude beza kastizet, a zouge ar vialenn war e skoaz hag a rae an dro d'eur groaz vras. An dud a zirede da c'houlenn petra a oa a nevez, ha Mikael a ziskoueze d'ezo peger fall oa toui, dismegansi hano santel an Aotrou Doue, hag ar gerent, evel ar vugale, en em zioualle diouz ar pec'hed-ze.



XIII

Mision Landerne 1613

Goude Konk-Leon, Mikael a zeuas da brezeg da Landerne a oa d'ar mare-ze, evel hirio, unan eus kerio brasa ha pinvidika bro Leon.

An deiz m'en em gavas, e voe tost d'ezan beza lazeta. Eun den mezo, kollet gantan e benn, a yeas epad an noz en e gambr, eur c'hleze en e zourn, da glask e laza. Dihunet gant an trouz, ar misioner a c'hellas lammet er meaz dre ar prenestr. Antronoz, evel pa ne vije

c'hoarvezet netra, edo er gador brezeg hag e komze eneb an dispignou foll hag an dizurziou a zeu da heul. E Landerne, ar merc'hed, dreist-holl, a oa en amzer-ze pen-

nou skanv, a gare an dilhad kaer hag a zispigne evid en em wiska kalz re a arc'hant; ne jome ket ganto peadra evit gouarn mat o ziegez hag ober aluzenn d'ar paour. Ar misioner a lavaras d'ezo komzou yud : « Henvel oc'h, emezan, ouz ar vaot (1) a zoug war he c'hein he holl feadra. » Itrounez Landerne, skler eo, ne blijas ket d'ezo prezegenn ar misioner. Unan bennak a dennas he mad eus e c'hourdrouzou, met an darn vrasa a jomas hep mont mui d'e zelaou.



Tiez koz Landerne

Neuze ec'h en em droas ouz an'dud dister ha paour, Mont a rae dre ar ruiou ha leuriou-ker d'ober katekiz evel m'en doa graet e meur a lec'h all. An dud e zelaouas, met hep lakat o foan da wellaat o buhez.

(1) baot: tortue.

O welet ne veze ket taolet kalz evez ouz e gomzou, e sonjas displega an taolennou. P'eo gwir ne ziskenne ket ar wirionez dre an diskouarn, marteze e tiskennfe dre ar daoulagad. Evit rei da gompren skianchou ar bed, ez eus taolennou a bep seurt. Perak ne vije ket ive a daolennou da zeski ar relijion?

Pell zo en doa sonjet en taolennou ha livet en doa meur a hini. Pep seurt traou a ziskoueze warno: en unan e veze gwelet parkeier labouret ha lanneier, gwez karget a frouez ha gwez sec'h pe hanter zec'h, hentchou ledan hag hentchou moan, eur ster vras gant dour skler ha poullou lous ha tenval, kestell, tiez plouz, touriou, ilizou, menezioù, traoniennou. Eun all a ziskoueze ar mor kounnaret ha reier aman hag ahont, bagou bras, bagou bihan. — Eun all a oa kelc'het gant souldarded, tud oc'h argadi, re all oc'h en em zifenn. Ar misioner a gave en taolennou-ze kentelioù evid an dud diwar ar maez, ar vartoloded, ar zoudarded.

An daolenn genta a ziskouezas e Landerne a voe taolenn ar pemp dor: en tu uhela e veze gwelet levez ar baradoz hag en traon poanioù an ifern; a-ze-hou, ar pemp dor a gas d'ar baradoz; hag a gleiz. ar pemp dor a gas d'an ifern. O tiskouez an dorioù-ze, e kave tro da gomz eus ar vertuzioù a gas d'ar baradoz, hag eus ar pec'hejoù a gas d'an ifern.

Kaer en devoe poania, ne c'hellas ket dont a-benn eus tud Landerne. An darn vrasa anezo a zarras o diskouarn, o daoulagad, o c'halon ouz komzou ar misioner. Mac'harit an Nobletz hag an Tad Kintin hag hen a yeas, gand eur groaz en o dourn, en eur zal a oa enni tud o tansal. An danserien a voe spontet hag a gwiteas buan ar zal.

Red eo lavaret, e Landerne, e brezegennou hag e gategiz a zougas nebeut a frouez. Meur a hini a voe gou-

nezet da Zoë hag a zalc'has mat d'e aliou ha d'e gentelioù, met an darn vrasa a jomas evel m'edont araok.

Mikael, o welet petra dremene, a reas evel ma lavare Hor Zalver d'e ebestel: « Ma ne zigemeront ket ac'hanoc'h en eur ger, it da eur gêr all. » Hag ez eas da eskopti Kemper.

XIV

Mikael e Kemper

Mikael en doa labourer e eskopti Treger, e eskopti Leon. Eus Landerne ez eas da eskopti Kerne. An aotrou 'n eskob, Gwillou Le Prestre, a roas aotre d'ezan d'ober misionou en'holl barrezioù eus e eskopti.

Dre Kemper eo e vour'has e labour e Kerne. Kaout a reas eun ti e parrez Sant-Vaze. Bep sul ha bep gouel e kelenne an dud en iliz parrez, ha war ar zizun e teske ar c'hatekiz d'ar vugale e chapelioù ker. Evel n'oa ket c'hoaz a Leanezed eus a Urz santez Ursula d'ober katekiz d'ar merc'hed bihan, e kemennas d'e c'hoar Mac'harit ha da Franseza Troadek eus Konk dont da Kemper.

Evel a weler, Mikael an Nobletz a boanie meurbet da zeski katekiz d'ar vugale. Ma teufe a-nevez war an douar, e krogfe adarre el labour-ze, rak n'eus netra talvoudusoc'h. Morse ne ouezer re vat ar c'hatekiz. Hirio, evel er zeiteket kantved, an dud a zo dizesk war o relijion. Mont a reont d'an oferenn, mont a reont da zakramanti, alies evid ober ar c'hiz. Goulennit diganto petra eo an oferenn, petra eo eur c'hristen, petra eo Jesus-Krist, petra eo an Iliz, petra eo ar zakramanchou, ne ouezint ket lavaret d'eoc'h. Ar re a anavez o relijion eo ar re a zo bet pell amzer e sko-

liou kristen hag o deus desket bep bloaz penn da benn o c'hatekiz, pe c'hoaz ar re o deus digoret o c'hatekiz da c'houde, ar re o deus graet skol d'ar vugale vihan hag ive ar re o deus selaouet mat prezegennou ar beleg er gador da zul, da vihana ma z'eo bet skler e brezegennou. Gwella en defe d'ober ar beleg er gador, eo deski d'an dud bep bloaz ar gwirionezioù a zo merket el levr katekiz, hag al levrig-ze a dlefe beza en holl diez kristen: ar re vras hag ar re vihan a dlefe e c'houzout a zindan envor.

Mikael an Nobletz a lavare eo henvel ene ar vugale ouz eun tamm koar; da eun tamm koar e c'heller rei pep stumm; warnan e c'heller skriva pep tra; e ene ar vugale ive e c'heller skriva ar pezh a garer, an droug pe ar mad: ar mad, ar zantelez, ma poanier ganto d'o zrei ouz Doue; an droug, ar plegou fall, ma vezont lezet d'ober ar pezh a zeu en o fenn, ma ne vezont ket hentket hag harpet.

Boda a rae ar vugale e chapel santez Madalen, hag e tisplege d'ezo skler gwirionezioù ar relijion, hag e konte istorioù evit rei d'ezo gwelloc'h da gompren. Ar re a zeske mat o deze metalennoù, kroazioù, skeudennou ha zoken madigoù. Ar vugale o doa evitan eur garantez vras, ha p'e welent o tont, ez aent d'ar red d'e gaout.

An dud vras ne gomprenent ket talvoudegez an deskadurez kristen hag a glaske ober goap eus ar beleg a goll evelse e amzer gant bugale. P'e welent o tremen, e lavarent: « Setu adarre ar beleg foll o vont en hent ».

Ar vaouez a rae lojeiz d'ezan, o klevet petra lavare an dud, he devoe mez hag a zisklerias ne c'helle mui e zerc'hel en he zi.

Met Mikael a gavas eun ti da brena e Douar an Dug, hag eno e chomas gand e c'hoar Mac'harit. E holl beadra a lakeas da brena an ti-ze. Ret oa, evit gellout ober vad da dud Kemper.

Nebeut a Gemperiz a veze o selaou ar misioner en iliz. Evelato ar re baour, an dud dister a zeue hag a zente outan. Meur a hini a gavas d'ober eveldan fae war ar bed hag e blijadureziou.

Eur chaloni eus an iliz-veur hag eur beleg eus Sant-Vaze, an aotrou Bosser (pe Bocher) a voe a galon gantan. D'an aotrou Bosser e teskas an doare da lakat an dud da govez ha da gommunia alies.

Epad m'edo e Kemper, Mikael a brezegas ar C'ho-raiz da Leanezed Lok-Maria hag a zisplegas dirazo ar Stabat Mater. Mont a reas ive da veur a barrez eus a Gerne, evel ar Faou. Diredet a reas, ouspenn, da Blougerne, da Gerodern, da welet e vamm war he zremenven. Houman a dremenas ar bloaveziou di-veza eus he buhez evel eur zantez hag he devoe eur maro kaer meurbet.

E c'hoar Anna, a oa ive holl da Zoue, a en em dennas er yourc'h, goude maro he c'herent, e kichen an iliz. Bemdez e kleve an oferenn, hag e tremene he amzer o pedi, o lenn levriou santel, oc'h ober katekiz d'ar vugale, o welet ar re baour hag ar re glanv, hag e c'hellomp kredi e talvezas he fedennou hag he finijennou d'he breur epad e visionou.

XV

Misionou e Konk-Kerne, Pont 'n Abad, Goyen (Audierne)

Eus Kerodern, Mikael an Nobletz a yeas da Konk-Kerne, ha dre vor, a c'hellomp kredi. En em gaout a reas er ger-ze, eur zulvez, da eur ar Gousperou. War eün ez eas d'an iliz ha goude ar Gousperou, e pignas er gador da zisplega ar *Bater*. Komz a reas e berr gomzou eus misteriou brasa ar feiz. Soudarded a oa e Konk-Kerne a zo eur ger kelc'het gant mogeriou. Ar re a oa er Gousperou, pa glevjont ar prezeger, a yeas er maez eus an Iliz; an darn vrasa eus ar vourc'hizien a reas evel ar zoudarded. « Pebez beleg! emezo. Eman o klask deski d'eomp eur bedenn hon eus desket gant hor magerez! » Ar re a jomas en iliz a voe souezet muioc'h c'hoaz o klevet komz eus mister an Dreinded, mister an Inkarnasion. Ha goulskoude, sur a-walc'h, ma vije bet goulennet diganto displega petra eo ar misteriou-ze, e vijent bet nec'het.

Met lorc'bus evel ma oant, e c'hoantaent klevet prezegennou troet brao, a blij d'an diskouarn, met ne zeskont netra d'ar spered. Ha Mikael an Nobletz a voe kemeret ganto evid eur beleg diskiant.

Er mare-ze e teuas da Konk-Kerne, da welet he c'hoar, eun itroun vras eus Leon, an itroun a Ge

rouartz. He c'hoar a oa o chom demdost da Gonk-Kerne. Komzet e veze a bep tu eus ar foll en doa prezeget d'ar zul a-raok.

An itroun a Gerouartz a c'houlennas e hano, ha pa glevas oa Mikael an Nobletz, e tisklerias a vouez uhel ec'h anaveze mat ar beleg-ze, eur beleg santel, en doa graet kalz vad dre e visionou e Leon a-raok dont e Kerne. Konta a reas diwar e benn meur a dra a ziskoueze oa santel.

Souezet e voe an dud o klevet an itroun a Gerouartz, met n'ez ajont ket muioc'h, evit-se, da zelaou ar misioner, hag heinan a zilezas Konk-Kerne evit mont da Bont 'n Abad.

O tigouezout e Pont 'n Abad, e c'houlennas digand eur vaouez, an itroun a Bortmoreau, e pelec'h e veze kavet paper da brena, rak bemdez e tispigne kalz paper o studia hag o skriva. An itroun a respontas d'ezan gant rustoni, rak henvel oa ouz eur reder-bro, eur c'hlaske-barra. Met da c'houde e teuas keuz d'ezi, ha ne c'hellas ket chom hep lavaret d'he gwaz petra he doa graet. Ar gwaz, eur c'hristen mat, a lavaras: « Ret eo komz ato gant madelez d'ar re baour, ha gant doujans d'ar veleien. » Hag an aotrou a gasas kerkent unan eus e vevelien da glask ar beleg paour, evit kinnig d'ezan eun nebeut gwenneien ha lavaret d'ezan e vije laouen oc'h e zikour bep tro m'en defe ezomm. Ar misioner a drugarekeas a greiz kalon, hag evit digoll an den mat-ze, e teskas d'ezan ha d'e familh karef gwelloc'h c'hoaz an aotrou Doue, sevel uhelloc'h er zantelez.

Mikael a jomas eur pennadig amzer e Pont 'n Abad. An holl vugale a voe desket d'ezo o c'hatekiz; kovez a reas ive an darn vrasa eus ar re goz. Eus Pont 'n Abad ez eas ive da Enez Tudi, a zo e kichen, hag e

kavas eno tud a volontez vat, evel e Eusa ha Molenez. An dud paour-ze a lenve o klevet e brezegennou hag a c'houlenne kovez o fec'hejou.

Met, p'en em gavas e Goyen (Audierne), ez eas dis-henvel an traou. Eno ez oa ive tud pinvidik, a c'houleneze arc'hant oc'h ober kemm-werz. En dro genta ma pignas ar misioner er gador-brezeg, ez ajont er maez eus an iliz, evel pa vije bet an tan war o lerc'h: ne jomas nemed ar merc'hed. Mikael, droug ennan, a zisklerias da dud Goyen e vijent kastizet gant Doue, hag e vije lammet diganto ar madou-ze a stagent o c'halon outo. Hag e gwirionez, nebeut amzer goude, e kolljont er mor al lodenn vrasa eus o bagou karget a varc'hadourez.

XVI

Ar misioner a ra eun dro e parrezioù war ar maez e Kerne

Mikael a anaveze peur e tlie dilezel eur vro bennak evit mont d'eun all. Pa ne c'helle mui kemeret tamm boued ebet, e wele dre-ze oa galvet gant Doue da vont en eul lec'h all.

Gouzout a rae mat oa aesoc'h gounit kalon an dud war ar maez eget kalon tud ar c'heriou. An dud diwar ar maez a zelaou gant muioc'h a zoujans gwirioneziou an Aviel, gwelloc'h int da zenti ouz ar beleg, n'o deus ket kement a lorc'h, ha nebeutoc'h, peur-liesa, ec'h en em roont d'an dizurziou. Lakat a reas eta en e benn mont d'ober eun dro dre barrezioù Kerne, hag e prenas daou varc'h evit beachi, unan evid e zougenn e-unan, eun all evit dougenn an taolennou. Met ne jomas ket pell an daou varc'h gantan. En eur vont gand e hent, e kavas pesketerien, ganto war o c'hein eur bec'h pesked, pounner meurbet. Leun a druez, e kinnigas d'ezo e zaou varc'h da gas ar pesked betek Kemper.

Met, epad an noz, unan eus an daou varc'h a voe debret gant ar bleizi, egile a voe lazet o koeza en eun toull-doun. Ar besketaerien, aon bras d'ezo, a zeuas d'en em deurel d'an daoulin dirak Mikael, da c'houlenn pardon, hag a gawe d'ezo e rankfent paea eur yalc'had vras a arc'hant. Peger souezet e voent

o welet ne c'houlennas ar misioner gwenneg ebet diganto! Ne reas nemet mouzc'hoarzin ha lavaret d'ezo dont da zelaou e brezegennou. Kinnig a reas da Zoue ar pezh a oa c'hoarvezet, ha kompren a reas n'eus ket ezomm a gezeg evit mont da brezeg an Aviel.

Superstisionou, briz-kredennou war ar maez

Staga a reas d'e labour gant nerz-kalon, hag ec'h en em lakeas da gelenn al labourerien, da zeski d'ezo o c'hatekiz. Dizesk bras oant war ar relijion, ha dreist-holl, troet da gredi traou diskiant.

Setu aman eul lodenn eus superstisionou an amzer-ze. Gwelet e veze merc'hed o skuba ar chapel tosta d'o zi hag o teurel ar boultrenn er maez d'an avel, evit m'o defe o gwazed hag o bugale war vor avel vat da zistrei d'ar porz. Re all a gemere skeudennou ar zent er chapelioù hag a lavare e skofent warno a daolioù skourjez, ma ne zistrofe ket d'ar ger buan ha yac'h, an dud edont o c'hedal. Hag e raent ar pezh o doa lavaret. Skei a raent war ar skeudennou, pe c'hoaz e lakaent anezo en dour, pa n'o dezo ket o goulenn.

Hiniennou a dole en o fark eun trebez pe eur gountell gamm evit difenn o loened ouz ar bleiz.

Pa veze maro unan bennak, e veze tolet er maez eus an ti kement banne dour a veze ebarz, gand aon na vefe beuzet ene an hini maro. D'an tantad, a-raok Gouel Yann, e veze laket mein en tan, evit ma c'hellfe eneou ar gerent maro dont d'en em domma.

An dud yaouank a zanse er chapelioù, a zo ker stank war ar maez e Kerne, hag ar c'hiz-ze da enori ar zent, eur c'hiz diskiant, a veze kavet mat gand an holl.

Evit saludi al loar nevez e veze lavaret eur *Bater* war an daoulin. D'an deiz kenta eus ar bloaz e veze kinniget eun tamm bara hag amann d'ar feunteunioù. Lod a daole enno kement a dammou bara hag a oa a dud en ti, hag hervez ma chome an tammou war an dour, e lavarent e teufe ar maro da skei unan pe unan eus an ti.

Gwasoc'h c'hoaz. Meur a hini a ginnige traou d'an diaoul e-unan. Kredi a raent, evel heretiked eus an amzer goz, oa graet ar grouadurien vat gant Doue, hag ar re fall gand an diaoul. Evelse ar gwiniz, ar zegal a oa graet gant Doue, an ed du gand an diaoul. Hag hiniennou, goude beza dastumet, en eur park, o ed du, a dole dournadou er fozioù, en dro d'ar park, evit trugarekaat an diaoul, tad an ed du. D'ar plac'h nevez, pa zimeze, e veze roet ive ed du da skuilh war he lerc'h dre ma z'ae.

Meska a raent gand o briz-kredennou traou santel, evel eun naved pedennou, eun naved oferonnou. Pa veze klanv eul loen bennak, e kave d'ezo oa bet skoet gand o zad koz, maro pell a oa. Hag e lakaent eun naved oferennoù evid an tad koz, evit na zeufe ket mui d'ober droug.

Bez ez oa ive sorserien, strobinnerien, a rae ar vicher da barea an dud hag al loened gant komzou, orbidou diaoulek, hag a c'hounenze kalz arc'hant.

Mikael an Nobletz, evel a weler, en doa kalz labour d'ober evit dont a-benn da zisc'hwizienna ar gizioù diskiant a oa en em skignet e bro Gerne. En em erbedi a reas ouz sant Kaourintin, kenta eskob Kerne, evit beza trec'h d'ar fals-kredennou a jome c'hoaz er vro daouzek kant vloaz goude m'oa bet sklerijennet gant ar feiz kristen. Goulenn a reas digantan nerz awalc'h evit gellout kas da benn e labour.

Digemeret mat e voe e pep lec'h, hag an dud e zelaoue gand evez, a zeske o relijion, a zente ouz ar c'hentelioù roet d'ezo; niverus e tiredent d'an ilizou da glevet ar misioner, hag ec'h anzavent o doa bevet betek neuze evel chatal; keuz a ziskouezent, hag o ger a roent da veva gwelloc'h en amzer da zont. Ar briz kredennou a voe dilezet, hag ar wir relijion a voe heuliet, ar zakramanchou resevet gant feiz ha karantez.

Ne anavezomp ket ar parrezioù a Gerne a glevas mouez Mikael an Nobletz. Ar pezh a ouzomp eo e labouras e Kerne meur a vloaz, ha noz deiz, a skriv an Tad Maner.

Misionou e Kap-Sizun hag e Enez-Sizun

Mikael an Nobletz a brezege e parrezior ar Chap, pa glevas hano eus Enez-Sun, dirag Beg-ar-Raz, diou leo bennak eus an douar bras; n'oa beleg ebet enni d'an amzer-ze, hag ar misioner en doa youl da vont da gaout an dud-ze, dilezet e kreiz ar mor bras.

Dies eo mont da Enez-Sun, rak alies e vez gwall vor; reier a zo etre an enezenn hag an douar, hag ive evel eur ster vras, ar Raz, a red gant nerz ha kounnar, hag a zo risklus da dreuzi.

Rak-se e vez lavaret:

Biskoaz den ne dremenar ar Raz,

Hep n'en devije bet aon pe c'hlaez...

...Va Doue, va zikourit da dremen ar Raz,

Rak va bag zo bihan hag ar mor a zo bras!

Enez-Sun a zo eun tammig enezenn, reier bras endro d'ezi, izel war c'horre ar mor, e riskl da veza lonket pa vez gwall amzer ha mare bras. Hirio eur voger vras ha ledan he difenn ouz an avel-kornok.

Pa vez freuzet ar voger, ar pezh a c'hoarvez a-wechou, an dud ne vezont ket heb enkreiz. An douar, pe gentoc'h an traez, a zo rannet e tachennou bihan. Peb hini a glask kaout e damm, evit lakat eun nebeut heiz pe avalou-douar, hag eo bet ken lodennet an douar, ma z'eus tachennou n'int ket brasoc'h eget eul liser.

E amzer Mikael an Nobletz potred Enez-Sun, lezhanvet diaoulou ar mor, a oa brudet dre o c'hrizder. O flijadur oa kaout pense, ha, war a gonter, ec'h elument goulou war ribl ar mor, war ar reier, evit lakat ar bagou bras da fazia gand o hent ha d'en em goll.

Me gred n'eo an dra-ze nemet geier, sorc'hennou. Ar pezh zo gwir, eo e vez laouen an dud a zo o chom e kichen ar mor, p'en em gav eun tamm pense en aod, gwin, koad pe draou all. Kredi a reont peurliesha eo an dra-ze d'ezo. Met ma z'eus meur a dra da rebech d'ezo, ez eus ive d'o meuli evid o hardisegez, o nerz-kalon, pa vez tud da zavetei. Piou a lavaro niver ar re a zo bet saveteet gand an Arvoriz, paotred Enez-Sun ha re all? Bep bloaz e vez klevet hano eus an taoliou kaer graet ganto.

Tud Enez-Sun a zo hirio pinvidik pe, da vihana, brao eo ar stal ganto. Kalz arc'hant a c'hounezont o pesketa. Er zeitekvet kantved oa dishenvel an traou, ne gavent ket evel hirio a werz d'o fesked, ha ne goueze ket kalz a arc'hant en o godellou. N'oa ket an drederenn eus an heiz o doa ezomm evit beva. Evel n'oa ket c'hoaz a avalou-douar en hor bro d'ar poent-se, e lakaent panez en o zachennou, hag e tebrent, gand o fesked, panez ha bara heiz poazet en oaled, dindan ludu bezin, rak bezin eo a zevent d'ober tan, ar pezh a rae c'houez ha moged krenv en o ziez.

Mikael an Nobletz e enez Sizun

Tud enez Sizun ne event gwin nemet pa zigase ar mor barrikennadoù d'ezo; n'oant ket falloc'h evid an dra-ze ha beza e oant tud krenv ha yac'h; adalek seiz pe eiz vloaz ar baotred a veze noz deiz o pesketa, betek pemp pe c'houec'h leo diouz ar ger, e kreiz ar

c'herreg. Ar merc'hed a laboure an douar, rak n'oa ket a zezeg, a vale an heiz gand eur vilin dre nerz o divrec'h.

Mikael an Nobletz, heb aon ebet, a bignas en eur vag da vont da Enez-Sizun. D'ar re a lavare d'ezan oa risklus ar veach, e responte: « Muioc'h a riskl zo c'hoaz o chom hep fiziout e madelez Doue hag o lezel hep sikour eneoù prenet gant gwad Jesus-Krist. »

Kontet e voe d'ezan eun dra c'hoarvezet gand an aotrou a Liskouet, eskob Kemper. Evit doare, an aotrou 'n eskob, deuet da Gleden-Kap-Sizun, a gemenas da berson Enez-Sizun dont d'e gaout, rak klemm a oa savet en e enep. Met an eneziz a dreuzas ar Raz, gand o bagou, da gerc'hat o ferson. Evel ma ne roe ket an eskob o goulenn d'ezo dioc'htu, e kemerjont o c'hontilli bras, ar c'hontilli ma tivouzellent ganto ar pesked, hag e lavarjont: « Ma na rentit ket d'eomp hor beleg, ar mor bras am lonko, ma na lakan ket ma c'hontell en ho pouzellou. »

Pe 'z eo gwir ar gontadenn-ze pe ne 'eo ket, ar pezo sur eo e voe digemeret Mikael an Nobletz e Sizun evel eun ael eus an nenv. E nep lec'h ne gavas muioc'h a volonte vat. Eur brezegenn hag eur gentel gatekiz a rae bemdez, ha goulenn a reas digand an dud kovez pec'hejou o buhez holl, Buan e teuas gwellaenn en eneoù, hag an dud-ze, kriz gwechall war a lavared, a voe tud habask, madelezu, kristenien eus an dibab.

Ar pezo a rae poan d'ar misioner oa gwelet n'oa person ebet en enezenn. Petra a raint, pa vezo aet kuit?

Setu aman penos e renkas an traou. Bez ez oa en enezenn eun den, pesketaer evel ar re all, Fransez ar Su, digor mat e spered, ha dreist-holl, eun den a

benn, eur c'hristen evel ne weler ket alies. Deski a reas d'ezan e relijion gwelloc'h c'hoaz eget d'ar re all, hag e lezas gantan levrioù santel da lenn, hag e lavaras d'ezan penos ober evit derc'hel an dud war an hent mat.

Goude ma 'z eas kuit Mikael an Nobletz, Fransez ar Su a voe hanvet da gabiten, da vestr, gand e genvroiz. Kregi a reas en e garg hag e poanias kerkent da zerc'hel tud an enezenn sentus ouz ar c'hentelioù roet d'ezo. Gwella ma c'hellas e talc'has lec'h ar person. Bep sul e veze graet prosesion, douget ar groaz, ar bannielou, kanet Litanioù ar Werc'hez.

Da c'houde e veze kanet pedennoù an oferenn: *Kyrie, Gloria, Credo*, ar ganerien rannet e daou rumm. Fransez ar Su a lavare peseurt gouelioù a veze er zizun, an deizioù yun ha vijil. Goude kreisteiz e veze kanet ar Gousperou ha lennet al liziri digaset gant Mikael an Nobletz. A-wechou Fransez a rae e-unan eur brezegenn war ar gouel. Da wener ar Groaz e vode an holl e kichen kroaz ar vered, hag e tisklerie ar Basion.

Evelse tud Enez Sizun a zalc'he mat d'o relijion, daoust ma n'o doa beleg ebet, ha 25 vloaz da c'houde, an Tad Maner hag e visionerien a gavas ar barrez e stad vat; evelato e lavarjont da eskob Kemper ne dlie ket beza lezet ar barrez-ze hep beleg. An eskob a glaskas, met ne gavas hini ebet da gas d'an enezenn. Ar veleien o doa poan o veva er barrez; gwir o doa da gemeret eur pesk eus pep bag a zistroe d'ar porz: setu eno o holl feadra; ar presbital n'oa nemet eur c'hoz toull tenval.

An aotrou 'n eskob a lavaras e stagfe eun tamm leve ouz parrez Enez Sizun, evit ma vije aesoc'h d'ar person beva. Beleg ebet ne voe kavet.

Neuze ar Jesuisted a zonjas e Fransez ar Su, diskibl Mikael an Nobletz, kabiten ha pastor an enezenn. Goude beza kemeret kuzul digant Mikael, e c'houlennjont ouz Fransez ar Su, ha plijout a rafe d'ezan beza beleg, evit sikour e genvroiz. Respont a reas e vije laouen, e sonje en dra-ze abaoe m'oa intanv, met n'en doa kredet lavaret ger da zen, rak ne ouie ket a latin ha n'en em gave ket santel a-walc'h evit beza beleg. Ar Jesuisted hen alias da vont da vanati Landevennek da zeski gand ar venec'h eun tamm latin hag ar skianchou sakr. Ne jomas ket pell e Landevennek, hag eun deiz e voe gwelet o tigouezout e Kemper, e ti ar Jesuisted, gwisket e martolod. Dont a rae da c'houlenn digand ar vikel vras aotre da reseo an Urziou Sakr. Ar Jesuisted a roas d'ezan eun tok hag eur vantell, evit ma vije gwisket dereat da vont dirak chalonied an iliz-veur. Ar re-man a c'houlennas digantan petra glaske. « Me eo Fransez ar Su, eus Enez-Sizun, el lec'h n'ez eus nag oferenn na beleg, hag e karfen beza beleget, evit rei ar zakramanchou d'am c'henvroiz. »

Ar chalonied a voe souezet o klevet an den-ze, tost da dri ugent vloaz, gwenn-kann e benn, o c'houlenn beza beleget. « Peseurt micher ho poa? », emezo. « Pesketaer abaoe 45 vloaz. » — « Ha desket hoc'h eus al latin? »

— « Lennet am eus e daou levr latin gwechall, met n'am oa ket amzer da studia, rak abred oun bet laket da gregi er rouejou. »

Ar chalonied a c'hoarzas hag a lavaras d'ezan n'en doa netra gwelloc'h d'ober eget distrei d'e rouejou.

Dilezel a reas ar Chalonied, tenval e benn, glac'har et e galon, ha setu m'en em gavas gantan eur chaloni all, an Tad Pinsart, a c'houlennas digantan eus pelec'h

e teue. Fransez a zisplegas d'ezan e istor. An Tad Pinsart, o welet e youl d'ober vad d'e genvroiz, leun a druez outan hag ouz e barrez, e bedas da zont a-nevez gantan da gaout ar chalonied. « Enez Sizun, eme an Tad Pinsart, a zo pell zo hep person, hag evit rei eur beleg d'ar barrez-ze, e c'heller gervel d'an Urz eur martolod koz, ha goude ma ve dister e zeskadurez, p'e gwir n'en deus ken c'hoant nemed ober vad d'e genvroiz. »

Graet e voe a-nevez goulennou ouz ar Su. Ar chalonied a lakeas etre e zouarn eul levr oferenn hag e zigoras war ar bajenn a oa enni an Aviel a ziskouez d'eomp Hor Zalver o rei da zant Per alc'houeziou ar Baradoz. Fransez a lennas mat an Aviel, gand eur vouez skler. Unan eus ar chalonied a c'houlennas digantan ha komprenet en doa ar pezh en doa lennet. Fransez a droas brao e galleg ar pezh en doa lennet e latin, hep fazi ebet. « Pebez pesketaer! a lavaras ar chalonied souezet. Meur a veleg en hon eskopti ne ouzont ket kement hag hen. » Goulennet e voe digantan ive an doare d'en em gemeret gand ar bec'herien er gador-govez, hag e respontas mat adarre. Roet e voe d'ezan neuze aotre da vont da Gastell da reseo an Urziou Sakr, rak n'oa ket a eskob e Kemper er mare-ze.

Levenez a voe en enezenn pa zistroas ar c'habiten gand ar garg a berson. Evel m'en doa gwechall sturiet mat e vag, e sturias ive eus ar gwella e barrez. An Aotrou Louet, eskob Kemper, pa 'z eas d'ober an dro evid ar Gonfirmasion, a zisklerias n'en doa kavet person ebet d'ober gwelloc'h deveriou e garg eget Fransez ar Su.

Prezeg a rae bep sul ha bep gouel, hag araok pe goude ar Gousperou e rae katekiz hag e teske d'an dud kantikou e vestr, Mikael an Nobletz. Hag ar beske-

taerien a gane ar c'hantikou-ze war ar mor da c'houde.

Bemdez e veze kalz tud en oferenn. Ar vartoloded, araok kregi en o labour, a yea d'an iliz, ha diouz an noz, distro d'ar ger, ez aent adarre. Bep miz e kove-saent o fec'hejou. Hag e renas ar peoc'h en enezenn. An dud en em gare, en em gleve etrezo, a veve eürus.

Seiz vloaz e voe Fransez ar Su person en Enez Sizun. Gand aon na jomfe adarre ar barrez hep beleg goude e varo, e kasas unan eus e nized, danvez eur beleg ennan, da studia da Gemper, da skolaj ar Jesuisted, evid en em brepari d'an Urziou Sakr.

Pa varvas Fransez ar Su, goude beza gouarnet an enezenn evel kabiten ha person, an holl a lenvas, e-vel p'o dije kollet o zad.

An niz a grogas neuze er stur hag a voe person e lec'h e eontr.

Pell zo abaoe m'eo tremenet dre Enez-Sizun Mikael an Nobletz hag an Tad Maner, met n'e ket ankouna-c'haet c'hoaz ar c'henteliou o deus roet. Ar barrez a zo eur barrez kristen eus ar re wella. An iliz, eun iliz nevez, a vez ato leun a dud d'an oferenn diouz ar mintin ha d'ar pedennou diouz an noz. Da zul, an holl, gwa-zed ha merc'hed, an eil rumm goude egile, a gan a greiz kalon d'an oferenn ha d'ar gousperou, ma z'eo eun dudi o c'hlevet.



Mikael an Nobletz e Douar-nenez (wardro ar bloaz 1618)

O tistrei eus Enez Sizun, Mikael a voe karget eur pen-nadig, gant aotrou 'n eskob Kemper, eus parrez Meilars, eur barrez vihan e kichen Pont-Kroaz, a oa neuze hep person ebet. Labourat a reas gwella ma c'hellas er barrez-se.

Met ne jomas ket pell eno, rak prezeg a ranke e lec'h all ive. Edo o vont da Gemper da gennerza an diskibien en doa gounezet eno, hag epad an hent e pede ar Wer-

c'hez da ziskouez d'ezan ar vro e c'hellfe enni labourat ar muia evit gloar Doue. Selaouet e voe e bedenn. Ar Werc'hez en em roas da welet d'ezan ske-dus holl, ha gant he biz e tiskouezas tour Ploare, tour uhel ha kaer, e kichen mor Douarnenez. « Galvet out, emezi da vont da labourat el lodenn-ze eus herez Sant Kaourintin. Bez leun a nerz-kalon en desped d'ar c'hroaziou e pezo da zougenn. Sikouret e vezi. »

Kerkent ar misioner a droas kein da Gemper hag a gerzas etrezeg ar vro nevez diskouezet d'ezan. Digouezout a reas e Ploare deiz Merc'her al Ludu. An iliz a oa leun a dud, pesketerien, labourerien douar, holl gwisket dister, ar pezh a blijas d'ezan, rak ne gare ket gwelet en ilizou tud o tenna lorc'h eus an dilhad kaer a zougant. Mont a reas da gemeret al ludu e mesk an dud all. Deuet er meaz eus an iliz, e taolas e zaou-lagad war Zouarnenez, al lec'h ma tlie labourat enn nan keit amzer.

D'ar poent-ze n'oa ket a barrez e Douarnenez. N'eus ket gwall bell c'hoaz abaoe m'eo bet distaget Douarnenez dioc'h Ploare.

Bez ez oa chapelioù aman hag a-hont, met an iliz parrez oa iliz Ploare.

Kalz bagou a oa neuze e Douarnenez evel hirio; pesketerien sardined a oa eleiz, ha dont a rae marc'hadourien eus a bell, eus ar Spagn, ar Portugal, an Itali, da brena pesked da Zouarnenez.

Mikael an Nobletz, goude beza resevet al ludu e iliz Ploare, a yeas da Gemper, d'ober eun dro er gerze. Distrei a reas evit mat da Zouarnenez da lun an Dreinded, ha kerkent e stagas d'al labour. Aotre a voe roet d'ezan gand an aotrou person, Yann Capitaine, en doa anavezet e Konk-Léon.

Div eur oa goude kreisteiz. Eur c'hloc'h a voe kle-vet o seni: kloc'h santez Helena, eur chapel e kichen ar mor. O veza n'oa en deiz-ze na gouel na netra, an dud a voe souezet, hag a gredas edo an tan-gwall en eun tu bennak.

Dont a rajont niverus d'ar chapel, da c'houzout pe-tra a oa a nevez. « Aon hoc'h eus rag an tan, a lavaras d'ezo ar misioner. Met eun dra all zo hag a dlefe ober muioc'h a aon d'eoc'h: barnedigez Doue Araok pep tra e rankit en em ziwall diouz tan an ifern. Evit-se e tleit deski ho relijion, beva santel, ober pinijenn. » Hag e roas kerkent d'ezo eun nebeut kentelioù evit diskouez penos beva e gwir gristenien.

An dud, souezet, a zelaouas beteg ar fin, met, deuet er maez, ec'h en em lakjont gand ar misioner: « Sur awalc'h oa eur beleg foll! Dont evelse, e kreiz an deiz da zirenka an dud, d'ober d'ezo dilezel o labour! Chê! Spontus oa! »

Unan bennak evelato a voe skoet e galon. Hag eur beleg, Anton ar Pennek, a zavas e vouez da zifenn Mikael an Nobletz. « N'e ket traou diskiant, emezan, met traou fur meurbet en deus lavaret d'eoc'h. »

An aotrou Pennek a oa eur beleg hep parrez, o chom e Douarnenez. Re droet oa gand ar gwin, hag a-wechou ec'h eve re. Met leal oa. Skoet e voe gant prezegenn Mikael an Nobletz hag her pedas da zont d'e di da jom ha da gemeret e brejou. Souezet e voe c'hoaz muioc'h, pa welas pegen reizet oa war an debri hag an eva. Gounezet e voe, hag ec'h en em roas d'ezan evel eun diskibl d'e vestr. Epad 25 vloaz e sikouras anezan d'ober katekiz ha da zeski ar pedennou d'ar re vihan ha d'ar re vras.

E Douarnenez an dud a oa dizek bras war o relijion. Kalz n'oant ket gouest da lavaret ar Bater penn

da bennn: Ober a reant ar c'hiz, hag e teuent d'an oferenn, met hep gouzout pebez tra vras oa an oferenn. Mikael en em lakeas da zeski d'ezo ar misteriou a dleer da anaout evit beza salvet, hag e tisplege d'ezo ar Bater, an Ave, ar Grèdo, ar Gonfiteor. E latin hag e brezoneg e rae d'an dud deski ar pedennou-ze.

E brezegennou da genta ne vezent ket prizet. An dud vras o doa evel mez o veza kemeret evit bugale, hag e klaskent ober goap eus ar misioner a hanvent ar *randoner*. P'e welent o pignât er gador, ez aent er maez. Mikael an Nobletz ne fall-galone ket evit-se. Bemdez ez ae da Zantez Helena hag e sone ar c'hloc'h da c'hervel an dud. Ma ne dostae den, e rede eus eun ti d'eun all da glask unan bennak. Eun deiz, goude beza sonet e gloc'h ha redet du-man du-hont, ne gavas nemed eur vaouez, Janed Sevaer, da vont d'e zelaou. Prezeg a reas evelato epad tri c'hart-eur, hag en eur echui, e lavaras: « Mogeriou an iliz-man a roio testeni eun deiz am eus graet gwella ma c'hellan evit deski hent ar baradoz da dud Douarnenez. »

Tud Douarnenez a reas evel m'o doa graet en o raok tud Konk: lezirek oant da glevet komzou Doue. Mat oant evel m'edont, a zontent. Ra vefent lezet e peoc'h.

Met ne vezint ket lezet e peoc'h. Ar misioner a zo deuet en o zouez a zo eur Breton penn kalet a lavar d'ezo ar wirionez, ha goude ma ve kasaüs d'o diskouarn. Kaer o dezo en em glemm, rei d'ezan an hano a *randoner*, a *zorser*, Mikael ne ehano ket.

Mont a rajont betek difenn ouz o merc'hed hag o bugale da vont da glevet Mikael. Met eun den brudet, Yann ar Moan hag e wreg, Klaodina Beleg, en em zisklerias a vouez uhel evid ar misioner hag a lava-

ras d'ar re all: « N'ho pezit ket aon da goll hoc'h amzer, ne vezot ket paouroc'h evit mont d'an oferenn ha da glevet ar brezegenn. Ni her goar. Ni zo bet o selaou katekiz ha prezegennou Mikael ha goulskoude a zo pinvidikoc'h eget araok. N'en em lezit ket da veza distroet gand ar goaperien hag an teodou fall. »

An daou zen mat-ze a viras ouz o c'henvroiz da zilezel Mikael an Nobletz. Heman a gendalc'he e labour: bemdez e prezege hag e rae katekiz e Santez Helena. A nebeudou e kreske niver an dud er chapel da glevet e brezegennou, hag abenn daou vloaz en doa gounezet ar bedervet lodenn eus tud Douarnenez.

Evit tizout muioc'h a dud, Mikael, goude beza kalz pedet ha pleustret, en em glevas gand an aotrou person, Yann Capitaine, diwarbenn an doare wella da c'hounit tud Douarnenez ha d'ober d'ezo deski o relijion... Lavarit d'ezo, eme ar misioner, e rankint hiviziken, dindan boan da jom hep tostât ouz ar zakramanchou, respont d'ar goulennou a vezo graet d'ezo var ar relijion. Ne vo goulennet diganto nemet ar pezh a dle pep kristen anaout: ar misteriou brasa eus ar relijion, gourc'hemennou Doue ha re an Iliz, ar pedennou e latin hag e brezoneg. »

An aotrou person a reas evel ma c'houlenned digantan hag a zisklerias er gador-brezeg e rankfe an holl, evit tostaat ouz ar zakramanchou, mont d'an ekzamin var ar c'hatekiz ha kaout eun testeni da verka oant desket a-walc'h. Hag e kargas Mikael, an aotrou Pennek hag eur beleg all d'ober ar goulennou en eksamin.

An dud a oa evel sebezet, pa voe gwelet Mikael o pignat er gador varlerc'h an aotrou person. « N'e ket dies, emezan, ar pezh a c'houlenner diganeoc'h. Gand

eun tammig poan e teuot buan da zeski misteriou ar relijion hag ar pedennou. Ha neuze, selaouit; me ho sikouro. Bep sul ha gouel e vezin diouz ar mintin e iliz Ploare ha d'ar pardaez e chapel santez Helena. Ouspenn-ze, er chapel-ze e rin skol diou wech bemdez, diouz ar mintin ha diouz an noz. Kompren a rit ne c'helle ket an aotrou person ober dishenvel dioc'h ma ra. Eur c'hristen a dle anaout e relijion. »

Prezegenn Mikael a roas fizians d'an dud, ha ne voe ket kalz o klask enebi. Dont a rajont d'ar skol gatekiz, ha niverus zoken, eus kêr hag ar meziou. Kement a deue; ma rankas ar misioner klask an tu da veza sikouret, ha setu aman penos ec'h en em gemeras. Ranna a rae an dud, ar merc'hed, ar wazed, e bandennou bihan, pemp pe c'houec'h, hag e lavare d'ezo deski eur gentel pe eur bedenn. Hen a zisplege buan ar gentel dirazo, hag a lavare: « Breman lavarit ken etrezoc'h war va lerc'h, ha bremaik e teuin da welet ha gouzout a rit. » Hag ez ae buan d'eur vandenn all.

Goude ar brezegenn diouz ar mintin, e c'halve ar re zesketa, e tislepe d'ezo eur gentel, ha d'ar pardaez, e rae outo goulennou dirag an holl; ar respont-chou a deue brao: « Gwelit, eme ar misioner, n'eo ket dies deski ar relijion. »

Al-wechou, e kemere kement a dud hag a oa a c'houlennoù en eur gentel. Pep hini a zeske mat eur goulenn hag eur respont ha da c'houde o deske d'ar re all.

Mikael ne gemere tamm ehan. P'en deze fin en iliz pe e chapel santez Helena, ez ae da glask an dud. Pa wele pesketaerien o kempenn o rouejou, e kerze d'o c'haout hag e rae d'ezo katekiz epad ma kendalc'hent o labour. Mont a rae dre an tiez da c'houlennoù

ha dont a rae an holl d'ar skol gatekiz, ar re vras, ar re vihan, ar zervicherien. Hiniennou a lavare a-wechou oa re bounner o spered evit deski kement a draou: « Nann, nann, eme Vikael; spered a-walc'h hoc'h eus d'ober ho marc'hajou, da baka pesked, da gempenn rouejou; n'e ket diesoc'h deski hent ar zilvidigez. »

Met setu aman eur c'hoari all. Ar besketourien hag an dud dister divar ar maez, goude beza grozmolet eun tammig, o doa sentet ouz o ferson. Met an dud vras, ar vourc'hizien pinvidik ne fellas ket d'ezo piega na dont d'an ekzamin, ha goulskoude o doa kement a ezomm hag ar re all. Ober a rajont zoken eur prosez d'an aotrou person dirak Barner an eskopti, o tamall d'ezan digas gizioù nevez n'oant anavezet e nep lec'h all... Petra? emezo. Gervel d'an ekzamin tud dimezet, tud koz zoken, evel ma vez galvet ar vugale! » Hag e c'houlennoù e vefe torret al lezenn douget gand an aotrou person.

Enebourien Mikael a yeas pelloc'h c'hoaz. Lavaret a rajont e veze kemeret arc'hant en ekzamin ha ne veze graet goulenn ebet ouz an dud a roe kalz arc'hant.

An aotrou person ha Mikael an Nobletz a yeas da Gemper da gaout ar Barner. N'o devoe ket a boan o tiskouez n'oa nemet geier ha fallagriez gand ar re o zamalle da gemeret arc'hant digand an dud. Hag evid an ekzamin, an aotrou person a zisklerias e tlie, evel pastor, rei deskadurez d'an denved fiziet ennan, ha n'en doa kavet netra gwelloc'h eget an ekzamin katekiz. Ar re binvidik, evel ar re baour, a dlie, emezan, deski o relijion, rak kement ha muioc'h a amzer o doa. E nebeut amzer tud Douarnenez o doa gwellaet en eun doare souezus o deskadurez kristen, ha n'oa netra all d'ober nemet kenderc'hel.

Ar Barner a gavas mat komzou an aotrou person, hag a lavaras d'ezan kenderc'hel.

Meur a berson all eus ar vro a reas evel e Douarnenez, hag er c'hiz-ze o farresioniz a zeskas en eur bloaz muioc'h eget n'o dije graet a-hent-all epad o buhez.

XIX

Mac'harit an Nobletz e Douarnenez

Petra c'hell ober merc'hed kristen

Enebourien ar misioner a jome leun a gounnar. Unan anezo, eun moter, Liminik e hano, a zeuas eun deiz d'e di, eur c'hleze en e zourn, da glask e laza. Eur wech all ez eas d'an iliz m'edo enni Mikael o prezeg, gant mennoziou fall adarre, met souezet e chomas o welet, a-us da benn ar prezezer, eun ael o tiskenn eus an Nenv hag o pignat a-nevez evel da gerc'hat sklerijenn Doue d'ar beleg. Kerkent e teuas keuz d'ezan hag e c'houlennas pardon dirag an holl.

Eun demezell a Romini a gemeras mein leun he zavancher da stlapa var ar misioner pa vije o tremen. Met koueza a reas klanv; he c'hlenved a badas bloaz hanter, hag e teuas da c'houlenn kuzul digant Mikael he alias da vont da Gemper da gaout eur medecin brudet. Met, e lec'h gwellât, e fallae bemdez. Neuze Mikael a lavaras e pedfe eyiti, hag antronoz e voe pare.

Pevar hailhon fall o doa graet o zonzj d'en em ziober eus ar prezezer o stlapa anezan er mor p'e welfent var ar ribl. Met ne gavjont tro ebet da gregi ennan. Eun all, eur bourc'hiz, Tudek Jouin, kounnaret ive ouz Mikael hag a zifenne alies ouz e wreg

mont d'ar prezegennoù, a yeas eur wech evelato d'e glevet, evit gouzout petra lavare. Gwelet a reas ive eun ael gwisket e gwenn a zehou d'ar beleg. Skoet e spered, e kontas an dra-ze d'an hailhoned fall, hag holl e teujont da veza mignoned d'an hini a glaskent laza.

Mikael a gendalc'he e labour gwella ma c'helle, heb aon rak netra. Met kaer en doa ober, ne c'helle ket ober a-walc'h, hag e c'halvas d'e zikour e c'hoar Mac'harit, chomet e Konk-Leon. Houman, ato santel, he doa kavet var he hent eun den yaouank, fur ha santel ive, he goulennas da bried. Mac'harit, hep lavaret ger na da Vikael na d'he c'herent all, a reas eur bro-mesa a briedelez, fizians d'ezi e c'hellfe sikour gwelloc'h ar beorien gant madou he fried a oa pinvidik. Oad awalc'h o doa o daou, hag o doa graet o zonj da veza eureujet e Brest dizale.

Er c'houls-ze eo e tigouezas gant Mac'harit lizer he breur. Emichans e kavas dies reseo al lizer er mareze, met senti a reas hag e teuas da Zouarnenez. He breur, n'en doa goulskoude klevet netra gant den, a c'houlenas diganti he gwalenn-dimezi. Mac'harit, souezet ha mezek ive, a stouas he fenn, a roas he gwalenn, a c'houlenas pardon hag a brometas ne zistrofe mui da Gonk. Ar bro-mesa a briedelez a voe torret.

Ar briedelez a zo eun dra vat. Met eur stad all a zo, santelloc'h: chom gwerc'h, da labourat gwelloc'h evit gloar Doue ha silvidigez an eneou. Mac'harit an Nobletz he doa gwechall graet he zonj da vev er stad-ze. En taol-man e kasas he zonj da benn, ha goude eur pennad, gand aotre he breur, e reas le da jom bepred gwerc'hez, d'en em voestla da Zoue. Ren a reas eur vuhez kalet, eur vuhez a binijenn. Evit ti

n'he doa nemet eun tamm kraou, ne zebre nemet boued dister, bara heiz gand eun tamm yod hag eur banne laez. En em wiska a reas evel merc'hed Douarnenez, var he c'horf e touge eur gouriz reun ha teir gwech ar zizun ec'h en em skourjeze. Ha kennezet dre ar bedenn hag ar binijenn, ec'h en em lakeas a-zevri d'ober katekiz evel m'he doa graet e lec'h all, ha buan e c'hounezas tud Douarnenez. Digeri a reas eur skol evid ar merc'hed bihan evit deski d'ezo ar c'hatekiz da heul an traou all. Ar mammou a familh a zeue d'he gwelet, hag e kave an tu da rei d'ezo kenteliou fur var o deveriou ha var ar relijion.

Evit distrei ar yaouankiz dioc'h an dansou, e vodas, eur zulvez, meur a blac'h yaouank endro d'ezi, ha ganto e tansas, e kanas, e c'hoarias d'ar c'hartou, nann gand arc'hant, met gant spilhou. D'ar pardaez, araok o lezel da vont kuit, e roas da bep hini eun aval. Ar plac'hed yaouank a voe laouen bras eus o dervez, hag a gomzas endro d'ezo eus an demezell an Nobletz, eun demezell eus ar re wella. Ar plac'hed yaouank a gendalc'has da zont niverus d'he c'haout da zul. Abenn an trede sul, Mac'harit a lavaras d'he c'hamaradezed, goude eur pennad c'hoari: « Me zo o vont da ziskouez d'eoc'h breman eun dra n'oc'h eus ket gwelet c'hoaz. » Hag o c'hasas da zellet ouz an taolennou merket varno finvezioù diveza an den. « Sellit mat, emezi: aman e welot petra a c'hoarvez gand an den. Tremene a ra pep tra. Ar vuhez a zo berr; ar maro a sko an holl, goude ar vuhez-man e vezer eürus pe wall-eürus da viken. Me a anavez an doare da gaout eur plas mat er bed all, hag e fell d'in he deski d'eoc'h. »

Komz a reas evel ma ouie ober, hag e lec'h beza inouet, ar plac'hed yaouank o devoa plijadur hag a

zisklerias e teufent a-nevez d'he zelaou. Digas a rajont ganto o c'herent, hag holl e voent laouen o klevet kelennadurez Mac'harit an Nobletz. An dan-sou a voe a-nebeudou dilezet e Douarnenez ha tro var dro.

N'oa ket a-walc'h evit Mac'harit an Nobletz. C'hoantaat a reas sevel ar plac'hed-ze uhel er zantelez. Eun dervez e kemeras seiz pe eiz anezo, ar re a gave gouest da gompren, hag o c'hasas en eur c'halatez tenval; eno, o veza aet en eul lec'h distro, ec'h en em skour-jezas ker kalet, ma oa spontet he c'hamaradezed. Goude ar gentel-ze, e lavaras d'ezo: « En ifern ez eus poaniou kriz da c'houzanv d'ar re a varvo e stad a bec'hed marvel, hag er Purkator ive d'ar re n'o deus ket peurbet o dle da justis Doue. Ret eo ober pinijenn er bed-man pe er bed all. Dilezit eta plijadureziou foll ar bed, ha grit pinijenn evit beza salvet ». Gounezet e voent gand he c'homzou hag e kemerjont ar Groaz. Dilezel a rajont o gwalinier, o dantelez, o dilhad brao evid o rei d'an ilizou.

XX

Petra a c'hell merc'hed a galon

Mac'harit an Nobletz a gavas d'he zikour meur a vaouez all, ha dreist-holl teir intanvez. Domnat Rolland, Klaodina Beleg hag Anna Geraudren.

Ar genta, Domnat Rolland, a oa greg Tudek Jouin, an hini a oa difennet outi mont da zelaou prezegen-nou Mikael. Deuet da veza intanvez, ec'h en em lakeas d'ober katekiz. Ne ouie netra p'en em gavas ar misioner e Douarnenez, nag he Fater, na misteriou ar feiz, en desped d'he 43 vloaz. Met e skol Mikael e teuas e nebeut amzer da veza desket bras, desket evel eur beleg, war ar relijion. Bemdez e rae katekiz d'ar vugale; da zul ha da c'houel e tisplege d'an dud vras an taolennou. Mont a rae da welet ar re glanv, hag e lakae digas d'ezo o zakramanchou; var o zremen-van e veze en o c'hichen.

Klaodina ar Beleg a oa eur varc'hadourez pinvidik a-walc'h, met eun tammig lorc'hus evel peurlieusa ar vourc'hizien a c'hounit kalz arc'hant. Karout a rae an dilhad brao. He zi a rene mat, met ne zonje ket kalz en he silvidigez. Ne anaveze ket he relijion. Digemeret a reas ar misioner en he zi, e kichen ar Por-Ru. Ac'hano Mikael a gave tro alies da bignat e bagou ar besketaerien evit komz ganto hag o c'helenn. O klevet Mikael, o welet peger santel oa, Klaodina a voe souezet hag a c'hoanteas anaout mat ar relijion gristen. Ar sklerijenn a ziskennas en he spered, ha buan e teuas da veza desket a-walc'h evit gellout ober skol d'ar re all. O veza ma anaveze kalz tud, e reas muioc'h a vad.

A vandennou e teuent d'he c'hlevet o tisleaga an taolennou. Ne veze ket kavet a diez bras a-walc'h evit digemeret an holl, hag e veze ret boda an dud el liorzou pe var ar plasennou.

Gwelloc'h c'hoaz. An diou intañvez a yeas d'ober katekiz tro var dro, betek pemzek leo diouz Douarnenez. Ar pardonieu, neuze evel hirio siouaz! a veze re alies stlabezet gant c'hoariou divalo. Goude an ofisoù, goude ar brosesion, e veze dansou, hag ar vesventi o tont da heul, e veze graet kalz pec'hejou en deiz ma vije ret beza santel. Klaodina ar Beleg a ycas d'ar pardonieu, nann hepken evit pedi, met dreist pep tra evit kaout tro da skigna deskadurez kristen. Pa veze goulennet diganti petra a oa a nevez, e responte he doa keleier a briz da lavaret. Hag e tisplege an taolennou, hag o stage ouz eur voger pe eun dervenn goz pe en eul lab bennak. Da genta e c'halve ar merc'hed dirag eur beleg a rae goulennou outi, hag hi a zisplege ar pezh a oa merket var an taolennou. An danserien a dostae d'o zro hag a gleve kenteliou talvoudus meurbet.

En eur vont hag en eur zont he doa gwelet e korn an hentchou kroaziou diskaret. Eur zorserez eus ar vro he doa lavaret d'an dud ez oa tenzoriou kuzet dindanno, hag an dud o doa toulet da glask aour ha diskaret ar c'hroaziou. Klaodina a lakeas sevel a-nevez meur a hini anezo, kement ha ma c'hellas.

Klask a rae kement a c'helle talvezout da c'hloar Doue ha da zilvidigez an eneoù. Pemp yalc'h he doa evid he oberou mat; unan evid ar beorien, ar re all evit mad ar relijion. Bep sizun a lakae eun oferenn evid ar roue, da c'houlenn ar c'hras d'ezan da c'houarn gant furnez ar vro; eun oferenn en enor da zant Mikael Arc'hel ha d'an elez mat; eun oferenn en enor

da zant Jozef. Eur yalc'h a voe miret evit gellout loja ha beva ar relijiuzed a deufe da labourat da Zouarnenez.

Daoust d'ar pezh a rae evid ar relijion, an intañvez santel ne zileze ket he familh nag he c'hemm-werz. Sevel a rae he bugale e doujans Doue, leal oa en he marc'hajoù, hag an traou a droe mat eviti.

An intañvez Anna Geraudren oa evel brec'h zehou Klaodina ar Beleg. Eur wech bemdez ez ae dre ger da glask ar beorien hag ar re glanv o doa ezomm da veza sikouret, da c'houlenn ive hag unan bennak a oa maro. Kas a rae sikour d'an dud ezommek, chom a rae e kichen ar re a oa var o zremenvan, hag e seblie ar re varo. E tiez ar re baour e roe an dourn evit skuba an ti, aoza boued, kanna an dilhad, lakat urz e pep tra. Setu penos Mikael a zeske da verc'hed a veve er bed ober eul labour henvel ouz hini ar veleien. Pesketerien Douarnenez, o veza alies war ar mor, n'o doa ket a amzer da zeski o relijion. Talvoudus oa eta deski mat ar merc'hed, evit ma rafent d'o zro katekiz d'o bugale ha d'o gwazed, ma vefe an tiez e gwirionez kristen.

Evit beza direbech ha gellout kenderc'hel al labour boulc'het, ar misioner a gasas ar merc'hed desket gantan da Gemper, da welet an aotrou 'n eskob. An aotrou 'n eskob, Gwilhou Le Prestre, a reas goulennou ouz Glaodina ar Beleg ha Domnat Rolland. Ar re-man a respontas mat mat, hag a zisklerias ive ker mat all an taolennou digaset. « Kendalc'hit, eme an aotrou 'n eskob, met er maez eus an iliz; en iliz e c'hellot respont d'ar beleg a raio goulennou ouzoc'h divarbenn an taolennou. »

Hag an deskadurez kristen a gendalc'has da veza skignet e Douarnenez.

XXI

An taolennou

Mikael an Nobletz, desket bras var an holl skianchou a lakeas liva evitan taolennou merket varno pep seurt traou, evit rei aesoc'h da gompren d'an dud gwirioneziou ar relijion. Evel m'en deus lavaret ar pab sant Gregor ar Meur, an taolennou, skeudennou, a zo levr ar re ne ouzont ket lenn. Diskouezit da vugale eur groaz pa zeskit d'ezo mister ar Redampson: o welet skeudenn Jezuz-Krist toullet d'ezan gant tachou e zaouarn, e dreid, kurunet e benn gant spern, e komprenint kalz gwelloc'h ha buanoc'h petra en deus gouzanvet Hor Zalver evidomp.

Setu petra ijinias Mikael an Nobletz evit deski ar bobl. Ne rae nemet ar pezh en doa gwelet en ilizou: ar gwer a liou var ar prenestr a ziskouez d'eomp Hor Zalver, ar Werc'hez, ar zent hag a zeski d'hor spered kalz traou.

An taolennou, varno eur galon, a vez diskouezet hiri er misionou, n'int nemet eul lodenn vihan eus taolennou Mikael an Nobletz. Ouspenn daou ugent en doa. Setu amañ hanoioù lod anezo: Pemp dor Salomon; ar Marc'heg kristen; ar Groaz pe Hent an Nenv; ar C'huzulioù; Skeudenn ar bed; Babylon; Buhez Hor Zalver hag ar Werc'hez; ar Zakramant; ar Mab prodig; an Ifern; ar seiz vertuz eneb ar seiz pec'hed marvel, etc., etc.

E kartenn ar Groaz e weler eur groaz gand ar c'homzou-man: « *Qui vult venire post me*. An neb a fell d'ezan dont var va lerc'h a dle en em zilezel e-unan, kregi en e groaz ha dont evelse ganen. » Troad ar groaz a zo sanket er maen-badez, rak dre ar Vadiziant e teuomp da veza bugale da Zoue ha d'an Iliz, e troomp kein da Zatan, d'ar bed, d'ar c'hig, evit kregi er groaz. Tri hent a ya eus ar Groaz: unan a gleiz, bras ha ledan, eo an hent a gas da goll. Eun den a zo var an hent-se, o vale e kreiz ar bleunioù. Kredi a ra e c'heller mont d'an Nenv hep poania. Eur vad bennak a ra, met hep feiz na karantez, klask a ra dreist-holl meuleudi an dud. En em garet e-unan a ra, troet eo ouz traou an douar-man ha tec'het a ra muioc'h mui bemdez diouz an hent eün, an hent a gas d'ar zilvidigez. Er penn kenta edo e kreiz ar bleunioù, met dre ma z'a, e kav muioc'h mui a zrez hag a spern.

Eun hent, a zehou, a ya var eün, striz ha dies. Ar c'hristen mat a gerz dre an hent-se, e groaz gantan var e ziouskoaz evel Hor Zalver. Sikouret eo gand e Eal mirer hag ar grasou a zeu d'ezan, hag e kav skañv e groaz da zougenn. Kelenn a ra ar re all dre e gomzou hag e skouerioù, hag e tigouez e-harz treid Hor Zalver a astenn d'ezan e zourn hag hen digemer e palez an Tad eus an Nenv skeudennet gand eun ti kaer hag uhel; er prenestr eman ar zent a zell laouen ouz o c'henvreur nevez hag a gas d'ezan meuleudi.

Distag diouz ar Groaz, setu amañ eun hent all, ledanoc'h c'hoaz eget an hini heuliet gand ar c'hristen laosk. Hemañ eo hent ar baganed hag an heretiked. En traon, eur pagan a zo oc'h adori e fals-doue; uheloc'h eur ministr protestant, gant Levr ar Skritur Sakr en e zourn, a zo o teski geier d'ar bobl. O daou, kaset gand an diaoul, ez eont da dan an ifern.

Taolenn ar Marc'heg kristen. Setu aman penos e vezê displeget: ar marc'heg war e loan a zo skeudenn ar c'hristen en hent evit mont d'ar Baradoz. An hernez, ar stern, a verk ar reolenn, al lezenn gristen. An dibr eo ar binijenn; ar c'hentrou, an nerz-kalon; ar ranjennou, ar glanded; ar wesken, ar yun. An harnez houarn a zo var bruched ar marc'heg ha leun a lagadennou eo ar garantez gand he gourc'hemennou. An tok-houarn a verk ar zonj eus ar zilvidigez; ar goaf, an trec'h var an enebourien.

Taolenn ar marc'heg reder-bro. Kollet eo divar an hent mat; kemeret en deus hent an droug hag ar plijadureziou, hag e tigouez e ker vras Babylon, seiz tour var he mogerioù; ar seiz pec'hed kapital. Tremen a ra e amzer e kastell Roue an Hudurnez ha Rouanez ar Binvidigez, o deus teir verc'h: Gourmandiz, Avaristed, Ourgouilh. O magerez eo al Leziregez. Eur c'hi bihan a zo er palez, Tremen-Amzer e hano. Ar marc'heg a ziskenn beteg e c'houzoug e fank ar pec'hed. Met evelato skoet eo abenn ar fin gant gras Doue, ha keuz a zav en e galon. Pedi a ra, Doue en deus truez outan hag a zigas d'ezan grasou nevez. Koueza a ra klanv. Pareet eo gant eun ael a zizolo d'ezan e bec'hejou hag e gas da gastell ar Binijenn, savet var eur menez uhel ha dies pignat varnan. Gant gras Doue oc'h e zikour e c'hell pignat. Eun itron e kichen an nor, Kontrision, a ziskouez d'ezan eun aer o vont etre daou vaen da jench kroc'henn. Dor ar palez a zo hanvet Gwirionez hag an alc'houez Trugarez.

Ar marc'heg, hentchet gant gras Doue, a c'houlenn e pelec'h eman Santelez o chom, hag a red varlerc'h Karantez Doue. Uhel uhel e sav en hent-se, hag an daolenn a ziskouez petra zo d'ober evit tostât evelse ouz Doue.

Re hir e vefe komz euz holl daolennou Mikael an Nobletz. Pep seurt traou a oa varno, traou evit kelenn ar besketerien, an dud divar ar maez, an holl. Istor an amzer goz hag an amzer o tremen, an Testamant koz hag an Testamant nevez, an holl vicherou, micher ar medesin, an apotiker a zune ar c'hlanvour, an holl c'hiziou ha siou fall a veze diskouezet, an holl c'hiziou mat meulet. Penos e tle eur gwir gristen sevel diouz ar mintin, kinnig e zervez da Zoue, santellaat e labour, tec'het diouz an droug, gouzanv ar poaniou, pep tra a veze desket dre an taolennou.

Hag ar gwirioneziou desket evelse, dre an taolennou, a ziskenne dounnoc'h er spered hag a veze dalc'het koun anezo pelloc'h. Kement-man a zo anavezet mat gant ar re o deus klevet displega an taolennou epad eur mision bennak.

Kantikou Mikael an Nobletz

Ar c'hantikou a ra vad d'an ene, frealzi a reont ar galon, nerz a roont d'ar c'hristen da gerzout dre an hent mat.

Mikael an Nobletz a anaveze mat kement-se, hag, evel ma lavar d'eomp an Tad Maner, skriva a reas meur a gantig evit displega ar relijion gristen hag ar gwirioneziou skeudennet en taolennou. Kanet e vezent war doniou anavezet. Petra int deuet da veza? Marteze ez eus eun tamm bennak anezo c'hoaz er c'hantikou a ganer hirio.

Eur c'hantik d'ar Werc'hez a zo deuet betek en-nomp. Setu aman tri goublad anezan:

1

Me am eus choazet eur Vestrez
Eun Itroun hag eur Rouanez,
Ma c'halon a zo ravisset
O kontempli en he gened.

2

C'hwï eo, o Itroun Varia,
D'eoc'h en em suplian ar muia,
Pedit ho kwir Vab a druez
D'ober em andret trugarez.

Pec'her abuzet, sonj breman
Peger berr eo gloar ar Bed-man;
Gloar ar bed-man ne d'eo netra,
Nemet tremen ebiou ne ra.

N'oa ket brezoneg eus ar re wella, met henvel ouz ar brezoneg e veze skrivet en amzer-ze gand an dud desket. Geriou latin ha gallek livet e brezoneg, setu petra lakaent en o skridou.

Forz a ze. Ar c'hantikou a vez kanet hirio, evel kantik ar Galon Zakr ha kalz re all, a zo brezoneg fall enno ive, ha goulskoude e vezont kanet a greiz kalon gand an dud, hag e reont vad.

Kantikou Mikael a veze kanet e Douarnenez ha tro war dro. Ar merc'hed a rae katekiz o deske d'ar vugale, hag ar re-man o c'hane gant plijadur. Klaodina ar Beleg, evit deski gourc'hemennou Doue da labou-rierien Ploare, a yeas da gaout an aotrou Person hag a lavaras d'ezan: « Aotrou person, roit aotre d'in da zigas bep sul daou baotr da gana gourc'hemennou Doue en iliz parrez, pa vezo leun a dud, hag a nebeudou an holl a ouezo o gourc'hemennou. » Evel ma c'houlennas e voe graet. An dud a gave brao ar c'hantikou hag o c'hane gant plijadur. An diskan dreist-holl a zeskent buan, hag e veze klevet kana var ar mor, er parkeier, kantikou Mikael an Nobletz. « Sant Jerom, eme an Tad Maner, a skriv pegement a blijadur en deus bet en Douar Santel o klevet kana bemdez kantikou en enor d'an Dreinded, d'ar Werc'hez, d'an Elez ha d'ar Zent. Petra en devije lavaret o klevet nann en Douar Santel, met en eun douar goloet gwechall a spern, kana meuleudi Doue, var an

douar, var ar mor, en deiz hag en noz? » Ar mesaer o tiwall e zenved, ar vamm o luskat pe o neza, ar micherour, al labourer, ar pesketaer, an holl a gane kantikou, ma oa eun dudi o c'hlevet.

Mennoziou santel a jome evelse er sperejou ha tud Douarnenez a wellae bemdez; ar feiz, ar garantez, an holl vertuziou a greske en o zouez.

XXIII

Mikael an Nobletz, tamallet e Kemper, en em zifenn gant nerz

Re vat ez ae an traou e Douarnenez, re a dud a veze wardro Mikael an Nobletz. Kement a labour a rae e-unan ha dek all. Gand eun den evel dan n'oa ezomm person ebet e Ploare.

An aotrou Capitaine, person Ploare, goude beza bet da genta a du gant Mikael, a deuas a-nebeudou da veza klouar en e genver. Kredi a c'heller e savas eun tamm gwarizi en e galon.

Gwir en doa da lavaret d'ar misioner evelhen: « A-walc'h ho peus labouret breman em farrez; it breman da labourat en eul lec'h all bennak. » Ha Mikael en dije graet e bakadenn ha dilezet Douarnenez.

N'e ket evelse e reas an aotrou person. Er gador-brezeg e reas d'ezan gwall rebechou. Mikael a rankas, epad eur pennad amzer, mont da lavaret an ofereunn da Bouldavid. Ne voe ket a-walc'h evid an aotrou person. Tamall a reas d'an aotrou 'n eskob ar gizioù nevez digaset gand ar misioner, ha dreist-holl ar c'hiz da fiziout e merc'hed ar garg d'ober katekiz ha da zisplega an taolennou, rak ar merc'hed, hervez ma skriv sant Paol, e dle tevel en ilizou.

O welet tamall eur c'hiz he doa digaset kement a vad en dud ha desket d'ezo o relijion, Mikael a grogas en e bluenn hag a skrivas d'an aotrou Kerguelen, vikel vras ha barner an eskopti, eul lizer troet kaer meurbet hag a gase da netra ar rebechou graet d'ezan. Hir eo al Lizer. Ne roomp nemed an diverra.

« Aotrou ha Tad doujet e Doue,

Evit respont d'ar rebechou graet d'in, den all ebet, a zonj d'in, ne c'hell gwelloc'h egedon lakat var eün dirag ho taoulagd an traou evel m'emaint.

Evit ma tiskenne gwelloc'h gwirioneziou ar relijion e spered an dud, am eus graet dirazo goulennou ouz diou intanvez santel. Ar re-man a responte da genta. Neuze e raen goulennou ouz ar re all ive, e lavaren d'ezo respont d'o zro evel m'o doa graet ar merc'hed...

Da c'houde, gant gras Doue, am eus ijineta taolennou, livet varno pep seurt traou talvoudus evit sikour deski ar relijion. An intanvezed santel o deus, var va lerc'h, displeget an taolennou-ze d'an dud.

Ne gav ket d'in o dije evelse graet netra fall. Sant Paol a zifenn ouz ar merc'hed komz ha kelenn en iliz, ne zifenn ket outo respont d'ar goulennou graet outo gand eur beleg. — Ma tisplegont an taolennou en o ziez, en o horzou pe en eul lec'h all bennak er meaz eus an iliz, ne gav ket, d'in ez eus rebechou d'ober d'ezo. Ar skeudennou, evel ma lavar ar pab sant Gregor, a zo levr ar re ne ouzont ket lenn. Talvezout a reont da sklerijenna ar spered...

Pobl Israel a voe gwechall kelennet gant Debora, Judith ha re all. Er penn kenta eus an Iliz e welomp merc'hed santel o sikour an Ebestel ha prezegerien an Aviel.

Ha divezatoc'h santez Katell a Aleksandri, santez Katell a Zienn, santez Thereza, a zo bet sklerijennet d'ezo o spered gant Doue hag o deus roet da glevet kenteliou fur meurbet...

An doktored, leun a lorc'h gand o deskadurez, ne dizont ket deski d'an dud mister an Dreinded, mister an Inkarnasion, deveriou ar c'hristen, ar peden-

nou. An darn vrasa eus ar re a zo e karg a dro o daoulagad var an arc'hant da c'hounit, nebeut var o deveriou... Ha deuet eo da veza gwir komzou ar Profed Jeremi: « Gwelet e vezo ar vugale vihan o c'houlenn bara, ha den da rei d'ezo. » Ar vugale vihan o deus goulennet digand an doktored, digand o fersoned, bara an ene, an deskadurez kristen ha kalz eus an doktored o deus hep truez troet o c'hein evit mont da glask o flijadur.

En o lec'h Doue en deus lakeet e kalon diou intanvez santel youl da zeski d'ar re all ar pezh o deus desket o-unan dre an taolennou... Diskouezet o deus o zaolennou da aotrou 'n eskob Kemper en deus o aliet da gendere'hel... N'e ket hirio hepken e tilez Doue an doktored, an dud vras ha galloudus evit dibaba tud distar hag ober dreizo traou kaer. Sant Paol a lavare evelse ive er penn kenta eus an Iliz: « N'e ket, emezan, var an dud fur ha savet uhel en deus Doue tolet e zaoulagad, met var an dud distara, evit trec'hi ar re c'halloudus... »

D'ar veleien eo da gelenn, skler eo. Met, pa vez ret, re all a c'hell o sikour, tud lik ha zoken merc'hed. D'ar beleg eo da vadezi, met pa vez eur bugel e riskl da vervel, eun den lik, eur vaouez zoken, a c'hell hag a dle vadezi. D'ar beleg eo da zarra o genou d'an heretiked, met pa ne vez beleg ebet var al lec'h, eun den lik hag eur vaouez zoken a c'hell hen ober, evel ma welomp e istor an Iliz...

Kement-se a lavaran ive evid ar misteriou a ranker da anaout evit beza salvet. An darn vrasa eus ar bersoned ne reont nemet kana an oferenn hag an ofisou ha kemeret an arc'hant dleet d'ezo. Ma c'hoanta unan bennak anezo rei kelennadurez d'ar bobl, ker-kent eman ar re all o kaout abeg ennan...

Ar merc'hed santel, en eur zeski o relijion d'o c'henvroiz gant sikour an taolennou, o deus graet vad bras da galz a dud. Dimezelled a renk uhel o deus dilezet o familhou evid en em lakat dindan an intanvezed santel-ze, deski ganto an taolennou hag o displega da c'houde da re all.

Giziou nevez eo ar re-ze, a vez lavaret. Met, d'ezo da veza nevez, int bet talvoudus bras.

N'eus ket pell eo bet ijinet ar c'hartennoù evid ar vartoloded da ziskouez d'ezo o hent var ar mor, da verka e pelec'h eman ar c'herreg hag al lec'hioù risklus. Traou nevez int ive, ha goulskoude e reont vad d'ar vartoloded...

Risklus eo, a lavar lod, lezel ar merc'hed da gelenn ar re all war ar relijion. Met, ha n'eus ket muioc'h a riskl o lezel eur barrez a-bez hep deskadurez epad meur a vloaz? Ar re a zo karget da gelenn ar bobl ne gelennont ket pe en em ro da draou all. Ha n'e ket gwelloc'h, hervez ma lavar sant Jerom, kaout eur riskl bennak eget beza sur d'en em goll?

Arabat kredi eo eur riskl bras hag eur skouer fall lezel merc'hed da zisplega an taolennou. Ne lakan ket an taolennou etre daouarn n'eus forz piou, met hepken etre daouarn intanvezed santel o deus bet bennoz hag aotre an aotrou 'n eskob a Gemper. Hag ober a reont o labour brao ha gand ar brasa evez...

An aotronez eskibien a lez breman Leanezed da gelenn merc'hed ha paotrezed da zul ha da c'houel. Hon intanvezed a ra eveldo ha gant nebeutoc'h a riskl. Rak al leanezed n'o deus en o c'hichen beleg ebet d'o difazia ma vefe ret. Me, avat, ne lezan morse ar merc'hed da zisplega an taolennou dirak kalz tud, nemet eur beleg bennak a vefe en o c'hichen. Ar

beleg a ra goulennou, hag ar merc'hed a respont. Ma faziont, e vezont difaziet. Al leanezed a c'hell komz evel ma karont; ar merc'hed a gargan eus an taolennou n'o deus ket da gomz eus traou uhel ha dies. met deski a reont an doare da lavaret ar chapeled, da glask ar pec'hejou a vez graet an alies, da dec'het diouz ar pec'hed, da zic'hrizienna ar plegou fall, d'ober brezel d'ar wall-youlou, da zenti mat ouz gourc'hemennou Doue ha re an Iliz, ouz kentelioù an Aviel, da veva eur vuhaz santel evit kaout eur marc santel... Kaer a zo bet klask, ne gav ket d'in e vije bet kavet netra da rebech d'an diou intanvez-ze er gelennadurez a roont d'an dud...

An doktor bras, sant Thomaz Akin, a lavar ez eus pevar seurd kelennadurez; da genta, evit gounit ar baganed hag ar bec'herien; d'an eil, evit diskouez petra zo da gredi, penos reseo ar zakramanchou: an dra-ze eo labour ar beleg; d'an trede, penos beva e gwir gristenien: hennez eo labour ar paeroned e kenver o fihored; ar pevare, displega ar gwirioneziou uhela eus ar relijion gristen; labour an eskibien.

Ar seurd kenta, gounit ar bec'herien hag ar baganed, a zere ouz an holl, gwazed ha merc'hed. An holl a dle poania da zavetei o breudeur...

An doktor-ze a lavar c'hoaz e c'hell eur vaouez kelenn ar re a zo endro d'ezi, hag he deus evit-se a-wechou digant Doue grasou bras a furnez...

An holl draou-ze eo o deus va douget da c'houlenn digant merc'hed va zikour da rei kelennadurez kristen. Goulennet am eus kuzul digand an Tadou eus a Urz sant Fransez hag ar Jezuisted, digand an Tad Kintin, Dominikan. Kavet o deus mat ar pezh a raen. An aotrou 'n Eskob ive en deus roet d'in e aotre...

Ho pedi a ran da rei d'in hoc'h ali. Me a zento ouzoc'h. Ma teurvezit va aotrea, e vo diskouezet evelse n'eo na fall, na risklus, ar pezh a ran. Ma tisplij d'eoc'h va labour, n'am bezo tamm poan ebet o tilezel ar pezh am eus komanaset...

Evid achui, e tisklerian e fell d'in senti ouz ar re o deus da welet varnon, an eskibien, personed ar parreziou e labouran enno. M'o deus rebechou d'ober d'in war meur a dra, n'o dezo ket da rebech d'in beza bet dizentus en o c'henver. »

Ar vikel vras a voe skoet e spered gand al lizer-ze, ker fur, ker poellek, ken nerzus ive, a ziskoueze ker skler oa Mikael an Nobletz den an aotrou Doue, ne glaske nemet mad an eneou.

Skriva a reas d'ar misioner da lavaret d'ezan kenderc'hel e labour, hag e prometas ober gwella ma c'helfe evit tenerat spered an aotrou person.

Hag, e gwirionez, an aotrou Capitaine a lezas Mikael e peoc'h epad eun nebeut amzer.

Ar pezh a c'houlenne Mikael an Nobletz a zo breman, nann hepken aotreet, met aliet gand ar veleien hag an eskibien, ha da zul, en oferenn-bred, e lavarer eur *Bater* hag eun *Ave Maria* evid an dud vat a ra katekiz d'ar vugale epad ar bloaz. Seul vuioch a vezo a dud o teski katekiz d'ar re all, seul welloc'h ez aio an traou.

XXIV

Mikael a gendalc'h da labourat e Douarnenez

Frealzet ha kennerzet gant lizer ar vikel vras, Mikael an Nobletz a gendalc'has e labour, sikouret gand ar merc'hed en doa boazet da zisplega an taolennou. Meur a hini a enebe ato outan, met an darn vrasa a voe gounezet gand ar beleg-se, ker santel. Bras, treut, eun tal ledan, leun a zouder hag a garantez, ato o klask ober vad, e skoe kalon an dud. E brezegennou a veze leun a nerz, rak komz a rae en hano Jezuz-Krist, hag an dud e zelaoue gand evez. Peurliesia, e brezegennou a veze leun a nerz. Tri bennad. Er pennad kenta e tisplege eur wirionez bennak eus ar feiz, a harpe war ar skritur Sakr ha skridou an Tadou santel eus an Iliz; en eil pennad e tiskoueze peseurd kemm a zo etre al-lezenn gristen ha doare beva an dud. Hag en trede e lavare penos e tle ober ar gristenien evit trec'hi ar pec'hed ha beza din eus o hano. Eur beleg desket bras oa, ha ne lavare nemet traou a bouez, e gomzou a roe sklerijenn d'ar spered ha nerz d'ar galon.

Entanet gand ar garantez evid e Zoue, ne glaske nemet ober vad d'e nesa, d'e ene da genta, evel m'eo dleet, met ive d'e gorf. Ar re baour, an dud ezommek oa e vignoned vrasa. Kement en dezo a veze roet d'ezo. A-wechou ne zalc'he gantan nemet e zoudanenn; e zilhad all a veze roet da wiska ar paour. Kement gwenneg en dezo a veze dispignet evit sikour an dud ezommek.

Breman, en hor bro, n'eo ket mui stank an dud o deus ezomm da gaout aluzenn, met neuze oa bras niver ar beorien ha gwir beorien a oa.

Penos e rae Mikael an Nobletz evit beva? Pa veze ret, e c'houlenne e damm bara digand ar re o doa eun dra bennak, met en em ankounac'hât a rae e-unan evit sonjal er re all, er beorien. Gouzout a rae sikour ar re holl a veze en ezomm, ar re ne gredent ket goulenn. Kalz arc'hant a dremene dre e zaouarn, ugent gwech muioc'h eget n'en doa war e hano, a zisklerie an aotrou Pennek, ar beleg e zikoure.

Marteze dre vurzud eo e c'helle ingala kement a arc'hant endro d'ezan. Rak Mikael an Nobletz en deus graet meur a vurzud e Douarnenez, hag e c'heller o lenn e skridou an Tad Maner: klenvejou pareet, bugale varo distroet d'ar vuhez. *Yann a zo bet maro*, a veze graet eus unan hag a oa bet laket gantan da zont eus a varo da veo.

Ar zent, gant gras Doue, a c'hell pep tra. Nerz ar feiz a zo dreist muzul. « E gwirionez, eme Hor Zalver d'e ebestel, m'ho peus feiz, feiz start, ha ma lavarit d'ar menez-ze: « Sav alese hag en em stlap er mor; senti a raio; ha kement a c'houlennot gant feiz er bedenn a vezo roet d'eoc'h. »

Arabat eta beza souezet o klevet hano eus burzudou graet gant tud a feiz. An ebestel a reas burzudou en hano « Mestr, hag edoug ar c'hantvejou, ar re a zo deuet var o lerc'h o deus graet evelo gant galloud Jezuz Krist.

Mont a rae gwelloc'h gwella an traou e Douarnenez. An eneoù a en em zantellae, ar gizioù hag ar skouerioù fall a veze dilezet. Ar gelennadurez kristen en em skigne; an holl, da bevar bloaz, a ouie o fedennou* hag ar misterioù brasa eus ar relijion. E pep ti

ez oa eur chapelig gant skeudennou Hor Zalver, ar Werc'hez, ar Zent, dour benniget; ar pedennou a veze lavaret mintin ha noz. Eur c'halz a zeue d'an oferenn bep mintin, da gommunia bep miz hag alies bep sizun. Tud Douarnenez a veze breman anavezet e pep lec'h dre o doare vat, o stumm santel: pennou kristen o doa, hag hevelêp pennou a ra ato kaer an dud.

Mikael a zeske d'ezo ive kaout eur garantez vras evid ar Werc'hez, patronez Douarnenez. O vont en eun ti, e lavarent: « *Ave Maria* », ha tud an ti a responte: « *gratia plena*. »

Deski a reas d'ezo ive karet ar binijenn, ha dougenn eur gouriz reun. Meur a hini a voe ken douget d'ar binijenn, ma reas Doue dreizo traou burzudus. Eun intañvez, Eleonora Thepaut, a brederie alies war groaz Hor Zalver hag e gurunenn spern. Eun deiz e pedas Hor Zalver d'ober d'ezi gouzanv ar poaniou en doa gouzanvet p'edo ar gurunenn war e benn. Doue a roas d'ezi he goulenn. Epad 12 vloaz, bep gwener hag en deiz araog eur gouel bras, Eleonora a c'houzanve en he fenn poaniou skrijus, evel pa vije bet eur mi-maoued ouz hen toulla d'ezi.

Eun all, Mari Vourc'h, skoet gand eur gwall glenned, a gollas ar gwelet. Epad 20 vloaz e c'houzanvas ar boan-ze, n'e ket hepken heb en em glemm, met c'hoaz gand eul levenez vras, ha kemeret oa evid eur zantez gand ar re holl hec'h anaveze. Mikael an Nobletz a c'houlenne sikour he fedennou. Mari ar Vourc'h a dremene eul lodenn vras eus an noz o pedi, ha komz a rae ouz Doue gant kement a furnez, ma voe souezet ar re holl he c'hleve.


An Tad Kintin galvet gant Mikael an Nobletz da Zouarnenez

Mikael a wele eur wech an amzer e vignon, an Tad Kintin, hag alies e skrive d'ezan. Goulenn a reas digantan dont d'e zikour da Zouarnenez, rak re a labour a oa d'ober. An Tad Kintin a zentas raktal. Epad koraiz 1628 an daou vignon a labouras a-zevri. An Tad Kintin a brezege diouz ar mintin; d'ar par-daez e rae katekiz gant Mikael. An ilizou a veze bemdez leun a dud, ha da Bask e voe goueliou eus ar re gaera.

Er bloaz warlerc'h an Tad Kintin a gwiteas Douarnenez, galvet ma 'z oa da vont da Rouan, da guzul-meur an Dominikaned. Komz a reas e Rouan gant nerz eneb an dizurziou hag e c'houlennas derc'hel mat da reolenn sant Dominik. Selaouet e voe, en desped d'ar re a glaske e lakat da devel.

© tistrei da Vreiz, e kouezas klanv e Vitre, hag eno e varvas, evel ma varv ar zent, o tiskouez eur garantez vras evid e Zoue.

Mikael an Nobletz a lavare n'en doa anavezet den ebet ken douget d'ar binijenn hag an Tad Kintin. Glac'haret e voe o klevet oa maro e vignon, an hini en doa e zikouret ha frealzet ken alies. Digant piou hiziken goulenn sikour? Eur mignon gwirion a zo eun tenzor.



Mikael an Nobletz a ra anaoudegez gand an Tad Maner.

Kenderc'hel a reas da labourat. Met o welet e tostae ar gozni, ha skuiz, dinerzet, o sonjal e teufe avel fall da freuza ar pezh en doa graet, ec'h hirvoude hag e pede an aotrou Doue da gaout truez ouz Breiz... Va Doue, emezan, n'ankounac'hait ket ar bromesa ho peus graet d'in, breman ez eus 17 vloaz, da zigas eun Tad Jezuiist da labourat ganen ha var va lerc'h er vro-man a zo beuzet, eur pennad zo, e tenvalijenn ar maro. Mamm a

drugarez, am diwall abaoe va bloaveziou kenta, kin-nigit va goulenn d'ho Mab Jezuz, ma vezin selaouet, rak gloar ho Mab ha silvidigez an eneou a glaskan. »

Advec'h m'en doa peure'hraet e bedenn, ma klevas eur vouez o lavaret d'ezan: « It da Gemper, da skolach an Tadou Jezuisted. Eno eman an hini a zo dibabet gant Doue evid ho sikour ha kenderc'hel ar misionou e Breiz. Ar yaouanka eo. »

Kement-man a dremene e miz du 1630. Antronoz, mintin mat, Mikael an Nobletz en em lakee en hent da vont da Gemper. Digouezet e ti ar Jezuisted, e c'houlennas mestr-kelenner ar pempvet klas. Dont a reas eun Tad yaouank 24 bloaz, doare vat d'ezan, merk ar zantelez war e zremm. An Tad Maner oa. Mikael an Nobletz ne jomas ket pell gantan; ne lavaras ger d'ezan eus ar pezh a anaveze a-berz Doue, ne gomzas ket eus ar misionou, eus ar fizians en doa d'e welet o tont en e lec'h. Eur ger bennak divarbenn karet ha servicha Doue, setu hepken ar pezh a voe etrezo en dro-ze. A-walc'h oa evit Mikael. Beza gwelet an Tad Maner, gouzout ez oa unan dibabet gant Doue da genderc'hel ar misionou, a garge e galon a levenez, hag eürus bras oa o tistrei da Zouarnenez.

Eun nebeut amzer goude, an Tad Maner, aliet gant an Tad Bernard, e genvreur, hag aotreet gant e Renerien, a stagas da zeski ar brezoneg. E chapel Mamm-Doue, e c'houlennas sikour ar Werc'hez evit deski ar yez. Selaouet e voe e bedenn, ha tri dervez goude beza bet e chapel Mamm-Doue, e c'helle ober katekiz e brezoneg. Beleget e voe e 1637, hag epad ouspenn 40 vloaz e redo dre Vreiz, oc'h ober misionou er parrezioù.

XXVII

Mikael an Nobletz

roet urz d'ezan da gwitat eskopti Kemper

An aotrou Capitaine, person Ploare, goude lizer ar Vikel vras, a lezas Mikael an Nobletz e peoc'h epad eur pennadig. Met abenn eun nebeut bloaveziou e kavas abeg ennan adarre, ec'h en em lakeas d'e heskinat, hen hag an daou veleg e zikoure: an aotrou Pennek hag an aotrou Brelivet, kure Ploare.

Mikael a veze tamallet da lakat brezel, disparti etre an dud. Met, evel ma lavare d'en em zifenn, an Aviel a zo evel eur c'hleze a laka disparti etre an tad hag ar mab, ar mignon hag e vignon. Er penn kenta eus an Iliz edo an traou evelse ive. Lod a oa a du gant an Ebestel, lod all gant ar Juzevien. Ar re a gar Doue a dle ive karet o nesa, skler eo; met evelato e tleont teurel evez d'en em goll o tarempredi ar re fall, hag a-wechou eo eun dever evito dilezel a-grenn ar re fall, pa vez riskl d'ober eur pec'hed bennak.

Mikael a oa prizet ha karet gant al Leaned a brezege an Aviel e parrezioù Breiz. Evelato e voe kavet meur a hini da gaout abeg ennan, hag unan dreist-holl a lavaras diwar e benn pep seurt traou hag a glaskas zoken skei varnan a doliou baz. Al lean-ze a droas fall divezatoc'h hag a reas mez d'an Iliz.

Ar misioner a voe taget ive gant an drouk-sperejou. N'eo ket souezus: diframmet en doa diganto ke-

ment a eneoù ! Met, e kreiz e boaniou, e veze ive frealzet gand an elez ; ar zent en em ziskoueze d'ezan alies. Ar Werc'hez Vari, e vamm vat, a lavare d'ezan, p'en deze re a boan : « Mikaelig, na ouelit ket. »

Ar poaniou eo lod ar zent. Gouzanvet gant nerzkalon ha kinniget da Zoue int talvoudus meurbet, hag e teuont da veza evel perlez da gaerat ar gurunenn er Baradoz.

Mikael an Nobletz n'en deus ket a fin da c'houzanv. Eman o tont an deiz ma ranko kuitaat an dud a gare kement.


An aotrou Capitaine a roas an dilez eus e garg a berson Ploare, evit lakat en e lec'h e niz, nevez deuet eus skol-veur ar Sorbon e Paris. Heman a fellas d'ezan beza e-unan mestr er barrez, hag, o veza n'edo ket an aotrou 'n eskob e Kemper, ez eas da gaout ar vikel vras hag e lavaras d'ezan : « Va eontr en deus bet kalz d'en em glemm eus Mikael an Nobletz ; dies eo gouarn ar barrez keit ha ma vezo ar beleg-ze enni. Me a zo yaouank, yec'hed am eus, gouest oun da c'houarn ar barrez, da rei kelennadurez d'an dud. Kalz aesoc'h e vezo va labour pa vezo aet kuit Mikael an Nobletz. »

Ker brao e troas e gomzou, ma c'hounezas ar vikel vras. Heman a gasas eul lizer d'ar misioner da lavaret d'ezan distrei d'e vro, da eskopti Leon : « Prezeget ho peus d'ar re all e tleont senti. Roit breman skouer d'ezo ha sentit hoc'h unan. It da eskopti Leon, el lec'h m'oc'h ganet, ha na zistroit mui da eskopti Kerne. »

An den a oa karget da zigas al lizer a lavaras e berr gomzou petra a oa skrivet ennan, evit prepari Mikael an Nobletz d'an taol e skoe. Mikael a yeas d'an daoulin, a bokas d'al lizer gant doujans, e len-

nas penn da benn heb eur ger, eur glemmadenn, eneb an hini en doa e skrivet. Ne lavaras nemet ar c'homzou-man : « Peurc'hraet eo va labour er vro-man. Mont a rankan d'al lec'h m'oun galvet gant Doue. »

Pa glevas tud Douarnenez ar c'helou, e voe trouz. « N'e ket traou d'ober oa ar re-ze », a lavare an holl. Ret oa mont da Gemper d'en em glemm ha da c'hou-



Ti Mikael an Nobletz e Konk-Leon.

lenn lezel ar misioner e Douarnenez. Meur a hini etouez an dudchentil en em ginnige da vont da Gemper da gas goulenn an dud.

Mikael an Nobletz ne roas ket amzer d'ezo. Dastum a reas buan e dammig stal, hag en deiz-ze zoken e klaskas eur vag d'e gas da Konk-Leon.

C'hoarvezout a reas neuze e Douarnenez ar pez a dremenas gwechall e ker Milet gant sant Pol, pa lavaras an abostol da gristenien ar ger-ze n'e welfent

mui. An dud en em lakeas da lenva, hag a vriate Pol; poaniet dreist-holl o veza m'en doa lavaret d'ezo n'e welfent mui, e teujont d'e ambroug beteg ar vag.

E Douarnenez e voe henvel an traou. An holl a redas warzu ar porz, ha ne veze klevet nemet tud o lenva, evel pa vije c'hoarvezet eur gwall-eur bras ben-nak. Ar misioner ne c'hellas ket e-unan derc'hel e zaelou. Evelato e kavas nerz a-walc'h evit rei e genteliou diveza. « Va bugale ger, emezan, gouzout a rit, abaoe an amzer m'oun bet digaset aman gant Doue da labourat evit silvidigez an eneo, n'am eus esper-net na poan nag arc'hant evid ober vad d'eoc'h, evit diskouez d'eoc'h rouantelez Doue; epad 25 bloaz, e kreiz al labourou, an daelou ha pep seurt riskl am eus klasket deski d'eoc'h an tu da zont a-benn eus hoc'h holl enebourien ha da c'hounit an eürusted peurbadus. Eürus e vijen bet o tispign ar pez a jom ganen c'hoaz a vuhez o kenderc'hel d'ho kelenn en hoc'h ilizou hag en ho tiez, o teski d'eoc'h ober fae war ar bed, teurel evez ouz e fals-lavariou, lakat en ho kalon gwir garantez evit Doue hag an nesa. Da vihana, va bugale ger, selaouit va c'homzou diveza, a zo komzou Hor Zalver e-unan: « En em garit etrezoc'h; karit ar re o deus kasoni ouzoc'h, bennigit ar re a daol malloz warnoc'h; grit vad d'ar re a ra droug d'eoc'h, pedit evito; ra viot evelse dishenvel, nann hepken diouz ar re n'o deus ket a feiz, met ive diouz ar gristenien laosk ne fell ket d'ezo kregi a dro-vriad e kroaz Hor Zalver... Ar wech ziveza eo d'eomp d'en em welet war an douar-man, va bugale ger, met en em gaout a raimp unanet e baradoz Doue, el lec'h m'omp galvet gand Hor Zalver ker mat, ha gand e Vamm a zo ive hor Mamm d'eomp holl. Pedi a ran a greiz kalon ar Mab hag ar Vamm da jom ganeoc'h

ha da veza ganen ive epad va beach. En hano an Tad, ar Mab hag ar Spered-Santel. »

E vennoz a roas d'ezo neuze hag e pignas er vag a dlle e gas pell eus Douarnenez.

An dud a dostae outan, a astenne o daouarn, a lenve, a zifronke, a grie, m'oa eun druez. Chom a rajont troet ouz ar mor da zellet ouz ar vag a gase o zad d'an harlu, hag o tistrei d'ar ger ne gomzent nemet eus ar beleg santel, mignon ar re baour, mignon an holl. Peb hini a rae e veuleudi.

An dra-man a dremene e 1640. Mikael an Nobletz en doa neuze 63 bloaz. Skuizet oa gand e binijennou. N'eus forz. Labourat a raio c'hoaz keit ha ma c'hello ober.

XXVIII

Mikael an Nobletz e Konk-Leon

Teir gêr en doa karet dreist ar re all, evel ma lavare alies: « Montroulez, Konk-Leon ha Douarnenez. »

Digouezet a-nevez e Konk-Leon, peger glac'haret bennak ma z'oa, daoust m'edo ar gozni o tont, daoust m'oa brevet e gorf gand al labour hag ar pinijennou kalet en doa graet, evelato ne gollas ket e nerz-kalon hag e stagas adarre d'al labour e Konk hag er parrezionou tro var dro.

Bemdez e rae katekiz, ha prezegennou, a-wechou er chapelou, a-wechou en tiez. Evit lakat da badout, goude e varo, ar c'hiz da rei kelennadurez kristen, e poanias da c'hounit beleien ar parrezionou. Ar re-man o doa evel aon an eil rag egile, evel mez oc'h ober dishenvel dioc'h ar re all. Gounit a c'hellas evelato person Ploumoger, an aotrou de La Coste. Tra souezus! Heman ne anaveze ket ar brezoneg, hag an draze a c'hoarveze neuze alies a-walc'h. Meur a berson a veze hanvet e parrezionou bras a Vreiz hep gouzout ger brezoneg ebet. Bet oant o studia e Paris pe en eur gêr all, hag oant desket bras, doktored, met ne dalvezent netra en hor parrezionou, rak kenta dever ar beleg eo kelenn, prezeg, kovez, ar pezh ne c'heller ket ober hep gouzout yez an dud.

Person Ploumoger en em lakeas da zeski ar brezoneg hag a c'hellas, abenn eur pennad, kelenn e barresioniz ha kristenien ar parrezionou all.

Mikael an Nobletz a glaske ive tud lik, gwazed ha merc'hed, d'ober katekiz. Setu aman istor unan eus ar merc'hed-ze, Janned ar Gall, a gavas e Konk. Ar misioner a veze bemdez, kouls lavaret, o welet eun intanvez paour, a oa klanv hag o chom e maner Tremaria, e kichen Konk. An intanvez-ze he doa eur verc'h a 21 vloaz, krenv meurbet, hag a labourer er parkeier evel eur gwaz. Met dizesk oa. N'oa ket bet gellet lakat en he fenn ar « Bater ». Ar vamm a lavaras da Vikael kaout truez ouz he merc'h ha deski d'ezhi he c'hredennou. « C'houi, emezi, eo tad an emzivaded. Fiziout a ran ennoc'h va merc'h. » D'he merc'h e lavaras goude: « Janned, setu aze an hini a vezo ho tad hiviziken; sentit outan gant doujans epad ho puhez. » Ar misioner a gemeras ar garg fiziet ennan. Pedi a reas Janned da zont da Lok Maze da zeski he fedennou hag he c'hatekiz. Met Janned a glaske digareziou: re a labour he doa d'ober, teurel a ranke evez ouz he mamm, ha traou all c'hoaz. » — « Ha plijout a raio d'eoc'h, a c'houlennas Mikael, deski ar relijion, pa vezo galvet ho mamm gand an aotrou Doue? » — « Gwelet a rin neuze, eme Janned. Met ne c'hellan ket rei va ger breman. » — « Mat, ho mamm a varvo d'an trede dervez eus ar c'henta Koraiz. Me glask a-nebeudou ho lakat da anaout Doue hag ar relijion. Evid ober tan, e laker tammouigou keuneud, hag e krog an tan enno, hag a nebeudou e sav eun tan bras. C'hoant am eus d'ho lakaat da bleustri war ho relijion hag am eus fizians e peur-c'hraio Doue al labour, hag e lakaio en ho kalon eur c'hoant bras d'e garet ha d'e zervicha. »

Janned ar Gall ne reas ket kalz a van ouz komzou Mikael. Dont a reas an trede dervez eus ar c'horaiz, hag he mamm n'oa ket falloc'h. Goude mern, Janned

a yeas da Lok-Maze da lavaret d'ar misioner edo he mamm evelkent. « Petra a rit aman? emezan d'ez; it buan d'ar gêr da zebelia ho mamm a zo maro. » — « Piou en deus gellet lavaret d'eoc'h an dra-ze? Me a zo o tont war eun eus ar ger, ha n'am eus gwelet den dre an hent. »

Distro d'ar ger, Janned a gavas he mamm maro, evel m'oa bet lavaret d'ez. Goude an anterramant, Mikael a boanias da glask d'ez eun plas e ti an demezell Fontenay. Ne vefe ket paet evid he labour, met amzer he defe da zeski he relijion.

Ne voe ket aes lakat relijion da ziskenn er penn kalet-se, a ankounac'hae epad an noz ar pez he deze desket epad an deiz. « Ho labour a gollit, a lavaras da Vikael eun iiroun eus a Gonk; hounnez n'eo mat nemet da labourat an douar gand an ejenned. » — « Petra lavarfec'h, a respontas ar misioner, ma teufen da ziskleria d'eoc'h e vezo gouest d'ho kelenn eun deiz hag e vezo kinniget arc'hant d'ez evit kelenn ar re all? »

An demezell Fontenay, eus he zu, a glaske derc'hel he matez muia ma c'helle, rak kement ha diou e labour. « Gwelet a rez, a lavare da Janned, ne c'hellez deski netra. Perak terri da benn ha mont da zelaou Mikael? Hennez a zo kollet gantan e spered mat. An holl e gemer evid eur randoner. » Met Janned he doa bolonte vat; ne reas van evit klevet ar gwall-gomzouze, hag e kendalc'has da zont d'ar skol. Evel ne ehane ket he mestrez d'he hegasi, ez eas, war ali Mikael, d'ar skol da Zouarnenez gand an intañvez santel hon eus komzet anezi uheloc'h, Domnat Rolland.

C'hoar Mikael, Marc'harit an Nobletz, a oa maro d'ar poent-se. Goude eur vuhez santel tremenet o kelenn ar re baour, oc'h ober vad, o pedi hag oc'h en

em rei d'ar binijenn, e reas eur maro santel, hag e c'hellomp kredi he deus bet digant Doue eur gurunenn gaer er Baradoz. He breur n'ez eas ket d'he gwelet war he zremenvan; re a boan en dije bet, a lavare, rak eur galon dener en doa, ha karantez vras en doa evid e c'hoar Mac'harit. Met, me gred e kave dies dreist-holl mont da Zouarnenez, o veza m'en doa bet urz da vont kuit. O tistrei, zoken evid eun nebeut derveziou, en dije adarre laket tud Douarnenez da zont d'e gaout, hag en dije bet adarre rebechou, mar-teze.

Pa glevas edo he matez o vont d'ar skol da Zouarnenez, an demezell Fontenay, e kounnar o veza ma kolle eur vaouez ker mat da labourat, a lavaras d'ez pep seurt traou p'edo o vont kuit eus he zi ha zoken e roas d'ez eur javedad. Diwarbenn Mikael e tibunas ive eun aridennad geier. Mikael, pa glevas petra a oa tremenet, en em ziskouezas rust e kenver an demezell Fontenay, rak dleet oa. « Gwall draou ho peus lavaret, emezan, diwarbenn komzou Doue hag ar re a zo karget d'o frezeg. Klasket ho peus difenn ouz eun emzivadez fiziet ennon-deski relijion Jesus-Krist. Ne c'hellan ket skei warnoc'h evel m'ho peus grêt var ho matez. Met, o veza m'eo geier kement ho peus lavaret da Janned ar Gall, ra jomot mut betek fin ho puhez, evit silvidigez hoc'h ene. » Ha kement-se a c'hoarvezas.

C'houec'h miz e chomas Janned er skol e Douarnenez. Lakaat a reas he foan, hag e teskas mat he relijion. An taolennou a zisplegas ive. Kompren a rae an traou kaer eus ar relijion, ha mall he doa da ranna gand an dud all an tenzoriou a oa laket etre he daouarn.

Galvet da Gonk gant Mikael an Nobletz, e voe kaset

da Gastell da c'houlenn digand ar vikel vras aotre d'ober katekiz. Ar vikel vras, an aotrou Guillermin, doktor eus ar Sorbon, Paris, n'oa ket troet da rei d'eur vaouez divar ar mêz aotre da zeski ar relijion d'ar re all. Evelato en doa c'hoant gouzout peseurt deskadurez he doa Janned ar Gall, hag e reas goulennou outi. Ar responchou a voe ker skler, ken eñn, ma voe souezet ar vikel vras, hag e roas aotre d'ezi d'ober katekiz d'ar merc'hed, hag ive da respont dirag an holl, da zisplega an taolennou, pa vije eur beleg bennak var al lec'h oc'h ober goulennou.

Janned ar Gall a grogas en he labour e Konk, kenteliet hag hentchet gant Mikael. Brao ha freaz e tisplege an traou, hag e plije d'an holl. Mont a rae da welet ar re glanv, ar re var o zremenvan. Entent a reas ouz he mestrez koz, an demezell Fontenay; houman a c'houlennas pardon diganti hag a varvas tri bloaz goude, preparet mat d'ar maro, met mut beteg ar fin.

Mikael an Nobletz a lavaras da Janned ar Gall he defe da vont pell eus Konk, d'ar parrezion a vefe enno misionou, rak gwelet en doa e Kemper eul lean yaouank a dlie prezeg dre Vreiz, met nag hen nag ar re a vefe gantan n'o defe den da aoza o boued d'ezo. Hi, Janned, a gemerfe ar garg da aoza boued d'ezo epad ma labourfent en iliz. Hag e lavaras d'ezi deski aoza boued. « Penaos e c'houezit kement-se? » a c'houlennas Janned. — « En eur mellezour, emezan, eo e welan an traou. »

Janned a zisklerias n'he doa c'hoant ebet da vont da redek hent evelse, eus an eil parrez d'eben gand aon da veza kemeret evid eur c'halouperez. Nebeut amzer goude e voe taget gand ar vosenn ha war ar poent da vervel. Mikael a yeas d'he gwelet: « Grit le,

emezan, da vont da visionou an hini a zeuio em lec'h, evid e zervicha ha labourat dre-ze evit mad an eneou. » Senti a reas ha kerkent e voe pareet.

Evel a weler, Mikael n'en doa aon nemet rag eun dra: aon na vije ket kendalc'het ar misionou goude e varo, hag e prepare an amzer da zont. Kempenn a rae an hent d'an Tad Maner. Hag ive klask a rae a bep tu kristenien gouest d'ober katekiz. E kement lec'h m'eo tremenet, en deus savet evelse eleiz a dud evit deski katekiz d'o breudeur. Eus ar vein o zenne, eme an Tad Maner, hag ar re ziskiant a lakee da gelenn ar re all.

XXIX

An Tad Maner e Konk-Leon

Mikael an Nobletz, goude beza bet lakeet gand an dimezell Fontenay er mêz eus an ti he doa e Lok-Maze, a gavas lojeiz e ti Vac'harit ar Gak, eun intañvez eus Konk. Houman her gwele bemdez o poania d'ober skridou var ar relijion, a lavaras d'ezan eun deiz:

« Goude ho maro, ar skridou-ze n'o dezo talvoudegez ebet mui. Tolet e vezint en tan. » — « Nann, eme ar misioner; servichout a raint d'an hini a zeuio war va lerc'h. Eur mab am eus e bro Frans hag a raio misionou em lec'h. Eul lean eo eus kompagnunez Jezuz. P'edo c'hoaz e skolach Kemper, am eus bet anaoudegez oa galvet gant Doue. Araok dont d'eomp, e vezo e riskl da vervel, met parez a raio. Da c'houzanv en dezo eveldon, met muioc'h a frouez e eosto eget n'am eus graet. »

An Tad Maner a oa neuze e Bourj, o studia ar skianchou sakr araok beza beleget. E genvreur a Gemper, an Tad Bernard, a skrive d'ezan heb an amzer hag a lavare ez oa misionou d'ober e Breiz. An Tad Maner ne ouie e pe du trei. C'hoant en doa da vont da visionou ar C'hanada. Neuze e koezas klanv ha gwall glanv. Da noz Nedeleg en devoe eun hunvre: kaout a reas d'ezan e touge war e gein korf eur plouezad eus

bro Gerne. Pa zibunas, hen hag a vije bet en deiz araok laouen o vervel, a c'houlennas digant Doue ar pare, hag araok digemeret korf e Zalver digaset d'ezan, e reas le, dirag ar Zakramant, da dremen e vuhez oc'h ober misionou e Breiz. En em erbedi a reas ive ouz ar Werc'hez, ouz elez ha sent Breiz, sant Eozen hag ar re all, hag e skrivas d'e Zuperior da c'houlenn digantan rei e aotre d'al le en doa graet.

Kerkent ha m'en devoe ar c'hlanvour resevet ar gommunion, e voe gwelet skler oa bet selaouet e bedenn. Dont a reas d'ezan ar pare, hag ar vedesined a zisklerias n'oa pareet nemet dre vuzud.

Nebent amzer goude, an Tad Maner a voe beleget hag aotreet gand e Zuperior da zistrei da skolach Kemper.

Kerkent ha ma klevas oa deuet da Gemper, Mikael an Nobletz e bedas da zont d'e gaout da Konk-Leon. An Tad Maner a zentas evel ouz eun urz a vije deuet aberz Doue. Mikael an Nobletz a vriatas an hini a dlle kemeret e lec'h hag a skuilhas daelou a levez. Da genta e kovezeas d'ezan e bec'hejou. Da c'houde, e reas tro kêr, eur c'hloc'h gantan en e zourn, evit gervel an dud d'an ilizou. « Deuet eo, emezan, an Tad Maner, an hini a dle ober misionou e Breiz war va lerc'h. » Hag an Tad Maner a reas eur brezegenn. Da c'houde Mikael a ziskoezas d'ezan penaos e rae, hag her c'hasas da diez ar re baour, ar re glanv. Rei a reas d'ezan ive, evel ar merk eus e c'halloud, e gloc'h da c'hervel an dud hag an taolennou. D'ar pardaez her c'hasas en e gambr hag e tiskoezas d'ezan e gayerou, skrivet gwechall e Bourdel p'edo o studia. Hag e lavaras d'ezan: « Kalz labour ho pezo. Lennit ar Skritur Sakr, ha nann levriou all. » Hag e roas hano al levriou a dlle da studia o tistrei da Gemper.

En dervéziou varlec'h e c'hellas tremen c'hoaz kalz amzer gand e vignon, diskouez d'ezan e reolenn a vuez grêt var ali an tad Cotton, Jesuist ive, hag ec'h alias an Tad Maner d'ober misionou dreist-holl er parrezioù war ar mêz. Aze n'eus ket ezomm da gaout aon rag al lorc'h evel er c'heriou, etouez an dud vras ha pinvidik, a vez kemeret kalz poan ganto evit nebeut a frouez. « Deskit d'an dud, nann hepken ar c'hatekiz bihan, met ive an traou uhela eus ar relijion gant sikour an taolennou. Deskit dreist-holl d'ar gristenien ober fae war ar bed, rak netra gwelloc'h evit karet Doue hag an nesa. Lakit kana va c'hantikou, ha grit kantikou all a vezo enno an diverra eus ho prezegenou. Beachit dre zouar kentoc'h eget dre vor, evit kaout tro var an hentchoù da gelenn an dud a zigouezo ganeoc'h. Hag espernit ho yec'hed, na rit ket evel don, rak me am eus torret va c'horf araog ar poent. Pa vez re skuizet ar marc'h, e kouez er foz gand an den a zo war e gein. »

Goude ar c'henteliou-ze, e roas d'an Tad Maner eur c'hreunenn venniget da douch ouz ar re glanv ha d'o farea. Ar c'hreunenn a zeue eus ar Spagn. An Tad Maner, en doa eur wenonenn var e zremm, a voe parreet o lakaat varni ar c'hreunenn.

An Tad Maner a brometas senti ouz aliou ha kenteliou Mikael an Nobletz, hag araok kuitaat Konk, a c'houlennas e vennoz. Mikael a roas e vennoz a greiz e galon, met a c'houlennas ive evitan e-unan bennoz al lean yaouank.

Distrô da Gemper, an Tad Maner a voe laouen o klevet oa hanvet an aotrou Ronan al Louet eskob e Kemper. An eskob a oa araok ne gare ket ar misionou: n'oa ezomm ebet anezo, emezan, p'e gwir n'oa ket a heretiked en e eskopti. An Aotrou al Louet a gare

ar misionou hag a bedas an Tad Maner da brezeg en e eskopti.

Tremen a rae an amzer koulskoude, hag ar misionou ne zigorent ket c'hoaz. An Tadou Jezuisted eus a Gemper n'o doa ket a beadra a-walc'h evit paea ar mizou a vez gand ar misionou. O klevet kement-se, Mikael an Nobletz a skrivas da lavaret ez afe labour Doue en dro, en desped d'an dud ha d'an drouk-spe-rejou. Hag ec'h alie an Tad Bernard da vont gand an Tad Maner d'ar misionou.

An daou Dad a grogas en o labour. Da genta ez ajont er prizonioù, en hospitalioù, er ruiou bihan e Kemper hag er parrezioù tro var dro. Kalz tud a voe gounezet ganto. Eun dijentil, an aotrou de Molac, a roas 120 lur evid ar misionou. Eun den all a roas 20 skoed; dont a reas c'hoaz aluzennou, hag e voe dizale leve a-walc'h evit paea bep bloaz mizou daou visioner.

XXX

Pedi a ra an Tad Maner da vont da Zouarnenez

Nebeut amzer goude, Mikael an Nobletz a bedas an Tad Maner da vont da Zouarnenez. « Rak, emezan, ma chom eun tamm douar hep beza labourer eur wech an amzer, ne zougo nemet dreiz. »

Douarnenez a oa chomet e stad vat. An Tad Maner a voe laouen o welet feiz an dud, o zantelezh. Digeri a reas eur mision e Koraiz 1641, hag ar mision a voe kaer meurbet. Ober a reas kantikou da zisplega ar pedennou, gourc'hemennou Doue ha re an Iliz, an doare da govez ha da gommunia, hag e lavaras d'an dud: « Ma teskit mat ar c'hantikou-ze, e vezo eur prosesion vras ha kaer da gloza ar mision. » Ar c'hantikou a voe buan desket, ha kanet e voent a greiz kalon hag a-bouez penn, deiz ar brosesion a voe heuliet gant c'houec'h mil den bennak hag a voe kaer souezus.

Goudeze an Tad Maner a voe hanvet (Superior) (Rener) ar misionou e Breiz, hag an Tad Bernard a voe roet d'ezan da eil.

Mikael an Nobletz o galvas da Gonk, hag e teujont. Met e Konk, edont var douar Leon, hag oa ret kaout aotre eskob Kastel. An aotrou Cupif, eskob Kastel, en dije roet an aotre goulennet, ma ne vije ket bet distroet gand eur beleg eus an eskopti.

Lavaret a reas n'en doa ket ezomm a visionou en e eskopti: « Al leaned, emezan, a dle prederia gand al leaned, hag ar veleien gant labour ar parrezioù. » Met ar vikel vras, an aotrou al Louet, nevez hanvet da eskob e Kemper, a yeas da gaout an aotrou Cupif, a ziskouezas d'ezan ne glaske ket an daou Jezuist lemel o c'harg digant beleien ar parrezioù, met hepen o zikour epad eun nebeut amzer.

Ma ne felle ket d'ezan o lezel da rei eur mision e Konk, ra vijent da vihana aotreet da vont da enezennou Eusa ha Molenez. Ar pezh a voe grêt.

Evelato ar c'helou e vefe mision e Konk en doa lakaet kalz tud da ziredek a bep lec'h. Eus Douarnenez dreist-holl e teujont niverus, evit kaout tro da welet o misioner koz. Chom a rajont eun nebeut dervezioù e Konk, hag ec'h en em lakjont da gana ar c'hantikou desket gand an Tad Maner epad ar mision diveza. Tud Konk en em vode endro d'ezo da glevet ar c'hantikou. Mikael an Nobletz, eürus bras, a veze en o zouez, a gane a-unan ganto, hag a lavare d'e genvroiz ober eveldan.

Epad an amzer-ze an Tad Maner hag an Tad Bernard a labourer e Eusa hag e Molenez. Mikael an Nobletz a gasas Janned ar Gall d'o zikour. Houman a anaveze tud en enezennou, a vevs en o zouez, a zeskas d'ezo ar c'hantikou a anaveze hec'h-unan. An daou visioner a brezege hag a govesae epad an deiz. Kalz vad a voe grêt, ha da gloza ar mision e voe eur brosesion vras evel e Douarnenez.

O klevet peger kaer oa bet ar mision en enezennou, Mikael an Nobletz a lenve gand ar joa. Daoulinet en e doull-kambr, e trugarekeas Doue en eur lavaret: « Breman e vezin laouen o vervel, pa welan eo Doue anavezet, meulet hag enoret. »

Goude an amzer vras e teu ar wall-amzer. Da Vikael ive e teuas e kreiz e levenez eun tamm strafilh. An aotrou Cupif, digouezet e Lokrist evit rei ar Gonfirmasion, a glevas daou veleg eus a Gonk o tamall pep seurt traou da Vikael an Nobletz: galvet en doa tud yaouank eus eun eskopti all da zont da gana kanaouennou fall dre ar ruiou; hen e-unan a veze e kreiz ar ganerien, daoust d'e oad ha d'e zoudanenn; diskouez a rae taolennou diskiant d'an dud; direiza a rae ar peoc'h hag an urz vat; gwelet e veze re alies etouez ar merc'hed; ne lavare na ne gleve oferenn ebet, etc.

An aotrou Cupif, aes da douella, evit doare, a c'halvas ar misioner koz. Heman ne glaskas ket en em zidamall eus an traou diskiant ha fallakr lavaret en e eneb. An eskob e c'hourdrouzas.

D'an ampoent e tigouezas ive kure Eusa da lavaret he doa Janned ar Gall prezeget en enezenn, en desped da lezennou an Iliz. (N'he doa ket prezeget, met hepen, hervez an aotre roet gand ar vikel vras, respontet d'ar goulennou graet gand an daou visioner). An eskob a c'houlennas ive diskouez d'ezan an taolennou. Mat o c'havas, met, o veza ne anaveze ket ar brezoneg, e kondaonas ar c'hantikou, hag e tifennas o c'hana dindan boan da veza eskumunuget, hag e roas urz da ganerien Douarnenez da vont d'ar gêr.

Enebourien Mikael a oa eürus. Met hen ive a oa eürus, rak lavaret a reas evelhen: « Aon am oa da veza ankounac'haet gant Doue, rak, eur pennad 'zo an drouk-spered hag ar bed am leze e peoc'h; gwelet a ran breman n'oun ket ankounac'haet gant Doue. »

Antronoz ec'h en em gave bagou bras e porz Liogan, n'eo mui porz en deiz a hirio. Tud yaouank Eusa a zeue da Gonk evit beza konfirmet. Eur mil bennak

oant. Diskennet var an douar, ec'h en em lakjont e renk, daou ha daou, evel e prosesion, en eur gana kantikou an Tad Maner. An dud a rede d'o gwelet. Met, o klevet kantikou an Tad Maner, e lavarjont d'ezo: « Roit peoc'h, pe e vezoc'h eskumunuget. » Met kana a raent krenvoc'h krenva. « Ne vezimp ket eskumunuget, emichans, a lavarent, evit kana kantikou desket d'eomp gand an daou dad misioner. »

Dre eurvât e tigouezas var al lec'h eur beleg, an aotrou a Bentrez, unan eus chalonied iliz Folgoet, a oa oc'h ambroug an aotrou 'n eskob epad e dro. An aotrou a Bentrez a anaveze ar brezoneg, hag a welas n'e ket kanaouennou fall a veze kanet, evel m'oa bet lavaret dre c'haou. Goude beza klevet an aotrou a Bentrez, an aotrou 'n eskob a roas urz da ziskleria er gador oa bet faziet war Vikael an Nobletz, tud Douarnenez hag ar pez a ganent. Mikael an Nobletz a oa eur beleg santel, hag e c'helled senti ouz e genteliou. Benniga a eure ar c'hantikou nevez, ar re o doa o grêt, hag ar re o c'hane.

An daou visioner, o tont eus an enezennou, a dre-menais ive dre Gonk hag a voe digemeret mat gant an aotrou 'n eskob. Heman a lavaras d'an Tad Maner: « Goude Pask e teuot adarre d'am gwelet, hag e teskot d'in ar brezoneg »; hag, en eur vousec'hoarzin e kendalc'has: « Ha gwaz aze evidoc'h ma n'her grit ket, rak adarre e c'helfen koundaoni ho kantikou. »

An Tad Maner a zistroas meur a wech da Gonk da welet Mikael an Nobletz. Heman bep tro a veze laouen hag eürus, hag a gennerze ar misioner p'en deze bet da c'houzanv: « Mat eo, eme Vikael, Doue a zo ganeoc'h; ar poaniou a denn varnoc'h bennoz Doue. »

Al labour a yeas var araok. Misionou kaer a voe e Daoulas, Plougastel, Dirinon hag e meur a lec'h all. Tud a vilierou a gleve bep bloaz kelennadurez an Tad Maner.

XXXI

Bloaveziou diyeza Mikael an Nobletz

Mikael an Nobletz a golle bemdez eus e nerz. Ar gozni, ar skuizder, ar c'hlenvejou a zigase d'ezan poaniou kalet. Kinnig a rae e boaniou hag e bedennou evid an Tad Maner hag an Tad Bernard en em roe var e lerc'h d'ar misionou.

Met e-unan ne jomas ket dibreder. Keit ha ma c'hellas chom var e dreid, e kendalc'has da brezeg, d'ober katekiz, da govez. Mintin mat ez ae da lavaret an oferenn da Lokrist hag alies da Lok-Maze, da chapell Itron-Varia a C'hras, e kichen ar manati. Kenderc'hel a reas gant gras Doue, d'ober burzudou ha da anacut an traou a dremene a-bell. Gwelet a rae ar re baour, ar re glanv. Epad meur a vloaz ez eas bemdez da di eun den koz ha klanv a oa dilezet zoken gand e dud... Frealzi a rae ato an dud er boan, hag avechou o faree. Eun intañvez eus a Gonk, Klemans a Restour, he doa eur vrec'h koenvet hag hanter-vrein. Ar medesin a dlle dont da drouc'ha ar vrec'h-ze, met setu ma tigouezas Mikael an Nobletz; gand eun tamm glaourenn e tistrempas eun nebeut poultrenn, hag e lakeas al louzou-ze var ar vrec'h, oc'h ober sin ar groaz, en eur lavaret d'an hini glanv kaout fizians. Kousket a reas mat, hag antronoz oa kalz gwelloc'h. Met ar beleg a zifennas outi diskleria penaos oa bet pareet. « Ma c'houlenner diganeoc'h, emezan, penaos oc'h hiet pareet, c'houi a lavaro eo gant louzeier. » Abenn an trede dervez, ar vrec'h a oa pare mat.

Eun intañvez, Janned ar Pab, a oa ankeniet gand he mab, bugel a 12 vloaz, ne zistage ket an derzienn dioutan. Hen digas a reas da gaout Mikael; heman a reas sin ar groaz var dal ar c'hrouadur a voe ker-kent pareet.

Kalz burzudou all a reas c'hoaz.

E bedennou

An amzer ne dremene ket oc'h ober vad d'an dud a dremene o pedi, hag eul lodenn vras eus an noz ive a roe d'ar bedenn, avechou zoken an noz penn da benn. Kement ec'h en em blije er bedenn, ma ankounac'hae alies dont da gemeret e brejou. En em denna a rae el lec'hioù kuzet, evit na vefe ket gwelet gand an dud. Met goude e oferenn, en iliz, ne c'helle ket en em guzat. Ha meur a wech e voe gwelet evel pa ne vije bet mui var an douar, henvel ouz unan a zo o komz ouz Doue en e varadoz.

Kaout a rae da gomz ouz Doue gerioù souezus: « Me garfe, emezan, e ve va eskern evel kantolorioù aour, hag ezars ar mel a zo enno. Me lakfe an ezansse da zevi evid ho kloar, va Doue. » — « Oh! ma c'hellfen eus holl veradoù ar mor, eus holl c'heotennou an douar, eus holl draezennou an aotchoù, eus holl stered an nenv ober ken alies a deodoù evid ho meuli, me her grafe, o va Doue, rak ne c'heller ket ho meuli awalc'h. » — « Ma c'helfen kroui kant bed leun a Zerafined d'ho meuli, me her grafe, o va Doue. »

— « Laouen oun o veza n'eus netra en nenv na var an douar da c'hellout kreski ho kloar. N'ho peus ket ezomm eus ar grouadurien evit beza pinvidik-meur... Laouen oun o veza m'oc'h bras, fur, galloudek meur-

bet... Laouen oun o veza m'en em garit a bep amzer ha m'oc'h din da veza karet... Laouen oun, o veza m'oc'h meulet gand Iliz an douar hag Iliz an Nenv. »

Pleustri a rae var buhez Hor Zalver, dreist-holl var e boaniou epad e Basion hag e varo var ar Groaz.

Adaleg e vloavezioù kenta e kare ar Werc'hez, hag epad e vuhez he fedas a greiz kalon; bemdez e lavare e chapelled ha pedennou all d'hec'h enori.

Pedi a rae an elez hag ar zent. Pa brezege en eul lec'h bennak, e pede elez ar barrez, patroned an eskopti, santez Anna, an Ebestel, sant Jerom, sant Ignas, sant Dominik, sant Fransez Asiz ha re all c'hoaz, da denna varnan bennoz Doue evit gellout kas e labour da benn.

Karet a rae mont da bedi d'ar chapelioù ker stank gwechall e Breiz. E Konk, en e vloavezioù diveza, ez ae bemdez da japel santez Barba, da c'houlenn nerz hag ar c'hras da gaout eur maro mat. Er chapel-ze Doue a enoras e zervicher dre eur burzud kaer. Deiz gouel santez Katell oa, diouz ar mintin. Mikael, o vont er chapel, a welas ez oa poultrenn var an aoter a dlle an oferenn beza lavaret varni. O veza n'en doa netra da gas kuit ar bouldrenn, e kemeras en eur c'horn-tro, eul lilienn zec'h a oa bet taolet eno, hag ec'h en em lakeas da netaat an aoter. Met! tra burzudus! An dud a oa er chapel a welas al lilienn zec'h o nevezi, o rei bleunioù kaer. An itroun a Gatelan, kar d'ezan, a oa er chapel hag a c'houlennas digantan: « Ha teurel a rit evez ouz ar bleunioù kaer a zo en ho tourn? » — « «Ar bleunioù-ze, emezan, n'e ket d'in-me int, met d'ar zantez vras a fell da Zoue hec'h enori. » Ha goude beza lakeet al lilienn var an aoter, e taoulinas da bedi.

Ar re o doa gwelet ar burzud a gontas d'an holl petra a oa c'hoarvezet, ha kalz tud a ziredas d'ar chapel da welet al lilienn gaer.

Evelse e plije gant Doue enori e zervicher santel, an hini en doa dilezet pep tra evit beza holl d'ezan, an hini en doa troet kein d'ar bed ha kemeret evid e lod ar baourentez, ar poaniou, ar groaz.

Paour beteg ar fin

Betek fin e vuhez e vevas er vrasa paourentez. N'en deze peurliesha gwennege ebet. Debri a rae, evel an dud divar ar mêz, lêz ha bara du, bara heiz peurliesha. Yun a rae alies. Karet a rae loja en tiez soul, hag e di e Konk e oa eun ti dister.

Ne gemere aluzenn ebet evid e oferennou. D'an hini a ginnige d'ezan eun dra bennak e lavare: « Kasit an dra-ze d'ar beorien. »

Pinijennou rust a rae. Teir gwech ar zizun d'an nebeuta ec'h en em skourjeze. Dougem a rae eur gouriz reun. En e voutou e lakae piz pe vein vihan. Var ar c'halet e kouske, hag hepken peder pe bemp eur bep noz.

Ar zent o deus holl karet ober binijenn.

Dre deurel evez, pedi hag ober pinijenn, e talc'has kaer e ene ha glan e galon. Euz en doa ouz ar pec'hed lous, ha klevet a rae c'houez fall gand an dud en em roe d'ar pec'hed-ze.

Poaniou diveza

Evel pa n'en dije ket c'hoaz grêt awalc'h evit Doue, Mikael an Nobletz a gredas goulenn digand Hor Zilver kaout perz en e boaniou. Selaouet e voe e bedenn, hag eun deiz e lavaras da Janned ar Gall denet da gempenn e di: « N'am dilezit ket, emezan; a-raok

tri bloaz me a vezo seizet, hag ho pezo kalz poan gannen. Dalc'hit koun oc'h bet roet d'in gant Doue, ha ma teuit d'am dilezel, e kouezo varnoc'h malloz Doue. » — « Piou en deus lavaret d'eoc'h ho pezo eun hevelep klenved? » — « Ar Spered Santel. »

Araok ma c'hoarvezas gantan beza seizet, Janned ar Gall a skuizas gantan, hag eun deiz e kuiteas he mestr, en eur lavaret ne zistrofe mui.

Mikael a c'houzanvas pep tra heb en em glemm, heb ober rebech ebet da Janned ar Gall. He difenn a reas eneb ar re a wall-gomze anezi. Pedi a reas eviti, hag a-benn eur pennad Janned a zistroas ha ne zilezas mui he mestr.

O welet e tostae ar maro d'ezan, Mikael a reas e c'hourc'hemennou diveza da dud Douarnenez: « Ra vo ato en ho touez, emezan, unan bennak da lenn d'eoc'h va skridou ha va c'henteliou. Roit deskadurez kristen d'ho pugale, o lakit etre daouarn mistri kristen. Bezit leun a zoujans evid ar veleien, sentit ouz ar c'henteliou a roio d'eoc'h ar C'hapusined hag ar Jezusted. Grit aluzennou da zikour an Iliz hag ar relijion. Bezit ato unanet etrezoc'h dre liammou ar garantez. »

Dre destamant ive e lezas gant tud Douarnenez e daolennou (eul lodenn en doa roet ive d'an Tad Maner), hag e verke sklêr penaos ober evid o diwall hag etre daouarn piou o lakaat.

Gand e gerent e lezas eur voestig hag enni netra. Gwelloc'h eget arc'hant a lezas ganto: kenteliou fur dre skrid: « An aour, an arc'hant ha madou ar bed a zo brasa enebourien hor zilvidigez. Abalamour daze e lezan ganeoc'h netra.

Evelato, pedit evidon, hag eus va zu me a bedo evidoc'h. »

XXXII

Mikael an Nobletz seizet

Wardro gouel sant Mikael, 29 gwenngolo 1651, Mikael a voe seizet, d'ar mare m'en doa lavaret. Epad seiz miz penn da benn e chomas evelse, hep tamm nerz, henvel ouz eur bugel bihan a ranker da gas ha da zigas. Pell zo edo e stad vat da vervel. Met ar c'hlenved diveza e lakeas c'hoaz e stad welloc'h o rei tro d'ezan da c'houzanv ha da c'hounit bemdez evid ar Baradoz. Lakaat a reas skriva da Gempêr da eun Tad Jezuiست evit goulenn beza erbedet ouz sant Korantin, patron Kerne, rak ezomm en doa da veza kennerzet gant Doue.

War e wele e kendalc'has da labourat gwella ma c'helle evit silvidigez an eneou. E gerent, e vignoned, ar re a veze o kovez gantan, ha dreist-holl ar beorien a zeue d'e welet ha d'e glevet, hag e roe d'ezo e genteliou. Ar vugale vihan a gendalc'he d'en em voda endro d'ezan evit deski o c'hatekiz, hag eun dra gaer meurbet oa gwelet ar beleg koz, seizet, o kelenn eus e wele ar vugale vihan.

Unan eus e amzeien ha mignoned, Markiz Kergroa-dez, en devoe truez ouz Mikael, o welet peger paour oa e gambr. N'oa enni nemet eur bank da azeza, ennan paperiou ar misioner, eun trebez bihan, eur pod pri, eur skudell, eun asied hag eul loa brenn, diou skeudenn, var unan an Dreinded, war eben ar Wer-c'hez, hag eur pinsin evid an dour benniget. Ar

c'hlanvour a oa astennet var eur gwele striz, gand eur pallenn hepken. Ar markiz a ginnigas d'ezan e zigemeret en e vaner. Mikael, en eur vousc'hoarzin, a lavaras : « Pegement a rofec'h d'in evit troka ? » Ha da c'houde, gand eur vouez start : « Dalc'hit ho maner evidoc'h, ha goulskoude tostât a ra an deiz ma karfec'h troka ho maner ouz va zi paour. » Hag e gwirionez ar markiz a varvas nebeut amzer goudeze.

Da fin ar c'horaz 1652, epad amzer ar Basion, ar c'hlanvour, o sonjal e poaniou e Vestr, a c'houlennas beza bourrevet evel dan. Selaouet e voe e bedenn. An drouk-spered en em lakeas gantan hag e vourrevas en eun doare kriz, e skourjezas, a glaskas toulla d'ezan e dreid hag e zaouarn gant tachou bras : ar merkou a oa c'hoaz anat goude e varo. Tenna a reas digantan e zilhad, hag o zaole er fank. Met kaer en doa Satan, ne deue ket a-benn eus ar misioner a lakae e fizians e Doue hag a rae goap eus an enebour.

Mikael a voe frealzet e kreiz e boaniou gand an Tad Kintin, en em ziskouezas d'ezan skedus holl. Ar gwelze a roas d'ezan da gompren e tostae deiz e varo. Hag e c'houlennas e zakramanchou diveza.

Ar zakramanchou diveza

Diou wech ar zizun e komunie abaoe m oa klanv. En dro-man ec'h en em breparas gwelloc'h c'hoaz evid ar gommunion a vefe marteze an diveza. Leun oa e di a dud. Pa glevas kloc'h ar gommunion, e klaskas mont d'an daoulin. Adori a reas e Zoue gant kement a garantez, ma voe skoet spered an holl. Hag e komzas evelhen. « Ret eo d'in, emezan, abalamour d'ar re o deus va darempredet er vro-man, dizelei d'eoc'h eur c'hras kaer am eus bet abred digant Doue.

P'edon o studia e Ajen, ar Werc'hez Vari en em ziskouezas d'in epad m'edon poaniet gand eur barrad anken. Goude beza va frealzet, e roas d'in, a-berz he Mab, kurunenn ar glanded, am eus diwallet mat betevreman. N'am eus morse, nag ez yaouank na koz, grêt pec'hed ebet eneb ar vertuz-ze; hen diskleria a ran dirag ar Zakramant. »

Ma c'hoanteas komz evelse, eo, var a gredan, o veza ma voe tamallet e gaou e Ajen gant teodou fallakr da veza grêt pec'hejou divalo. Mat oa d'ezan en em zidamall eur wech c'hoaz, evit m'o defe e genteliou muioc'h a bouez dirag an dud.

Goude beza kommuniët, e c'houlennas sakramant an Nouenn.

Santout a rae e teue e eur ziveza, hag e lavaras da Janned ar Gall: « Tostaat a ra ar maro d'in, met teir boan vras am eus c'hoaz da c'houzanv araok kuitaat an douar-man. Beilhit ha lakit tud da veilha noz deiz. »

Epad e glenved, e c'houlenne lenn d'ezan bemdez ar Basion e brezoneg, rak o pleustri war boanion Hor Zalver, ec'h ankounac'hae e re. Janned ar Gall a lenne d'ezan ive kantikou brezonek. Met, souezet o welet pegement a aon en doa he mestr rag ar maro, a lavaras d'ezan eun deiz: « C'houi ha n'ho peus grêt nemed vad epad ho puhez, a gren evelse? » — « Selaoui, emezan: an drouk-sperejou a glask d'ar mare-man ober gwella ma c'hellont evid hor c'holl. N'euz forz peger zantel eo bet ar vuhez, emaomp e riskl bras, ma ne vezomp ket harpet gant Doue. Ni, tud desket var ar skiantchou sakr, a vez alies tentet enep gwrioneziou ar feiz. Hon enebour ijinek a glask hon lakaa da goll feiz pe da goll fizians. Ma ne c'hell ket, e lak dirag hon daoulagad hon oberou mat evit m'en

em blijimp o sonjal enno. Ha setu awalc'h evit koll ar brasa sant eus ar bed. Rak-se, bep hanter eur, lennit d'in e brezoneg kantig ar feiz, grit d'in diskleria e kredan misteriou ar relijion, ez eus tri Ferson e Doue, eo an eil Ferson en em c'hrêt den ha maro war ar groaz evid hor zavetei, eman e gorf e sakramant an Aoter. Da c'houde lavarit d'in an enor bras am eus bet digant Doue o veza va galvet d'ar velegiaj. Grit d'in sonjal em leziregez, em fec'hejou, grit d'in goulenn pardon ha diskleria va fizians e Doue. Va zikourit da zevel a spered warzu Doue dre bedennou evel ar re-man: « Tad eternal, va c'hennerzit dre ho kalloud; Mab Doue holl-challoudek, va sklerijennit gand ho furnez; Spered glan, va entanit dre ho karantez. Treinded Sakr, grit eus va c'halon eun aoter d'eoc'h da jom enni evid ato. Jezus, gwir Vab Doue, va c'huzit en ho kostez toulllet, beuzit va fec'hejou en ho kwad. O Gwerc'hez glorius, alvokadez ar bec'herien, mamm a drugarez, pedit evidon da eur va maro. Sant Josef, tad mager da Jezus, sant Mikael, va Ael mat, sant Yann Vadezour, santez Barba, sant Kaourintin, va zikourit breman ha da eur va maro. »

Setu aze penaos ec'h en em brepare d'ar maro. Tamall a rae leziregez meur a veleg a leze, goude an Nouenn, ar re glanv o-unan da stourm ouz ar c'hlenved, ouz ar maro, ouz an drouk-sperejou a ziskouez o holl c'hounnar d'ar mare-ze. Evit-se eo en doa grêt an tamm skrid da zeski d'ar gristenien penaos en em brepari d'ar maro.

XXXIII

Ar maro (5 a vae 1652)

Er penn kenta a ebrel, Mikael an Nobletz a voe var e dremenvar. Epad pemp dervez e chomas evelse, hag edod da bep eur var c'hed eus e varo. Hag en eun taol e welleas, e c'hellas debri ha kemeret eun tamm nerz. Epad ar wellaenn-ze e roas da eur paour e zoudanenn hag eur gwenneg bennak en doa c'hoaz en e vanch. Met e kuz e reas an aluzenn-ze, d'ar zul, epad m'edo an dud en oferenn.

Eun nebeut derveziou goude, d'ar 14 a ebrel, e kouezas adarre hag e voe a-nevez var e dremenvar. E gorf a oa skornet, evel pa vije bet goloet a erc'h. An holl a gave d'ezo edo en dro-man o vont da vervel. Ne denne mui e alan, e galon ne lamme mui. Henvel oa ouz eun den maro. Met dont a reas adarre buhez d'ezan, hag e c'hellas a-nevez tenna e alan, finval ha komz. Ar fallaenn-ze a badas ive pemp dervez.

An Tad Maner, pa glevas oa fall fall e vestr, a ziredas eus Douarnenez gand an Tad Bernard. Kaout a rajont ar c'hlanvour gwelloc'h eget na gredent. Laouen bras e voe heman o welet an daou vignon-ze en e gichen. Chom a rajont gantan eul lodenn vat eus an noz da gomz outan ha da gana d'ezan kantikou brezonek. Goulenn a reas kelou divarbenn ar misionou hag e voe eürus o klevet ez ae al labour var araok.

An daou Dad, o kredi e c'hellfe c'hoaz ar c'hlanvour beva meur a zervez, a guiteas Konk evit mont d'o mision. D'ar re a c'houlenne digantan perak n'en doa ket lavaret d'ezo chom beteg ar fin, Mikael a respondas: « Unan anezo a vezo em c'hichen. »

A-raog e varrad diveza, e voe brao a-walc'h epad eun dervez bennak, hag e c'hellas lavaret penaos hag e pelec'h e c'hoantae beza sebeliet ha beziet. « Ra vezo lezet, emezan, va c'horf epad tri dervez e chapel sant Kristof, chapel ar beorien, ma c'hello va mignoned dont niverus d'am gwelet ha da bedi evidon. » Ha da Janned ar Gall e kemennas: « C'houi a glasko va mignoned, beleien ha re all, ma z'aint da bedi evidon da japel santez Barba. » Goulenn a reas kas e gorf da iliz Lokrist evit beza beziet e traon chapel sant Tujan, e-touez ar re baour. « Na lenvit ket varnon goude va maro, emezan, na zougat ket dilhad kaon evel ma ra tud ar bed, met dilhad gouel, ha bezit laouen, evid ober dis-henvel diouz ar bed. »

Nebeut amzer goude, d'an 2 a vae, e rankas ober ar c'hrogad diveza gand ar maro. Rust e voe an abadenn. Eur c'houezenn a c'hwad a voe var e gorf, evel var hini Hor Zalver er jardin Olived. E gorf, en diabarz, a oa evel devet gand an tan. Met, e kreiz e boaniou, ne lezas ket eur glemmadenn, ne c'houlenne nemet eun dra: gouzant muioc'h c'hoaz.

Antronoz, 3 a vae, e kasas kemennadurez d'an Tad Maner a oa o prezeg eur mision e bro Leon, ugent leo bennak diouz Konk. Den ebet ne grede e c'hellfe digouezout abred a-walc'h. En dervez varlerc'h, 4 a vae, ar c'hlanvour, epad div eur, a voe evel dibradet diouz an douar. E zremm a oa lugernus ha koant evel hini eun den yaouank, e zaoulagad a zelle er memes lec'h gand eul levenez vras meurbet. Lavaret e vije bet eun den

eürus er baradoz o sellet ouz kaerder Doue. — Neuze eo e c'hellas eul liver dont d'ober buan e batrom.

Pa zeuas ennan e-unan adarre, Janned ar Gall a c'houlennas digantan piou en doa gwelet: « Va Mestrez vat, emezan, an hini am frealzas gwechall e Ajen; denet eo adarre d'am frealzi. »

Koulskoude, d'an abardaez eus an deiz-ze, an Tad Maner en em gavas e Konk. Mikael an Nobletz a zellas outan, laouen holl, hag a c'houlennas eur wech all c'hoaz an absolverenn. An noz a dremenas penn da benn o pedi hag o prederia. Antronoz, 5 a vae, ar c'hlan-vour a zastumas an holl nerz a jome gantan evit kin-nig da Zoue e galon. Ar zul oa. Ar c'hleier a c'haive an dud d'an oferenn. Mikael, a vouez izel, a bede Hor Zalver, ar Werc'hez, ar zent, pokat a rae d'ar groaz a ginnige d'ezan an Tad Maner, hag evelse, goustadig, eo e roas e huanad diveza, d'an oad a 75 vloaz.

Kerkent ha ma tremenas, e voe leun an ti a c'houez vat, c'houez vat a zeue diouz e gorf, e zilhadr, plouz e wele. Ar re her sebelias o deus hen diskleriet.

Goude ma voe goalc'het ar c'horf, e voe gwisket, lakeet d'ezan e zilhadr oferenna ha diskennet en eun arched dister, lezet dizolo, ha kaset da japel sant Kristof, hervez m'en doa Mikael goulennet.

An oferenn bred n'oa ket echuet c'hoaz, ha n'oa ken beleg nemet an Tad Maner endro da Vikael.

Buan ez eas ar c'helou, ha pa voe klevet ar glas goude an oferenn, an dud a ziredas da japel sant Kristof, da welet ar beleg santel. An holl a c'hoantae pokat d'e zaouarn, d'e dreid, touch ouz e gorf eul leor oferenn pe eur chapelad pe eun dra bennak. Ar chapel a voe leun a dud epad an tri dervez. Ret e voe zoken lezel diger an nor epad an noz.

XXXIV

Burzudou goude ar maro

Burzudou a c'hoarvezas kerkent hag ar maro.

Tud o deus touet war an Aviel beza gwelet epad an noz chapel sant Kristof o lugerni, ha koulskoude n'oa goulaouenn ebet var elum. — Martoloded eus Eusa, a zouaras antronoz e Konk, a zisklerias oant bet saveteet epad an noz dioc'h laeron-vor eus Dunkerk dre zikour eur goabrenn lugernus en em lakeas etre o bag hag hini al laeron. — Eur marc'hadour eus Eusa, Andre ar C'hoz, a gouezas varnan eur barr-avel p'edo e kichen porz Konk. Hen hag e vartoloded a gave dezo oa grêt ganto, pa weljont o sevel eus chapel sant Kristof eur sklerijenn henvel ouz hini an heol en e greisteiz. Gwelet a raent kement tra a oa en o bag, hag e c'hellent kempenn ar pezh a oa dismantret. Hag ive ar sklerijenn-ze a habaskae ar mor. Kerkent ha m'o devoe douaret, ez ajont da japel sant Kristof, da drugarekaat servicher Doue.

Merc'h eun dijentil, Mari a Gernarouez, eus maner ar Predig e kichen Lok-Maze, he doa droug-sant, daou viz a oa, abaoe eur spontadenn he doa bet. Bemdez e koueze. He maeronez, an itroun a Gerourien, a roas ali d'he c'has da japel sant Kristof. An hini glanv a astennas he dorn var ar c'horf hag a gavas kerkent ar pare, hervez testeni eur maread a dud.

Setu aman eur burzud all kaeroc'h, a zo bet disklariet gwirion gand an aotrou Laval, eskob Kastell, goude eun enklask graet gand ar brasa evez (16 here 1654). — Bez ez oa e Konk eur plac'hig paour, Mari-Jann Bernard, oajet a 13 vloaz hanter, bet er skol adaleg he bugaleaj gant Mikael an Nobletz a zeskas d'ezi he fedennou hag he c'hatekiz. Bloaz araok maro ar misioner, e teuas da veza seizet, ha zoken mut. Pa veze he mamm er miz o labourat, ar verc'hig kez a jome en ti hep gellout finval, ha paotred fallakr a zeue c'hoaz a-wechou d'ober goap ha da deurel mein outi. Gouzant a rae he foaniou gant habaskder hag e lavare a-spered he japeled a zalc'he en he dorn. Mikael araok beza klanv e-unan, a zeue alies d'he frealzi hag a lavare d'ezi ober evel sant Stefan, pedi evit he bourrevien. Senti a rae ouz ar beleg santel, met kare he dije beza gouest da gomz, da c'hellout pedi Doue evid he bourrevien, nann hepken a galon, met ive a vouez uhel. Ar c'hras-se a voe roet d'ezi, met seizet e chomas, hag ouspenn, koll a reas ar gwelet daou viz araok maro Mikael. Er zul kenta a viz mae, en deiz ma varvas Mikael, Doue a lezas an drouk-spered da daga ar verc'hig paour a voe hanvet gand an Tad Maner « *Merc'h vihan Job* ».

O veza ne c'helle ket kousket abalamour d'he foaniou ha d'he anken, e kreiz an noz e klevas eur vouez o lavaret d'ezi, evel pa zeufe eus an tu kleiz: « Mari Jann, te a zo reuzeudik da stad; petra dalvezo d'it da bedennou? Tro kein da Zoue, dilez da bedennou, en em ro d'in-me korf hag ene. Me a zo eun aotrou bras, me da bareo. Eürus e vezi, ha ne vanko netra d'it. » Ar plac'hig souezet, spontet, n'he deus ket bet amzer da respont d'an toueller. Klevet a ra eur vouez all o tont eus an tu dehou: « Mari Jann, grit sin ar Groaz, lavarit ho *Pater*, en em droit ouz Doue;

an hini a zo o klask ho touella eo an drouk-spered; n'ho pezet ket aon razan, rak me a zo en ho kichen, me Mikael an Nobletz, ho tad, maro er mintin-man. Bep gwech ma vezot taget evelse, grit evel am eus lavaret d'eoc'h gand eur feiz start hag eur fizians leun e madelez hag e galloud Doue. Lavarit d'ho mamm gervel an Tad Jezuit a oa em c'hichen war va zremenvan, evit ma c'hellot kovez gantan. »

Mari Jann a zentas hag an drouk-spered a rankas mont kuit, trec'het gand eur plac'hig dinerz, seizet, dall.


An Tad Maner a zeuas d'he c'hovez antronoz hag a zikouras ar vamm d'he digas da japel sant Kristof, da gaout an hini a oa bet gwechall oc'h he frealzi epad he c'hlenved. Pa erruas er chapel, e voe lavaret d'ezi edo dirak treid he mestr mat. Neuze, laouen holl ec'h astennas he muzellou hag e pokas d'an treid-ze. Kerkent he daoulagad a welas ar c'horf hag an dud a oa endro d'ezan. Deuet e oa d'ezi ar gwelet, hag antronoz e teuas ive ar c'herzet, hag e c'helle bale hep tamm skuizder ebet.

An Anterramant

Maro d'ar zul, Mikael an Nobletz a voe anterret d'ar meurz varlerc'h, meurs ar Rogasionou. An anterramant a voe kaer meurbet. Dont a reas tud eus a bep lec'h, tud a bep stad, re baour, re binvidik: ouspenn daou c'hant a oa eus a bell. An Tad Maner a reas eur brezegenn: eur zant o veuli eur zant.

Ar c'horf ne voe ket lakeet etouez beziou ar re baour, evel m'en doa goulennet Mikael, met e bez aotroned an Halgouet, var goulenn ar re-man. Pa voe diskennet ar c'horf er bez, an itroun a Gervasdoue, klanv abaoe c'houec'h miz ha poan d'ezi o vale, a c'hoanteas diskenn da gaout ar béz, evit pokat d'an arched ha goulenn ar pare. He fedenn a voe selaouet, rak an derzienn he doa a gouezas kerkent; santout a reas c'houez vat o tont eus an arched. An touller beziou hag ouspenn hanter kant all o deus santet an hevelep c'houez.

Deuet oa da veza gwir evit Mikael an Nobletz komzou ar Skritur Sakr. « *Sancti tui, Domine, floreburnt sicut lilium et sicut odor balsami erunt ante te.* » « Ho sent, Aotrou, a vleunio evel al lili, hag a roio c'houez vat evel ar balsam. »



Burzudou c'hoarvezet
e Konk, e Douarnenez
hag e meur a lec'h all

Ar burzudou, evel m'eo bet lavaret, a c'hoarvezas kerkent ha maro Mikael an Nobletz. Kenderc'hel a rajont pell amzer goude, ha niverus meurbet. Re hir e vije o lakaat holl aman. Eul lodenn hepken a gontimp varlerc'h an Tad Verjus, an Tad Maner ha testou all. An Tad Verjus a skrivas buhez Mikael an Nobletz nebeut amzer goude ar maro, p'e gwir al'levr a voe moulet e 1666, 14 vloaz hepken goude m'oa aet Mikael eus ar bed-man.

An daou skrivagner-ze a zo tud leal, gouiziek, poel-lek, o deus grêt enklask, pouezet mat an traou, hag e c'heller kaout fizians enno.

Ouspenn-ze, ar re o deus bet grasou kaer goude pedi Mikael an Nobletz, o deus, meur a hini anezo, diskieriet an dra-ze dirak testou, notered, beleien, hag ez eus deuet beteg ennomp kalz eus ar skridoù-ze a ziskouez oa an dud eus ar zeitekved kantved tud a benn, tud fur, eveziek. C'hoantaet o deus e vefe merket war baper, dirak testou, ar burzudou c'hoarvezet, evit ma talvesfent da enori misioner Breiz.

Bemdaz, eme an Tad Maner, adaleg ar Rogasionou 1652 (deiz ar maro) beteg hanter-here 1654 e tirede tud da vez Mikael an Nobletz evel da eur pelerinaj bras. Da c'houde, e teuas nebeutoc'h a dud, met kalz evelato.

An aotrou komt a Garne, eus kerentiez ar misioner, a oa klanv gand an derzienn abaoe daou viz. E wreg a reas le da vont da bedi evitan war bez e eontr santel. Selaouet e voe he fedenn (1658). Tri eus o bugale a voe ive, epad o buhez, pareet eus klenvejou bras goude beza pedet o eontr.

An Tad Marsel a Zantez Jenovefa, Abad Leaned Karmez e Brest, goloet e gorf a c'houliou, bet o kaout n'ouzoun ket pet medesin hep beza gwelloc'h, en em erbedas ouz Mikael an Nobletz hag a reas le da vont da Lokrist. Epad ar veach e kavas ar pare.

Nebeut amzer goude, unan eus e relijiuzed, an Tad Daniel a Zantez Eufrozina, en dezo an derzienn, hep pevar dervez abaoe 15 miz bennak, a zeuas da Vrest evit gwelet ha ferri a rafe war e derzienn o vev en eur vro nevez. Goulenn a reas aotre digand an Abad da vont da Gonk evit gwelet kerent. « Gant Plijadur, eme an Abad, e roan aotre d'eoc'h. Na vankit ket da vont da

bedi var bez Mikael an Nobletz. Hoc'h alia a ran zoken da c'houlienn digantan ar pare. Ho pare a c'hell evel m'en deus va fareet. » An Tad Daniel a reas evel m'oa bet lavaret d'ezan, hag an derzienn a zistagas dioutan. — Eur breur d'ezan, klanv gand eun hevelep klenved, a voe pareet ive, hag an daou vreur a yeas, laouen, da zaoulina var bez o madoberour.

N'eo ket hepken e Konk e rae burzudou, met e kement lec'h m'oa tremenet epad e vuhez. An Tad Maner a lavar ec'h en em ziskouezas ouspenn 80 gwech da bec'herien vras, evid o distrei ouz Doue.

Eus an ti bihan en doa Mikael e Konk e voe grêt eur chapel goude e varo, hag ar chapel-ze a voe vouestlet da Itron-Varia ar Wir-Zikour. Kalz tud a veze eno o pedi evel e Lokrist.

E Douarnenez, en ti ma voe ennan epad 23 bloaz, e c'hoarvezas ive eur burzud souezus. Eur c'hloc'h a voe klevet ennan o seni, evel da c'hervel an dud, ha goulskoude n'oa den o chom ennan. Nao daol kloc'h a veze klevet peurliesha, hag an dra-ze a badas epad daou vloaz (1661-1663).

An Tad Maner a c'hoanteas sevel eno eur chapel e koun eus e vestr santel, met n'oa den a-du gantan. Ar veleien hag ar bobl a enebe, gand aon na vefe rannet ar barrez. Eskob Kemper, an aotrou Ronan al Louet, o klevet hano eus ar burzudou grêt gant Mikael an Nobletz, a c'hourc'hemennas d'an Tad Maner ober enklask hervez reolennou an Iliz, war vertuziou ha burzudou ar misioner. An Tad Maner a stagas d'al labour hag a c'hellas dizale diskouez d'an aotrou 'n eskob eun niver bras a burzudou gant sinatur an testou.


Setu aman unan anezo. Eur plac'hig 19 miz, eus Ploare, Jann Runavant, a oa e kichen eun ti koz,

frailhet e vogeriou, pa gouezas an ti var he c'hein. Ar gerent, o klevet an trouz, a ziredas da glask o merc'h, met ne gavjont netra. An tad a grede oa friket e verc'h, dindan ar vein. E spered en em droas neuze ouz Mikael an Nobletz a oa bet madelezus en e genver epad e vuhez, hag e reas d'ezan eur bedenn evid e verc'h. Selaouet e voe, rak klevet a reas e verc'h o krial. Gervel a reas e amezeien d'e zikour. Tenna a rajont ar vein hag an douar, eiz karrad d'an nebeuta, hag e kavjont ar bugel kuzet dindan an atrejou. N'oa ket mouget, n'he doa na gouli na droug ebet (1661).

An aotrou 'n eskob a voe souezet o welët pebez galloud en doa Mikael an Nobletz, ha dreist-holl e spered a voe skoet gand ar burzud a c'hoarveze neuze: mouez ar c'hloc'h. Senti a reas ouz mouez ar c'hloc'h, hag ez eas da c'houlenn ar pare digand e vignon, en doa amavezet mat gwechall p'edo var ar studi. Ar skuisder hag ar gosni o doa seizet d'ezan e zivesker; ne c'helle mui na bale-na chom en e zav. Oajet oa neuze a 83 bloaz... Goulenn a reas beza douget betek ti Vikael. Gantan edo an aotrou Amice, beleg a Gemper; person Poullan, an Tad Maner, an Tad de Launay. An Aotrou 'n eskob a bedas pell amzer e kambr Mikael. En deiz-ze e c'hellas poueza war e dreid hag ober eur gammed bennak (ebrel 1663). Antronoz e klevas an oferenn var e zaoulin. Dont a reas nerz en e izili, hag a nebaudou e c'hellas ober labourou e garg, lavaret an oferenn, rei an Urziou sakr, mont dre an eskopti da rei ar gonfirmasion. Da fin ar bloaz, e kanas teir oferenn Nedelek e iliz-veur sant Kaourintin.

Goude beza bet kement a c'hrasou, an aotrou Louet a alias start an Tad Maner da zevel eur chapel en

enor da zant Mikael Arc'hel, p'e gwir ne c'helled ket sevel en enor da Vikael e-unan. Eur vaouez vat, Anna a Gernaffien, a brenas an ti hag an douar a oa ezomm. Met n'oa ket a arc'hant, hag an Tad Maner a oa nec'het: n'en doa nemet seiz lur. Ar vaouez santel, Katell Danielou eus a Gemper, a lavaras d'an Tad e vefe kavet peadra a-walc'h ha goude ma vefe ret



Ti Mikael an Nobletz e Konk-Leon.

goloi ar chapel en arc'hant. Hag e gwirionez, e tri dervez e teuas 1.100 lur, epad ar bloaz kenta 7.000 lur.

Ar burzudou a gendalc'he. Eun den eus Plounevez, Fanch ar Gall, a zigasas e verc'h vihan, oajet a bemp bloaz hanter, ha seizet, da di ar misioner. Goude beza e bedet, e voalc'has e verc'h er feunteun grêt gant Mikael e kichen e di. Kerkent ar verc'hig a finvas he izili hag en em lakeas da vale (1663).

Awalc'h oa a-wechou pedi eus a bell. Mab eur barner eus Kemper, Kaourintin Jaureguy, bouzar, a voe vouestlet gand e voereb, Katell Bodennek, da Vikael an Nobletz, ha pareet war an eur (mae 1661).

E Douarnenez, e kichen ti ar misioner, eur bugel a bevar bloaz, Yann Gouzien, a oa var e dremenvar, ha ne c'helle mui komz abaoe 24 eur; eur vignonez a alias ar vamm d'e vouestla da Vikael an Nobletz. Kerkent ar c'hlanvour a c'houlennas eun aval hag hen debras. Pare oa.

D'an 12 a eost 1663 e voe benniget ar maen kenta eus ar chapel nevez. Epad al lid, hep ma vije doare glao, e voe kurun bras. Met ive eur burzud kaer a c'hoarvezas en deiz-ze. Eur bugel pevar bloaz, Yann Louboutin, eus Ploare, klanv gand an derzienn abaoe 6 miz, en doa klevet hano eus Mikael, eus e vadelez e kenver ar vugale, hag o c'houzout ez oa gouel e Douarnenez, e pedas e vamm d'e gas d'ar gouel. Kerkent ha ma tigouezas, e voe pareet.

Mont a rae al labour var araok endro d'ar chapel. Ar vugale vihan o-unan, adalek tri bloaz, a laboure. An Tad Maner a lavar e tigasjont ouspenn 300 karad douar. Rak-se Mikael a skuilhe e vennoz var ar vugale.

Eur vamm eus Gwengat, Katell Muzellek, he doa daou vugel klanv, unan dek vloaz, eun all daou vloaz. O c'hinnig a reas da Vikael, en eur bedenn c'houek, hag e tigasas ar c'hosa da japel sant Mikael. An daou vugel a voe pareet. (Eost 1663).

Eun intañvez eus Beuzek-Kap-Sizun, Anna Guevel, deuet he daoulagad da veza fall, he doa poan oc'h anaout he hent. Gand unan eus he merc'hed e voe kaset da di Vikael an Nobletz; goude pedi, e wal-c'has he daoulagad e dour ar feunteun, hag e kavas

ar gwelet. Distrei a reas d'ar ger hec'h-unan, hag e reas teir leo hep sikour den ebet (24 eost 1663).

Eur mansoner a Kemper, Fanch Mauni, a laboure var ar chapel, o welet e wreg klanv ha poan d'ezi o komz, a bedas Mikael: « P'e gwir, emezan, e labouran en ho ti, goulennit digant Doue rei ar gomz d'am fried, ma c'hello kovez. » Selaouet e voe; e wreg a c'hellas kovez, ha nebeut amzer goude a voe pare mat.

Eun intañvez eus Eskibien, Mari Keraman, sounnet he izili, en em vouestlas da Vikael hag a voe pareet kerkent (1663). Antronoz e reas pemp leo var droad, evit mont da Zouarnenez.

Setu aze ar burzudou a c'hoarveze epad m'edod o sevel ar chapel. Dizale e redas ar brud e teufe eskob Kemper da lavaret an oferenn, araok ma vefe peur-c'hraet ar chapel. Ar gouel a voe deiziet d'an 30 a viz gwengolo 1663. Diredet a reas an dud eus Douarnenez ha tro var dro, eun 40.000 bennak, var a lavar an Tad Maner. An oferenn a voe lavaret dirak skeudenn sant Mikael Arc'hel. Met, o pedi an Arc'hel galoudus, an holl a zonje en e filhor, Mikael an Nobletz. En deiz-ze e c'hoarvezas eur burzud nevez. Eur bugel nao bloaz, Yvon Quélou, dall abaoe e dri bloaz goude beza bet klanv gand ar vrec'h, a voe digaset d'ar chapel gand e dad hag a gavas ar gwelet.

An Tad Maner a reas neuze eur mision bras e Douarnenez, hag, evit kloza ar mision, eur brosesion eus ar re gaera, a ziskennas eus Ploare da Zouarnenez. Bez ez oa tud oc'h ober Hor Zalver, ar Wer-c'hez, sant Jozef, ar bastored, an tri Roue, sant Yann Vadezour, Herodez, Jezus o tougenn e groaz, ar merc'hed santel eus Jerusalem var hent ar C'halvar; re all a skeudenne ar Feiz, ar Fizians, ar Garantez, al

Lealded, an holl vertuziou; bez ez oa diou vandenn sentezed, lod e gwenn, ar gwerc'hez, eur bod palmez en o dorn; re all e ruz, ar merzerezed, eur gurunenn spenn var o fenn, en o dorn ar binvieu m'oant bet lazet ganto; da c'houde e teue kenvreudeur ar Breuriezou, Trede Urz ha re all, ha d'ar fin, e kreiz renkennadou ar veleien gwisket ganto o dilhad oferenn, ar Zakramant dindan an de. Kaer oa evel ar Baradoz, hag an dud ken niverus ha d'an 30 a viz gwengolo.

Goude ar brosesion, an Tad Maner, war urz an aotrou 'n eskob, a c'houlennas digand ar re holl o doa bet eur c'hras bennak goude pedi Mikael an Nobletz, dont d'hen diskleria. An aotrou a Benfrat, kuzulier hag enklasker ar Roue e lez-varn Kemper, a oa gand an Tad Maner hag a jomas mantfet o welet peger bras oa galloud Mikael an Nobletz.

Kenderc'hel a reas an dud da zont e pelerinaj da Zouarnenez epad meur a vloavez, hag ar burzudou a gendalc'has ive. Ne gontimp nemet eul lodennig anezo.

Eur verc'h da Wilhou Gueriek, aotrou ar Rumen, e Landrevarzek, dall ha seizet, a gavas ar gwelet kerkent ha ma reas an tad eur bedenn da Vikael an Nobletz. Adaleg an deiz-ze, ar verc'h ne ehane da c'houlenn beza kaset da Zouarnenez. Kerkent ha matigouzas e chapel sant Mikael, e c'hellas bale (2 genver 1664).

Eur mab da aotrou Lezormel, e Plestin, a oa toc'hor meurbet gand eur barrad klenved. Ne wele, ne gleve, ne zante mui netra, edo var e dremenvan abaoe 24 eur, hag an holl a gave d'ezo e oa kollet. Ar vamm a reas le d'e gas da Zouarnenez, ma chomfe e buhez.

Kerkent ar bugel a zigoras e zaoulagad hag a c'houlennas boued. Pare oa. (Gwener ar Groaz 1664).

An itron a Gerzulvan, eus Landerne, klanv he daoulagad abaoe 6 sizun, a voe pareet goude beza grêt le da vont da japel sant Mikael (26 ebrel 1664).

Franseza Pouliquen eus Pleyber, 18 vloaz, mut abaoe m'oa ganet, a voe pareet er chapel-ze da zeiz ar Pantekost (1 mezeven 1664), dirak kalz testou.

Eur vaouez a 60 vloaz, eus Dirinon, dall pevar bloaz a oa, a voe pareet o lakaat war he daoulagad eun tamm eol eus eur vured a oa bet d'ar misioner.

Eur plac'h yaouank eus Loqueffret, Louiza Turmel, bouzar abaoe 6 vloaz, a gavas ar pare o vont da bedi da Zouarnenez.

Evit diskouez gant pebez aked eo bet dastumet ar burzudou-ze, setu aman eun tamm skrid:

« Ar bemp a viz gouere 1667, araok kreisteiz, dirazomp-ni, notered ar Roue e Kemper-Kaourintin, e sakreteri sant Mikael Arc'hel, savet e Douarnenez war an ti m'edo ennan o chom an aotrou Mikael an Nobletz, maro evel eur zant, eo deuet Silvestr ar Masson, ganet hag o chom e Montroulez. Diskleria a ra evit gloar Doue beza oajet a 65 vloaz, beza anavezet an aotrou Mikael an Nobletz, beza bet dall epad c'houec'h vloaz leun. Evit kaout ar pare eo bet louzaouet gand eur medesin, met hep gwellaat tamm. Neuze en deus pedet an aotrou Mikael an Nobletz ha prometet dont d'ar chapel-man kerkent ha ma vefe gwellaet eun tammig e zaoulagad. Kerkent e welas eun nebeudig ar sklerijenn, hag a-benn teir sizun oa pare mat. Toui a ra da lavaret eo gwir e gomzou... Skrivet hon eus e ziskleriadur dirag aotrou person Ploare hag ar re holl o deus sinet: Silvestr ar Masson; Jerom Paillart, beleg ha person; Larcher;

H. Grivart; Rolland, noter ar Roue; Lyminic, noter ar Roue. »

Lakomp aman ive ar burzud c'hoarvezet e chapel Itron Varia Gonfors e 1675, ha kontet gand an Tad Maner. An Tad Maner hag an otron Galerne, person Mur e Breiz, a oa o daou var varc'h war hent Pont-Kroaz. Edont e parrez Meilars, tost da japel Konfors, p'en em ziskouezas d'ezo Mikael an Nobletz. Eur surpilliz a oa gantan. An Tad Maner hag an aotrou Galerne a ziskennas divar varc'h hag en em daolas d'an daoulin war dreuzou ar chapel. Alc'houezet oa an nor, met digeri a reas raktal hec'h-unan. Eur sklerijenn skedus a lugerne er chapel. A-uz d'an aoter, ar Werc'hez Vari, kaer meurbet da welet, a oa evel azezet var he zron, elez eus an Nenv endro d'ezi. Mikael an Nobletz a oa daoulinet. Kinnig a reas d'an Elez ha d'ar Werc'hez an Tad Maner a oa deuet betek an aoter. Rouanez an Nenv a droas varnan he daoulagad leun a vadelez, e vennigas, ha da c'houde ne voe mui gwelet. Goude beza lavaret e anaoudegez vat d'e Vamm, an Tad Maner a zistroas da draon ar chapel hag a gavas an aotrou Galerne chomet e kichen an nor.

XXXVII

Burzudou e Tremenac'h (Plougerne)

Mont a rae tud ive da bedi da Dremenac'h, d'al logig m'oa bet ennan ar beleg yaouank Mikael an Nobletz oc'h ober pinijenn evid en em brepari d'ar missionou. Eno ive ar re zall a gave ar gwelet, ar re vouzar ar c'hlevet, ar re vut ar gomz, ar re seizet ar c'herzout.

Kerent eur paotrig eus Goulc'han, Yvon Patinek, 13 vloaz, mut abaoe m'oa ganet, a zeuas da Dremenac'h da bedi evid o mab. O tistrei d'ar ger, e kavjont o mab pare hag o komz kerkouls hag eun all eus e oad.

Ronan Trevien eus a Wineventer, 22 vloaz, a oa treet e vrec'h kleiz hag e zorn morzet, pevar bloaz a oa. Lakaat a reas ober eun naved e Tremenac'h. Da fin an naved, e tasteas e vrec'h ouz skeudenn Mikael an Nobletz, hag e c'hellas he finval dirag eun niver bras a dud.

Yvon Grall, eus a Lesneven, eun den koz, bec'h d'ezan oc'h en em stleja, a yeas gand e ziou vranell betek Tremenac'h, ha goude beza pedet gant fizians, e c'hellas distrei brao d'ar gêr, hep kaout ezomm nag eus branellou, nag eus sikour den.

Eur vaouez eus Kerlouan, Katell Kastel, klanv ive ha daou-bleget, a voe pareet raktal o pedi e Tremenac'h.

Eur bugel eus a Wiseny, Nikolas ar Mintern, 26 miz, kouezet en eul lenn e kichen ar vilin, a voe kaset gand an dour war ar rod vras ha taolet en eun toull a c'houec'h troatad. E dad e glaskas epad eun eur hanter hag e gavas hep buhez, beuzet. E zevel a reas etre e zivrec'h gant glac'har, hag e sonjas e Mikael an Nobletz. Diskleria a reas e rofe eun aluzenn da gaeraat logig Tremenac'h, ma tistrofe ar bugel e




CHAPEL SANT MIKAEL e Plouguerne
gant Yv. Floc'h.

buhez. Ar vamm, o klevet petra a oa c'hoarvezet, a ziredas en eur lenn, hag a brometas d'he zro eur pelerinaj hag eun oferenn. Raktal ar paotrig a zigoras e zaoulagad, a finvas e vuzellou, a zislonkas an dour en doa evet hag a bareas (26 gouere 1664).

Eur potrig all eus a Wiseny, Ronan Crenn, pemp bloaz, mab da Yann ar C'hrenn, goude beza gellet bale da genta evel ar vugale all, a jomas seizet epad tri bloaz. E dad e vouestlas da Vikael an Nobletz, hag en deiz-ze ar paotrig en em lakeas adarre da vale

(ebrel 1664). D'ar 24 a eost 1664 an tad en deus sinet da ziskleria ar c'hras kaer-ze, ha gantan o deus sinet ive: Mac'harit Poullaouek, Anton Tinevez, Lorans ar Rosmeur.



TY MIKAEL AN NOBLETZ, skeudennet
gant Yv. Floc'h.

Burzudou all

N'oa ket ret mont da Zouarnenez pe da Dremenac'h pe da Gonk evit kaout grasou dre c'halloud Mikael an Nobletz. E zilhad, e skeudennou, ar chapeledou a oa bet touchet ouz e gorf, goude e varo, eur bedenn, a oa awalc'h evit kaout grasou dreizan.

Eul leanez eus Kalvar Raozoun a voe pareet diouz an derzienn o tougenn epad nao dervez eun tamm eus soudanenn Mikael an Nobletz.

Perrin Fouquet, gwreg Bourlez, eus Sant Rivoal, a gollas he merc'h, oajet a 6 vloaz, dre eur barrad terzienn. C'houec'h eur a oa tremenet abaoe maro ar c'hrouadur, hag edod o vont d'he zebelia. Neuze ar vamm en em daolas d'an daoulin hag a bedas kalonek ar misioner santel: « Mikael an Nobletz, emezi, servicher bras Doue, n'am eus bugel all ebet; dalc'hit d'in va merc'hig, rak her gellout a rit. » — Piu a lavaro levez ar vamm hag estlamm an dud a oa eno, pa voe gwelet ar verc'hig o sevel hag o lavaret: « Me a jomo ganeoc'h, va mamm; pare oun? »

Ar vartoloded, mignoned Mikael an Nobletz, a zo bet ive meur a vech saveteet dre e zikour. E kreiz ar barrou-amzer e pedent Mikael d'o diwall, hag an avel, ar mor a golle o c'hounnar.

XXXVIII

Anaoudegez ar Vretoned evit Mikael an Nobletz

Eur pennad mat a zo abaoe 1652, abaoe m'eo maro Mikael an Nobletz, met n'eo ket ha ne vezo ket ankounac'haet gand ar Vretoned. Tud Breiz a gar enori, nann hepken o Sent koz, met ive an dud o deus, e doug ar c'hantvejou, grêt vad d'ezo.

Komzet hor beus eus ar chapel savet e Douarnenez da enori sant Mikael Arc'hel, patron Mikael an Nobletz. Ar chapel a zo koant, bras a-walc'h, furm eur groaz d'ezi: War eur maen e lenner ar geriou-man.

M^{re} HIE : Paillart : rect : de Ploaré.

Michel : Poullaouec : Fabrique : 1664.

Brao oa ar chapel, ha kalz skeudennou enni. Hirio e chom c'hoaz lod anezo.

Kalz tud a zo bet o pedi e chapel sant Mikael. Eus pep korn a Vreiz e tiredent, hag a-wechou d'ar pardon e veze betek dek mil den. An Tad Maner a veze alies oc'h ober ar pardonioù-ze. E 1664 e chomas epad miz mae penn da benn e Douarnenez. E 1665 e teuas adarre, hag endro d'ezan 40 misioner. Neuze eo e savas pardon sant Mikael. War e c'houlenn, an aotrou Louet, eskob Kemper, a roas 40 dervez induljansou da c'hounit, epad miz mae ha da bep meurs

eus ar bloaz, d'ar re a zeufe da bedi d'ar chapel, da gommunia, d'ar re a lakafe eun oferenn. — Ar pab Alexandr VII a roas eun induljans plenier da c'hounit d'ar zul kenta goude gouel Mikael.

E miz mae 1665, p'edo eno an Tad Maner gand e visionerien, e teuas d'ar chapel kant mil perc'hirin; c'houezek mil a reas eur gofesion jeneral, hag en eun dervez, da zul an Dreinded e voe 7.500 kommunion.

E Tremenac'h (Plougerne) e voe savet eur chapel all da zant Mikael Arc'hel e 1707, e kichen logig Mikael an Nobletz. Eur pardon bras ha kaer a vez eno d'ar zul diveza a viz gwenngolo hag eun all, en enor d'ar Galon Zakr, d'ar pempvet sul goude ar Pante-kost. Ar re o deus c'hoant da welet pardonioù santel, prosesionou kaer, n'o deus ken nemet mont da Blougerne.

Adsavet eo bet logig Mikael an Nobletz e amzer an aotrou Fave, person Plougerne. D'an 21 a vezeven 1891, e teuas an aotrou Lamarche, eskob Kemper, da venniga an ti nevez: *ti an aotrou Mikael an Nobletz*, hag e voe eur gouel bras meurbet. Kalz tud a ziredas, eus a bell zoken.

E Konk, chapel Itron Varia-ar-Wir-Zikour a zo atao en he zav, ha kalz tud a vez eno o pedi, e *ti Vikael an Nobletz*.

An iliz parrez e lec'h beza e Lokrist a zo breman e Konk, eun iliz nevez, bras ha kaer, a zo bet savet eno er bloaveziou 1856-58. Ar vered a zo atao e Lokrist.

XXXIX

Relegou Mikael an Nobletz

Skrid arched plomb
Mikael an Nobletz



Cy gist le corps de noble
et vénérable Messire Michel
Le Nobletz, d'heureuse mémoire,
en son vivant prestre et missionnaire
apostolique de la Basse-Bretagne,
lequel mourust au Conquet en odeur
de sainteté le 5 may 1652 âgé de 75
ans, et en l'année 1701 Monseigneur
Pierre le Nebou dee la brousse, eves-
ques et compte de Léon fist tirer ces
ossements du lieu où il avoit esté
enterré et les fist mettre en sa pré-
sence dans ce cercueil de plomb qui
fust ensuite poze souz un tombeau
de marbre que la piété des fidèles
avoit fait construire a l'honneur de
ce Saint Prestre le tout ayant
esté prealablement communi-
qué à la congrégation
des Rites

Er bloaz 1701, gand aotre eskob Kastell, dirag eun niver bras a destou, beleien ha tud lik, e voe tennet korf Mikael an Nobletz eus bez an aotrouned Hal-

gouet ha lakeet e bez aotrou Measrioual, e keur iliz Lokrist, e tu an Aviel. Varnan e voe lakeet ar bez marbr ker kaer a weler hirio e iliz Konk, varnan skeudenn Mikael daoulinet o pedi. An dra-ze a voe graet d'ar zul, 26 a vezeven 1701. O deus sinet: Ambroaz Gall, beleg; F. Koer, beleg; A. du Mescam; Anna de Kergroadez; Prigent Jozef Mikael de Kerveny; Visant de Keroullas; Gabriel Million; Eleonora Jorle-dan; Anna, ha Mac'harit du Mescam.


E 1855, d'ar bemp a viz kerzu, p'edod o sevel iliz nevez Konk, e voe digoret ar bez adarre araok kas ar relegou da Gonk. An aotrou Mercier, person sant Louiz, Brest; an aotrou Rivoalen, person Plougerne; an aotrou Le Roux, person Lokournan; an aotrou Daniel Miorcec de Kerdanet, alvokad, a voe karget eus al labour gand an aotrou Sergent, eskop Kemper.

N'edont ket heb enkreuz. Abaoe 1701 ez oa tremenet meur a vloaz. Ha chomet oa ar relegou el lec'h m'oant bet laket?

Dirak kalz testou, beleien ha tud lik, e voe digoret ar bez. Dindan ar marbr e voe kavet eun arched ploum, ha var an arched-se skeudenn ar misioner sebeliet. O kas kuit ar bouldrenn, e voe gellet lenn war an arched ar geriou-man: « Aman eo bet lakeet korf an aotrou Mikael an Nobletz, beleg ha misioner e Breiz-Izel, maro evel eur zant e Konk d'ar 5 a vae 1652, d'an oad a 75 bloaz. An aotrou Per Le Nevoux de la Brousse, eskop Kastell, a roas urz e 1701 da denna an eskern-man eus al lec'h m'oant bet da genta beziat, ha d'o lakaat en arched ploum-man dindan ar bez marbr savet evid enori ar beleg santel. Kemen-nadurez a zo bet kaset da Gongregasion al Lidou. »

Ar golo ploum a oa soudet mat var an arched, ha siellet e pep korn.

E gwirionez, n'oa ket da veza en entremar. Relegou Mikael an Nobletz a oa eno.



Bez Mikael an Nobletz
e iliz Konk-Leon

Met, ha n'oant ket deuet da veza poultr ha ludu? Rak skrivet eo: « Dalc'h sonj, den, out poultr, hag e tistroi e poultr. »

An testou o doa adarre eun tammig enkreuz o welet digeri an arched ploum. Met laouen o voent o welet ar pezh a jome eus ar c'horf: eur maread a eskern eus ar penn, an diou skoaz, an divrec'h, an divesker, an diou-groazell. Al lienenn m'oant bet dastumet enni, gwenn gwechall, a oa breman melen.

Ar relegou a voe a-nevez lakeet en arched ploum, hag a-nevez an arched a voe klozet, soudet ha siellet, kaset da genta da japel sant Kristof ha da c'houde d'an iliz nevez, pa voe peurc'hraet. Eno emaint dindan ar bez marbr.

XXXX

Prosez evit lakaat Mikael an Nobletz e renk an dud eürus

A-dreuz ar bloaveziou ar Vretoned o deus kendalc'het da gredi eo Mikael an Nobletz eur zant ha da gaout fizians ennan. E Douarnenez, e Konk, e Tremenac'h eo bet ato pedet.

En eul lizer d'an aotrou Kerdanet (3 ebrel 1832), skrivet gand an aotrou du Chatelier, heman a lavar petra rae, epad ar Revolution, kement bag nevez a vaze grêt e Douarnenez; en he beach kenta ez ae da steki ouz aotchou Konk, hag ar vartoloded, en eur vont, a gane kantikou en enor d'o misioner koz. E Konk, e c'houlennent e vennoz.

Kendalc'het en deus bete-vreman da skuilh grasou var dud Douarnenez hag ar re holl o deus e bedet.

Abalamour da-ze ez eus c'hoant e ve lakeet e renk an dud eürus.

E 1867, 130 beleg eus an eskopti, bodet e Kemper evid ar retred, a reas eur goulenn d'an aotrou 'n eskob Sergent, evit ma vefe grêt enklask var buhez, vertuziou ha burzudou servicher bras Doue, Mikael an Nobletz. Met n'ez eas an traou var araok nemet e 1888, en amzer an aotrou Lamarche, eskob. Neuze eo e voe hanvet barnerien an eskopti karget d'ober an enklask.

Epad daou vloaz e labourjont, o sellet piz ouz an holl skridou hag o selaou testeni ar re holl a anaveze eun dra bennak divarbenn Mikael an Nobletz. Eus a bep tu ar veleien, an dud lik a zeuas da ziskleria o doa atao klevet lavaret oa Mikael an Nobletz eur zant, en doa grêt hag a gendalc'he d'ober burzudou.

Er paperiou kaset da Roum e weler testeni an darn vrasa eus chaloned an eskopti, testeni personed Plougerne, Konk, Douarnenez ha re all. Gwelomp eul lodennig eus an traou diskleriet.

Setu aman petra lavar an aotrou Kervella, bet kure e Plougerne eun hanter-kant vloaz bennak. « Me a zo ganet er bloaz 1822; va zad a oa ganet e 1780. E glevet am eus meur a wech, p'oan bihan, o konta d'in oa kemeret Mikael an Nobletz evid eur zant gand an holl e Plougerne. Er c'hloerdi bihan, er c'hloerdi bras, er misionou, e kement lec'h m'oun bet, am eus ato klevet komz eus Mikael evel eus eur zant. » Hag e konte ar burzud-man, c'hoarvezet e Plougerne. « Eur paotr bihan, dek vloaz bennak d'ezan, en doa en em c'hloazet. E dad e gasas da gaout an aotrou Morvan, medesin Lannilis, a lavaras edo krog an tetanos ennan hag e teufe dizale ar maro d'ezan. Ar vamm a redas da feunteun Mikael Nobletz, e Tremenac'h, ha leun a fizians, a roas da eva d'ar c'hlan-vour eus an dour-ze. Ar paotr a bareas. Ar medesin a c'houlennas diganen eus e gelou divezatoc'h, hag a voe souezet o klevet oa pare, rak kredi a rae oa maro abaoe pell amzer. »

Araog an dra-ze, e Plougerne ive, Goulc'han Abguillerm, gloazet o koueza divar varc'h, bet o kaout meur a vedesin hep beza gwelloc'h, ne c'helle mui labourat. Ober a reas le da vont da bedi da japel sant

Mikael ha da gas eur gurunenn. Adaleg an deiz-ze e wellas ha dizale e c'hellas labourat.

Setu aman burzudou all kontet gand eur beleg eus Plougerne hag a zo beo c'hoaz: Eur paotr, Jakez ar Goff, ne c'helle ket bale ez vihan, en em lakeas raktal da vale e chapel Tremenac'h, en deiz ma voe kaset di gand e gerent.

Eur plac'h yaouank, Jozefin Bars, deuet da veza Leanez, a voe pareet eus eur gwall glenwed, oc'h eva dour kerc'het d'ezi eus feunteun Tremenac'h. Ar medesin, goulskoude, en doa diskleriet n'oa pare ebet eviti. Dre anaoudegez vat he deus kemeret an hano a Leanez Mikael-Mari.

An aotrou Lamour, person Konk, en deus ive roet da anaout meur a vuzud:

Yann Gendrot, pesketaer e Konk, a voe pareet e 1889 eus eur c'hlenved bras oc'h ober eun naved da Vikael an Nobletz.

E 1886, Louiza Podeur, he doa droug-sant, a voe pareet raktal o tont da bedi da vez Mikael an Nobletz. Dimezi a reas daou pe dri bloaz goude, ha ne gouezas mui.

Eur vaouez eus a Bloumoger, gwreg ar Maze, klanv bras hag a diie mervel dizale hervez daou vedesin, a c'houlennas digant Mikael an Nobletz ar c'hras da jom c'hoaz eiz vloaz var an douar evit gellout sevel he bugale a oa d'ar mare-ze re yaouank. He goulenn a voe roet d'ezi; sevel a reas he bugale, met eiz vloaz goude, deiz evit deiz, e varvas gand ar c'hlenved-se.

E Douarnenez Kristena Godec, intanvez Renot, a zisklerias ive beza bet grasou bras dre zikour Mikael an Nobletz: e 1891, 1892 he deus gwelet bugale d'ezi o para en eun doare vuzudus goude m'he doa pedet Mikael an Nobletz. Prometti a rae mont var droad

eus Douarnenez betek Konk e pelerinaj da bedi e kichen bez Mikael, hag e veze selaouet he fedennou.

E Enez Sun, d'ar 15 a eost 1899, eur paotr, Gwen-nole Miliner, tolet er mor gand eun all, a zistroas d'ar gêr glebiet holl hag a gouezas klanv. Warnez mervel edo, pa voe grêt evitan eun naved da Vikael an Nobletz. Kerkent e pareas.

Eus a bep tu e teuas tud da ziskleria o doa bet grasou bras goude pedi Mikael an Nobletz.

Ar varnerien karget eus ar prosez a zibabas ar pezh a gavent kaera, hag e 1891 oa prest an traou da gas da Roum.

D'ar 6 a ebrel 1897, ar Pab Leon XIII a roas aotre da gregi e prosez servicher *enorus* Doue, Mikael an Nobletz, beleg ha misioner.

An Iliz a gemer ato he amzer. Ober a ra enklask warlerc'h enklask, sellet a ra piz ouz pep tra, ha ne lavar he ger diveza nemet goude hir amzer a-wechou. Evit santez Jann d'Ark ez eus bet ranket labourat epad ouspenn 30 vloaz. Evit santez Tereza ar Mabig Jezus eo aet buan an traou, rak aman oa burzudou testeniet mat gant medesined, ha burzudou nevez c'hoarvezet.

N'eo ket a-walc'h diskleria en deus grêt Mikael an Nobletz burzudou. Roum a c'houlenn merkou skler, anat, testou gouizie. Burzudou Mikael an Nobletz a zo burzudou kaer meurbet, testeniet int bet gant tud poellek. Evelato n'eo ket a-walc'h evit Roum, ma ne vez ket testeni medesined da heul.

Petra zo d'ober? Setu aman: Pa vezo eur c'hlan-vour dare da vervel, dilezet gant ar vedesined, e erbedi ouz Mikael an Nobletz gant feiz ha fizians, ober evitan eun naved, eur pelerinaj da Dremenac'h pe da Konk pe da Zouarnenez, ha ma teu da barea, mont

raktal da c'houleun testeni ar vedesined o doa e welet.

Ha neuze, pedomp evit ma plijo gant Doue enori e zervicher santel. Anez ar bedenn ne c'heller netra. E 1913, Roum he deus diskleriet eo bet miret ar vertuziou gant Mikael an Nobletz en eun doare-dreist. Ar bazenn genta eo evit beza savet e renk an dud eürus.

Setu eta penaos eman an traou. Ar burzudou kin-niget da varnerien Roum evit prosez Mikael an Nobletz n'int ket bet kavet bras awalc'h, mat awalc'h. Ret eo kaout re all brasoc'h, testeniet mat gant medesined, ha Mikael an Nobletz a c'hello neuze beza lakeet e renk an dud eürus ha da c'houde, e renk ar zent, hag e vezo neuze levenez e Breiz ha goueliou kaer meurbet.

Met, ha goude ma vefemp maro araog an deiz-ze, e c'hellomp kredi eman Mikael uhel savet e gloar ar Baradoz. Den ne c'helfe niveri ar re holl a zo er Baradoz, met eun nebeut hepken a zo lakaet o hano gand an Iliz var Roll an dud eürus ha var Roll ar zent.

Dalc'homp koun ato eus ar c'henteliou en deus roet d'e genvroiz Mikael an Nobletz. Kerzomp dre an hent diskouezet gantan. Greomp fae var ar bed, e vadou, e blijadureziou. Deskomp hor c'hatekiz, hag hen deskomp d'ar vugale. Karomp ar retrejou, ar misionou, tennomp hor mad anezo. Dalc'homp d'hor feiz, hor brasa tenzor, difennomp hor feiz ouz mevelien an drouk-spered a glask he mouga, ha greomp gwella ma c'hellimp evit ma kendalc'ho da lugerni var hor bro sklerijenn an Aviel.



TAOLENN

PAJENN

I. Petra oa Breiz e fin ar c'houezekvet kantved.	7
II. Mikael an Nobletz.....	12
III. Er skol e Bourdel, Ajen.....	16
IV. Mikael an Nobletz beleget.....	21
V. Mikael oc'h ober pinijenn e Tremenac'h...	26
VI. Mikael en em laka da brezeg e Plougerne..	29
VII. Mikael a gendalc'h da labourat e Plougerne.	31
VIII. Mikael an Nobletz a laka e gerent var hent ar zantelez.....	34
IX. Mikael an Nobletz e Montroulez, e leandi sant Dominik.....	37
X. Mikael o prezeg e Montroulez hag e eskopti Treger	40
XI. Mikael e enezennou Eusa, Molenez, Baz..	45
XII. Mikael e Konk-Leon hag e Lok-Maze....	49
XIII. Mision Landerne 1613.....	56
XIV. Mikael e Kemper.....	60
XV. Misionou e Konk-Kerne, Pont-'n-Abad, Goyen	63
XVI. Ar misioner a ra eun dro er parrezioù war ar maez e Kerne.....	66
XVII. Misionou e Kap-Sizun hag e Enez-Sizun..	70
XVIII. Mikael an Nobletz e Douarnenez.....	77
XIX. Mac'harit an Nobletz e Douarnenez.....	85
XX. Petra a c'hell merc'hed a galon.....	89

PAJENN

XXI. An taolennou.....	92
XXII. Kantikou Mikael an Nobletz.....	96
XXIII. Mikael an Nobletz, tamallet e Kemper, en em zifenn gant nerz.....	99
XXIV. Mikael a gendalc'h da labourat e Douar- nenez	105
XXV. An Tad Kintin galvet da Zouarnenez gant Mikael	108
XXVI. Mikael a ra anaoudegez gand an Tad Maner	109
XXVII Mikael an Nobletz a zo roet urz d'ezan da gwitaat eskopti Kemper.....	111
XXVIII. Mikael an Nobletz e Konk-Leon.....	116
XXIX. An Tad Maner e Konk-Leon.....	122
XXX. Pedi a ra an Tad Maner da vont da Zouarnenez	126
XXXII. Mikael an Nobletz seizet.....	136
XXXI. Bloaveziou diveza Mikael an Nobletz..	131
XXXIII. Ar maro (5 a vae 1652).....	140
XXXIV. Burzudou goude ar maro.....	143
XXXV. An anterramant.....	146
XXXVI. Burzudou c'hoarvezet e Konk, Douar- nenez, etc.....	147
XXXVII. Burzudou e Tremenac'h (Plougerne).	157
XXXVIII. Anaoudegez ar Vretoned evit Mikael an Nobletz.....	161
XXXIX. Relegou Mikael an Nobletz.....	163
XL. Prosez evit lakaat Mikael an Nobletz e renk an dud eürus.....	166

BREST

Moulerez ar « C'hourrier », 4, ru ar C'hastell.

1929

